

УШКОЛ

KONTADENNOU KOZH TA NEVEZ  
 GANT  
 A. AR. C'HACVEZ

niverenn 4  
 rummad nevez  
 here 1958

# SKOL

NIVERENN 4 .

DU  
NOVEMBRE

1958

Dastumadenn

Drimiziek

Rener :

a Gelennouriezh.

Arm.Ar C'halvez

Ploueg-Ar-Mor .

Priz an niverenn : 200 lur

P.ar c'houmanant : 800 lur

Priz an niverenn-mañ : 600 lur

da gas d'ar c'hont-red post : Abbé A. Le Calvez, Rundavid, PLOUEZEC.

ROAZHON. 1911 06 .

e Breizh-Veur, kas an arc'hant da : Barclays Bank, LLANRWST, N.Wales.

war an anv : Le Calvez Armand.

Prix du numéro : 200 f. Abonnement annuel : 800 f.

## KONTA DENNOU

## KOZH HA NEVEZ

gant A. AR C'HALVEZ

### TAOLENN .

Raklavar	p. I / V
Kentelioù	p. I / 105
Stagadennoù	p. 106
Displegadurioù ar Verboù	p. 112
Taolennoù	p. 114

SKEUDENNOU

gant

Y. PERON.

Périodique inscrit à la Commission Paritaire des Papiers de Presse  
sous le numéro : 35 323 .

A B C D E F G H I J K  
 L M N O P Q R S T U  
 V W X Y Z    a b c d e f g h i j  
 k l m n o p q r s t u v w x y z

RAKLAVAR.

I. Alioù d'ar vistri.

1- Pal. Pal al levr-mañ a zo deskif d'ar vugale komz reizh o yezh, pinvidikaat o geriadur ha skrivañ en un doare dereat, meizus da vihanañ. Setu perak ez eus bet savet kement a boelladennoù-dre-gomz. Ret e vo zoken ober dre gomz da gentañ ar poelladennoù-dre-skrif, a zo bet renket diouzh o diaester, an hini gentañ o vezañ peurlvutañ an hini aesañ.

Klasket ez eus bet c'hoazh reñf d'ar skolidi un anaoudegezh vev eus ar yezh, lakaat an ober a-raok an displegañ. Da skouer, desket e vo dezho ober gant ar rakgerioù hag ar gourfengerioù a-raok reñf dezho displegadennou.

2- Lennadennoù. Spi an eus e plijo al lennadennoù d'ar vugale o vezañ ma 'z eus e pep hini un darvoud bennak. Met re verr ha re zibaot ez int, ha ret e vo lakaat etre daouarn ar skolidi levrioù dibabet e-touez embannadurioù " Ar Vuhez Kristen ", " Skridoù Breizh " hag " Al Liamm " :

- Ar Vuhez Kristen : " Sant Fransez, Mignon ar Vugale "
- Skridoù Breizh : " Alanig an Tri Roue "
- " Marvailhoù ar Vretoned ",
- " Lomnig ",
- " Labous ar Virionez ",
- " An Ti Satanazet "
- " Marvailhoù Loened "

Al Liamm : " Bisousig Kazh an Tevenn ",  
 " Tour ar Bleiz ",  
 " Ali-Baba hag an daou-ugent laer ". ( 1 )

3 - Ar Gerioù studiet. Studi un nebeut gerioù war-lerc'h pep lennadenn a skoazello ar skolidi d'intent gwelloc'h ar skrid, da binvidikaat o geriadur ha da sunañ gwech an amzer un tamm yezhadur hep poan.

4 - Ar Menozioù. Un dalvoudegezh vras a zo gant seurt poelladennoù graet dre gomz peogwir e tarbaront danvez ha gerioù. Tu a vo ivez, a vare da vare, d'o aozañ dre skrid en ur gustumiñ ar skolidi da sevel frazennoù berr a-walc'h ha klot. Evit ar re yaouankañ e c'hellou talvezout da "zanevell".

5 - Ar skeudennoù. Ar skeudennoù ne glotont ket bep tro gant ar skrid. " Felix Culpa ! ", a lavarfe Sant Augustin. " Fazi Eürus ! " Ar skolidi a vourro sur-mat o klask an diforc'hoù.

6 - Ar Yezhadur. Daoust d'al lec'h gouestlet d'ar yezhadur el levr n'eo ket, d'am meno, al lodenn-se an hini bouezusañ. Arabat faziñ war ar pal ! Ar poelladennoù a roio tro d'ar skolidi da skrivañ, ha da skrivañ reizhoc'h-reizhañ bemaiz. ( Siwazh ! n'eus ket c'hoazh a desteni-studi e Brezhoneg.)

7 - Ar Reizhskrivadur. N'eo ket bet dilezet evit-se ar reizhskrivadur. Fonetikel a-walc'h ez eo hon doare-skrivañ, ha, gant se, e tle dont aes gant ar skolidi. N'eus ket a reolennoù diaes evit al liester nag evit ar verboù evel e Galleg. An holl lizherennoù a vez distaget e Brezhoneg Lemnegel, da vihanañ, ha n'eus eta nemet en em harpañ war an distagadur d'ober.

Ret eo avat anzav o devo moarvat un tamm diaezmant gant an divvogalet, dibennoù ar verboù hag un nebeut heñvelsonioù. Ha c'hoazh un distagadur reizh ha resis, studiet e-pad ar bloavezhioù kentañ, a vo ur skoazell bras. E dibenn al levr a vo kavet un nebeut poelladennoù a gustumo ar skolidi da ziforc'hañ etre ar stummoù hag ar gerioù disheñvel.

8 - An Dielfennadur. N'eo ket bet heuilhet bep tro skouer al levrioù-skol gallek. Dalc'het ez eus bet kont eus ijin hor yezh, met, war dachenn an dielfennañ, da vihanañ, ez on chomet tost a-walc'h d'an doareoù, ha d'ar geriadur, implijet evit ar Galleg. E giz-se, e vo aasoc'h d'ar skolidi tremen eus eil yezh d'eben en ur studi hag a vez atav luziet a-walc'h evito.

Evit ar mare, arabat pouezañ re war an dielfennañ. Ar pep pouezusañ a zle chom ur yezh reizh, komzet fraez, ha pinvidik en he geriadur hag en he c'hevreadur, ha kement-se n'en deus ket kalz a dra d'ober gant an dielfennañ. Hag ouzhpenn, traoù 'zo a vefe kalz re ziaes evit bugale. A-wechoù, da skouer, n'ouzar ket peseurt niver na reizh reñf d'un anv : karotez, karotezenn.

9 - Kemmadurioù. Ne vo ket kavet amañ kentelioù hir diwar-benn ar c'hennadurioù. Kavet e vo avat poelladennoù-dre-gomz hag a roio tro da bleustriñ warno a-zevri-kaer.

( 1 ) E-touez al levrioù embannet betek-hen ( here 1958 ) gant "Engleo Breiz " n'eus hini ebet evit skolidi an oad-se.

10 - Ar Verboù. Studi ar verboù a vez frouezhus e pep yezh. Tro a ro ivez da bleustriñ war ar c'hevreadur.

11 - Ar Frazennoù. Erbediñ a ran en un doare ispisial ar frazennoù a c'houlenner sevel diwar patromoù roet er c'hentelioù. Dre ober ganto e vo lakaet e genoù ar skolidi ur yezh ouesk ha brezhonek an e c'hevreadur.

12 - Geriadur. Klasket ez eus bet darbar gerioù diwar-benn pep lodenn eus ar vuhez, ar vuhez a-vremañ evel just ! Buan e santo ar mestr-skol talvoudegezh ar c'hentelioù-traoù evit lakaat ar vugale d'anaout don ar bed krouet ha ster gwirion ha leun ar gerioù. Bez' ez eo un doare bev hag efedus da zeskiñ, ha da beuzeskiñ ur yezh.

13 - Ar Poentadur - Kavet e vo a-hed hag e dibenn al levr poelladennoù diwar-benn ar poentadur. Gwech an amzer e vo ret distreiñ warno. Arabat ankounac'haat ez eo diaes meizañ ur skrid poentet fall.

N'am eus ket studiet koulz lavarout ar virgulenn. Diaes eo da gelenn e gwirionez da skolidi ar c'hour krenn.

14 - ar c'henaozerezh-skridoù. N'eo ket bet studiet el levr ar c'henaozerezh. Kavet e vo testennoù da ziverrañ ha testennoù da zisplegañ. War an dachenn-se o ray sar mat ar skolidi o mad eus ar c'hentelioù a vo bet roet dezho e Galleg.

an diverradurioù, a bouchas gerioù ha menozioù, a vo deuet mat gant ar re yaouank hag ar re a vo skort o geriadur hag o faltazi. Rediñ a raint an holl da blegañ d'un nebeut reolennoù resis ha strizh a stummo war-un-dro o spered hag o fluenn.

Arabat avat gortoz re war an dachenn-mañ mar ne lakaer ket da gentañ ar skolidi da gomz ha da gomz, ha da lenn gant evezh ha plijadur al levrioù-skol hag oberennoù al levraoueg.

An doareoù-kelenn-se hepken a zigoro d'hor yezh dor an darempredoù, dre gomz ha dre skrid, hag a zegaso lennerien nevez d'ar c'helaouennoù ha d'al levrioù a embanner ben-deiz nuic'h-mui.

## II. Implij al levr.

15 - Ar Skolioù Divyezhek. Envel a ran " Skolioù divyezhek " ar skolioù a ro ul lec'h frank d'hor yezh. Aozet eo bet al levr-mañ evit bugale ar c'hour-krenn, dezho etre 8 ha 12 vloaz. N'eo ket bet graet eta evit deskiñ lenn da vrezhonegerien, nag evit deskiñ ar yezh d'ar c'hallegerien vihan. Ar re-mañ a vo ret dezho deskiñ kompren ha komz un tammig en ur stumm all. Ret e vo d'an holl bezañ barrek da lenn. Erbediñ a reomp war an dachenn-se : " Le Breton par l'Image " ha " Me a zesk Brezo-neg " gant V. Seite, hag al levrioù bihan skendenmet embannet " Al Liamm ". ( Dacu levrig brav a zo bet moulet ivez gant E. S. )

Goulenn a ran gouestlañ un eurvezh ben-deiz da stummañ un doare roll-labour evit ur sizhunvezh :

Lennadenn, studi ar gerioù, menozioù : 90 mn.  
Yezhadur, Verboù 45.2 : 90 mn.  
Divizoù d.w.b ar geriadur : 30 mn.  
Un danevell bennak : 30 mn.

- III - = 240 mn.

Pezh a raio 4 eurvezh ar sizhun, hep kontañ an danvezioù all - istor, douaroniezh, jederezh, kentelioù traoù, relijion - a c'hell bezañ kelennet dre ar Brezhoneg.

Pelloc'h e vo roet un daolenn eus ar pennadoù a vo studiet hepken e-doug an eil bloavezh. E meur a skol, moarvat, ne vo ket tu da zispartiañ skolidi ar c'hentañ bloavezh diouz ar re goshoc'h. An holl skolidi a c'hell heuliañ ar c'hentelioù penn-da-benn met ar re ampartañ hepken a vo goulennet diganto ober poelladennoù dre skrid.

16 - Skolioù Galleg. Lakaomp e c'hellont gouestlañ un eurvezh bep sizhun da studi ar yezh, setu ar pezh a erbedañ evit pep bloavezh :

1-añ bloavezh : lennadennoù, studi ar gerioù, menozioù, ar geriadur.

2-1 bloavezh : id. + ul lodenn eus ar verboù.

3-de bloavezh : id. + al lodenn aesañ eus ar yezhadur.

Fa vo bodet ar skolidi an hevelep klas e vo ret d'ar c'hell kont eus ar pezh am eus displeget uheloc'h. Dav eo, n'eus forzh penaos, lakaat anezho da skrivañ ul linenn bennak bep sizhun.

Un eurvezh a zo un tammig berr, ezhomm a veze eus div eurvezhiad evit ober labour frouezhus ha padus.

17 - Kourioù-klokaat, Skolioù-stre. En abeg d'allec'h diester a vez roet da studi hor yezh evit ar mare en holl skolioù, pe dost, e kredan start e c'hell al levr-mañ talvezout d'ar skolidi meneget a-us da brientañ arno - ar B.E.P.C. Setu amañ ar roll-labour a ginnigan :

1-añ bloavezh : lennadennoù, studi ar gerioù, menozioù, ar geriadur, ar verboù.

2-1 bloavezh : id. + ar yezhadur.

3-de bloavezh : al levr a-bezh.

4-vet bloavezh : adwelout al lodennoù diaesañ ha talvoudusañ, studi al lenngezh.

18 - Tiegezhioù : skol ar gêr. En ur aozañ al levr-mañ em eus sonjet dalc'hmat en tadoù hag ar mammoù n'int ket mistri-skol hag a fell dezho kelenn ar yezh d'o bugale en un doare poellek. En abeg dezho em eus savet ar c'hentelioù e stumm divizoù, goulennoù ha respontoù, e-giz ma tle bezañ pep displegadenn roet d'ar vugale yaouank.

Arabat avat lenn ar c'hentelioù dezho. Adskrivañ ar gerioù hag ar frazennoù da studiañ war un daolenn hag o lakaat da zizoleiñ darvoudoù ar yezh.

## III. Roll ar Pennadoù diaes.

19 - Setu amañ roll ar pennadoù a vo studiet hepken e-doug an eil hag an trede bloavezh :

Yezhadur. : pennad 20 : ar rannig-verb  
25 : ar c'halvadenn,  
an anv stag-ha-stag.  
27 : an islavarenn-stagañ,  
ar raganv-stagañ.  
28 : al lavarenn distag,  
an islavarenn-doareañ.  
30 : an estlammañ.  
32 : ar rakgerioù.  
33 : ar gourfengerioù.

- IV -

- 34 : ar rummadoù-gerioù.
- 35 : an heñvelsonioù.
- 36 : an hervelsonioù.

Verboù: pennad

- 17 : an amzer-da-zont-kent.
- 18 : an amzer-dremenet-kent.
- 25 : implij an anv-verb hag an anv-gwan-verb.
- 27 : dielfennadur ar verb.
- 31 : ar verboù skoazell.
- 33 : an amzerioù-bcaz.
- 34 : an amzerioù-lec'hiañ.
- 36 : gleviañ ha heuliañ.

IV. Kenlabour.

20 .Mankoù .Al levr-mañ a zo pell diouzh bezañ disi. En em vata-et em eus evel just eus ar peñh a oa bet graet gant hor yezhadurourien hag hor mistri-skol war dachenn ar c'helennerzh brezhonek, met biskoazh ne oa bet klasket aozañ ul labour ker klok evit ar skolioù izel. Pa vo moulet - spi am eus e vo kavet ur wech bennak arc'hant a-walc'h d'hen ober - e vo tu da adkempenn meur a bennad. Kement-se a garfen ober gant skoazell ar vistri hag ar gerent a implije al levr hag o devo ar vadelezh da skrivañ din. Goulenn a ran diganto lakaat pep svezhiadenn war ur folienn distag ha merkañ pajenn al levr hag an niverenn.

21 - Trugarez . Trugarekaat a ran ar skrivagnerien o deus roet din an aotre d'embann pennadoù tennet eus o oberoù; ar skeudennaouer, ken anpart dija daoust d'e yaouankiz, hag ar mouler.

Fellout a ra din c'hoazh trugarekaat an aotrou Klerg, person Bulien, en deus bet ar vadelezh vras da reizhañ ar stenkiloù. Ma 'z eus chomet ur fazi pe ur mank bennak war e lero'h, me eo a zo da damall. Pedin a ran ar vistri-skol d'am digareziñ en ur soñjal ez eo bet kaset al levr-mañ da benn e-kreiz diaezamantoù ar vuhez a anavezont mat.

Skol Sant-Erwan, PLOUEG-AR-MOR, 10 a viz du 1958.

*An. du Chabes*

LENNADENN 1 : YANNIG AR BUGEL DISENT.



1 - Un devezh, evel e tegonezh meur a wech, mamm Yannig a yeas d'ar marc'had. Lezel a reas er gêr he mab bihan, en ur lavarout dezhañ chom fur, e tegasje ganti madigoù eus ar marc'had.

- Ya, ya, mamm eme Yannig, me ' vo fur.  
Ya, met Yannig a zo bremañ e-unan. Naon a zeuas dezhañ, evel just.  
- Ma, emezañ, m'em bije graet krampouezh ivez, evel ma ra mamm a-vechoù.

2 - Setu Yannig o tapout ar billig war an tan, o lakaat amann e-barzh, hag o vont d'ar c'hav da dennañ sistr. Ne oa ket krog mat c'hoazh da dennañ sistr pa glevas an tan en amann e-barzh ar billig, hag en d'ar red d'an ti da lemel ar billig diwar an tan, hag o lezel digor pint ar varrikenn, hag ar sistr da redek. Pa addeu d'ar c'hav, e wel ar sistr skuilhet en-dro evel ur stank. B oa evel-se trist o welout ar sistr war an douar pa glevas ur yar o kanañ.

3 - Mat, eme Yannig, dozvet he deus ar yar velen. Greomp ur frite-denn vioù. Hag en da gemer ar vioù.  
- O va Doue, emezañ, ar yar a lavaro d'am mamm petra am eus graet.  
- Ve raio ket avat ! Redek a ra warlerc'h ar yar. Mouget eo raktal.  
- Bremañ, emezañ, ne lavaro netra d'am mamm. O va Doue, emezañ a-darre, ar yar velen a oa o c'horin. Petra ' lavaro mamm ? Na !  
Se ne ra netra ! Ma a yelo en he lec'h !  
Setu Yannig en e goazez war ar vioù. ( da heuilh )

## I. STUDI AR GERIOU.

- 1- Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet ( oc'h azezañ, kilhog, bombonoù, fact )
- 2 - Ar ger "goriñ". Penaos envel ur yarad evned? (ur c'horadenn) Da betra e servij ar c'horerezh ? Biz Yann a zo o c'horifiñ, ur gor en deus. Petra eo se ? Ar baraer a lavar: goret mat eo va forn. Displegit ster ar ger.
- 3 - Klaskit gerioù all stummet evel fritadenn ha grit frazennoù ganto. ( baleadenn, c'hoantadenn, c'hoariadenn, c'hoarzhadenn, selladenn, tommadenn, lipadenn, falladenn. )

## II. AR MENOZIOU.

- 1 - Petra a vo degaset da Yannig ma vez fur ?
- 2 - Perak eo bet skuilhet ar sistr ?
- 3 - Perak e fell da Yannig lazhañ ar yar velen ?
- 4 - Ha gwir eo ?

## III. YMHADUR : ar frazenn, ar gerioù, al lizherenneg.

- Kentel. 1 - ar frazenn. Lennit an 3 linenn gentañ. Pet frazenn ? Petra a gaver e deroù ar frazenn ? en dibenn ?
- 2 - ar gerioù. Lennit eil frazenn al lennadenn. Pet ger a zo enni ?
  - 3 - al lizherenneg. Klaskit ar gerioù enno ul lizherenn, div, teir, peder, pemp.

Pet lizherenn a zo e "dezhafñ, marc'had" ? ar ZH, ar CH, ar C'H a dalvez pep hini anezho evit ul lizherenn. Anvet int: divlizherennoù .

- 4 - Da skrivañ ar brezhoneg ez eus ezhomm eus 25 lizherenn: A B K D F G H CH C'H I Y J L M N O P R S T U V W Z . Distaget e vezont a, be, ke, de, e, fe, ge, ...

Ar gerioù estren e kaver teir lizherenn all na veont ket implijet en brezhoneg: C Q X .

Tu a zo ivez da heuilh an urzh etrevroadel ha d'implij distagadur ar gallag ennañ 26 lizherenn. An divlizherennoù CH C'H W ha ZH a vez anvet neuze che, ec'h, we ha zedhach.

Poelladennoù. 1 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur verkañ war-lerc'h pep frazenn pet ger a zo enni.

- 2 - Diskrivit ar pennad-mañ en ur lakaat ar poentoù hag ar penn-lizherennoù: ur vamm he doa prenet prun da ingalañ etre he bugale goude pred o lakaat he doa war un asied ar yaouankañ eus ar vugale n'en doa biskoazh tañvaet a brun mont-dont a rae di-baouez en-dro dezho hag o c'hweza. ( "Me a Lenno", p.30 )
- 3 - Reizhskrivadenn: dilinennad 2. Teurel evezh ouzh: amann, e-barzh, en, skuilhet, evel-se.

## IV. AR VREBOU: menoz ar verb, amzer-vremañ dibersonel.

Kentel . 1 - "Setu Yannig o tapout ar billig war an tan, o lakaat amann e-barzh, hag o vont d'ar c'hav da den-nañ sistr". Klaskit ar gerioù a zispleg deomp petra a ra Yannig. Ar gerioù a zispleg petra a reer a vez anvet verboù.

- 2 - Klaskit ar verboù en dilinennad 2.
- 3 - Ar yar a lavaras d'am mamm. Ar yar a lavar d'am mamm. Ar yar a lavaro d'am mamm.

Lakaomp: dec'h, bremañ, arc'hoazh.  
Dec'h e lavaras ar yar d'am mamm.  
Bremañ e lavar ar yar d'am mamm.  
-2- Arc'hoazh e lavaro ar yar d'am mamm.

Dec'h a zo an amzer-dremenet; bremañ, an amzer-vremañ; arc'hoazh, an amzer-da-zont.

- 4 - Lakait ar frazenn-mañ en teir amzer studiet: Ne oa ket krog mat c'hoazh da dennañ ar sistr pa glevas an tan en amann .
- 5 - an amzer-vremañ.

verb kaout: me an eus riv, ni hon eus riv,  
te ac'h eus riv, c'hwi hoc'h eus riv,  
ef en deus riv, i o deus riv,  
hi he deus riv,

verb bezañ: me a zo sentus .... verb hadañ: me a had ed...  
verb mont: me a ya d'ar gêr... verb gouzout: me a oar keginañ.  
verb ober: me a ra kafe.

Poelladennoù. Displegit ar verboù-mañ en amzer-vremañ :  
4 - kaout tomm 5 - bezañ sentus, hadañ gwinizh .  
6 - mont mat, gouzout labourat, ober soubenn.

## V. AR GHIADUR : an ti.

Kentel . 1 - Diskouezit e-barzh ar c'hlas an traoù-mañ: ar voger, an oaled, an dumenn, al leur-di, ar sel pe an doubl, ar speurenn, ar prenest, al lomber, mudurunoù an nor, ar stalaf, ar grogen, ar botailh, an alc'houez, ar morailh, ar c'hloc'h, an treuzoù, an diri, ar renk-ti.

- 2 - Ti Yannig a zo kozh; hini Erwan a zo nevez. Dibabit an anvioù-gwan a zere ouzh pep hini anezho: bras, don, kreñv, e ratre vat, e stad fall, aes, klet, kempenn, tomm, sec'h, savet direizh, yen, gieb.
- 3 - Anvit an doareoù ti disheñvel a anavezit. O renkit an ur gre-giñ gant an hini disterañ: kastell, ti-soul, foukenn, palez, maner, kenkiz.

Pelec'h hoc'h eus gwelst skouerioù anezho ?  
4 - Anvit ar pezhioù a gaver en un ti nevez modern, ha displegit da betra e servij pep hini anezho: kegin, adkegin, sal - debriñ, kambr-gouket, sal-dégemer, trepas, kambr-emwalc'h, pri-vezoù, grignol, solier, kav mañsardenn.  
5 - Gant an anvioù hag ar verboù-mañ savit frazennoù en amzer-vremañ. De skouer: an embreger a sav an ti nevez gant mein ha brikennoù.

An embreger, ar vañsonerien, an darbarer, ar c'halvez, ar penter, ar mengleuzier, an toer, mein, brikennoù, simant, planchod, skalier, koadaj, toenn, sklent, ar wihenn, ar c'haod-dour, grouan, traezh, mein-benerezh, mengleuz, mein-greunek, dissez, rektres, ober, sevel, livañ, paperañ, heskennat, toullañ, benañ, ter-rif, faoutañ.

Poelladennoù. 7 - Savit 5 frazenn gant gerioù niverenn 5 ar gent

- 8 - Danevell. Va zi nevez.  
Un ti nevez a zo bet savet en ho kichen. Danevellit e istor.

LENNADENN 2 : YANNIG AR BUGEAL DISKENT ( kendalc'h )

1 - Pa savas ac'hane, avat, en devoe graet ur fritadenn ha staget ouzh foñs e vragoù.

- O va Doue, bremañ avat e ouezo mamm, eme Yannig nec'het, ha penaos e rin ?  
Kerkent e teu da soñj dezhañ penaos ar pemoc'h a oa er c'hraou a blij vidoù dezhañ, rak gwelst en devoa anezhañ o tebrif vidoù, pa vezent taolet er porzh. Lemel a ra eta e vragoù hag ez a da graou ar pemoc'h da reiñ e vragoù dezhañ da lipat.

2 - Ar pemoc'h, evit gwir, a blije dezhañ vidoù, met ne ouie ket lipat vidoù diwar ar bragoù. Ha setu e tebras ivez ar bragoù, vidoù hag all. Kaer en devoe Yannig esasañ stourm, ar pemoc'h a zebbras hep kaout mezh o welout Yannig divragoù.

Setu Yannig nec'hetoc'h eget biskoazh. Koulz ar vamm da erruout er gêr a dostae, ha penaos kuzhat outi ar sell eus Yannig divragoù. Ret e vije goude diskuliañ an traoù all.

3 - Pa zegouezhas er gêr, e voe mantret o welout holl droioù Yannig. Ne lavaras kalz tra, rak ar vamm a zo tener hag a ankounac'h a prim. Met va c'hredidiñ a c'hellit, Yannig n'en devo ken a c'hoant da ober krampouezh. ( "Marvailhoù ar Vretoned", p.p.47/8 )

I. STADI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet (glac'haret, dezrevell, koach, derec'hel penn, porc'hell, e vragez, ac'hano )

2 - Penaos eo stummet ar ger " pemoc'h "? Klaskit anvioù-loened o kregiñ gant ar ger penn: penn-kezeg, penn-saout, penn-chatal, penn-gwazi, penn-meot, penn-defved (ha penn-dañvad ).

3 - Daoust hag ez anavezit anvioù all o kregiñ gant " penn " ? : evn penn-kazh, pennpec'hed, emn-skañv, pennek, penhaouiñ, penn-va-zed-kozh, penngamm, pennglaou .

4 - Petra eo ober un dra bennak dreist penn-biz ? ( moc'hañ ).

II. AR MENOZIOU.

1 - Perak e ro Yannig e vragoù d'ar pemoc'h da lipat ?

2 - Petra a c'hoarvezas ?

3 - Perak n'en dos ket ar pemoc'h a vezh ?

4 - Perak ne lavaras ket mamm Yannig kalz tra ?

III. V ZHADUR: ar silabemoù, ar vogalennoù, ar c'hensonennoù.

Kentel . 1 - Lennit ar frazenn gentañ . Pet gwech hoc'h eus digoret ho kenou evit distagañ : pa , ha, ouzh ; savas, staget, vragoù ; ac'hane, fritadenn ?

Bez'ez eus gerioù a 1, 2, 3, 4 silabenn.

2 - Perak ur varrennig-stagañ er ger "penaos" ? Penaos troc'hañ ar gerioù pa vez ret dilinennañ ?

3 - " Pa savas ac'hane, avat, en devoe graet ur fritadenn " .

Klaskit al lizherennoù a zistager en c-unan : a e i o u . a e i o u a vez anvet vogalennoù ; al lizherennoù all a vez anvet kensonennoù .

4 - Lavarit peseurt vogalennoù ha peseurt kensonennoù a zo e pep ger eus ar frazenn-se.

5 - Ar gerioù a vez rannet e silabemoù. Al lizherennoù a e i o u, hag a vez distaget en c-unan, a vez anvet vogalennoù. Al lizherennoù all a vez anvet kensonennoù .

Poelladennoù . 9 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur verkañ war-lerc'h pep frazenn pet ger a zo enni.

10 - Lennit frazenn gentañ an dilinennad 2. Skrivit war ul li - nenn eus ho kaier ar gerioù unsilabennek, ha war ul linenn all ar gerioù divsilabennek.

11 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur zispartiañ pep silabenn gant ur varrennig-stagañ. Da skouer: ar pe-moc'h e-vit gwir...  
12 - Reizhskrivadenn: dilinennad 2. Teurel evezh ouzh: pemoc'h, esacañ, nec'hetoc'h, kaer.

IV. AR VERBOU : amzer-vremañ personel.

1 - Kemeromp ar verb " bezañ sentus ". Lakaomp " sentus " da gentañ ha displegomp ar verb :

sentus ez on, sentus ez out, sentus ez eo,  
sentus ez omp, sentus ez oc'h, sentus ez int,  
sentus ez oar pe ez sur .

2 - Grepomp heñvel gant

hadañ ed : ed a hadan, ed a hadez, ed a had, ed a hadomp, ed a hadit, ed a hadont, ed a hader.

m ont d'ar gêr: d'ar gêr ez an, d'ar gêr ez ez, d'ar gêr ez a, d'ar gêr ez omp, d'ar gêr ez it, ez eont, ez er.

3 - Displegomp ar verboù -mañ :

ar mestr a lavar ez on sentus.  
Peogwir eo prest an douar e hadan ed.  
Pa vez echu ar skol ez an raktal d'ar gêr.

( evezhiadenn diwar-benn ar verb bezañ : ar stumm " a zo " a vez implijet en displegadur dibersonel, hag " ez eo " en displegadur personel . )

Poelladennoù . 13 - Displegit ar verboù-mañ: doujus ez on, kerc'h a hadan, d'an iliz ez an .

14 - Displegit verboù niverenn 3 ar gentel.

V. AR GERIADUR: an adteuz.

Kentel . 1 - Gant Petra e vez klozet ar porzh ? : moger, porras-tell, ksel, kleuz, kloued .

2 - Anvit al lojeiz a gaver er porzh: an ti-laezh, an ti-kauneud, an ti-kouez, ar marchosi, ar c'hraou-saout, ar c'hraou-moc'h, ar c'houldri, ar porzh-yez, ar c'harrdi.

3 - Eus pelec'h e teu an douar d'an ti ? : ar puis, ar feunteun, ar riboul, ar servij dour-red, ar puis-glav.

4 - Displegit peseurt diforc'h a zo etre ar gerioù-mañ:

an nor, an nor-borzh, an traped, an draf.  
( dor-borzh: dor evit ar c'hirri; traped: dor izel; draf: dor vihan-kenañ evit komz, en ti-post, da skouer. )

5 - Klaskit an diforc'h a zo etre : serriñ, digeriñ, prenañ, alc'houezañ, morailhañ ( krouilhañ ).

6 - Klaskit gerioù all evit sevel d'an nec'h: mont war laez, mont e-krec'h, pignat; diskenn: mont d'an traoù.

7 - Klaskit an diforc'h a zo etre : lojañ ha dilojañ ; amezañ ha diamezañ .

Poelladennoù. 15 - Displegit ar frazennoù -mañ en amzer-vremañ:  
ar c'harr-si a alc'houszan,  
an nor-borzh a vorailhan.

16 - Un dro-gamm.Danevellit un dro-gamm bennak c'hoariet pe  
c'hoarvezet gantoc'h pa oac'h en hoc'h-unan er gêr.

( kendalc'h ar bajenn 11 )

- 3 - Peseurt diforc'h a zo etre ur c'hleñved-red hag ur c'hleñ-  
ved stagus ? Anvit kleñvedoù stagus:ar ruzell,an drev (pa-z-yud).
- 4 - Daoust hag ez anavezit kleñvedoù-red rouez a-walc'h bremañ;  
ar vrec'h,ar voenn,ak lorguez,
- 5 - Anvit an dud a ra war-dro ar yec'hed ha displegit war-dro  
petra e reont:medisin (mezeg),surjian,medisin-daculagad,dent-  
tour,(medisin-dent),ar c'hlanvidour ( ar glañvidioure ) ,an  
apotiker,al louzaouer,ar marc'hadour-lunedoù,ar radiologour.
- 6 - Pa vez rouet deoc'h ur c'hennadur ( un ordrenañ ) e vez  
warnañ a bep seurt louzoù,perc ? kachedoù,moustradoù,dour-  
louzoù,poultr,graunigoù,boulouigoù.
- 7 - Klaskit an diforc'h a zo etre:gor,gor-hesked,beskoul,tam-  
jenn;gouli ( gloaz),brondaadur,trouskenn,kleizhenn.  
( taolit evezh ouzh implij ar poent-virgulenn er  
frazenn uheloc'h.)
- 8 - Peseurt diforc'h a zo etre klañv ha klañvidik ?  
Klaskit daou c'her all evit klañvidik:klañvus ha klañv-di-  
glañv.

Poelladennoù. 30 - Klokait an destenn-mañ gant gerioù tonnet  
eus ar gentel.

Yann a zo ... a-walc'h.Bep sizhun e chom en e wele gant ur  
..... bennak:..... pe ur .....Ar .....he zeu ket bep tro.  
E vamm a bren.....e ti an .....

En deiz all ez eo bet  
tizhet Erwanig er skol.Un taol-dorn en deus tapet war e .....  
E .....a wade,e.....a oa .....Ar nestr en deus louza-  
ouet ar.....

- 31 - Dibabit unan eus an div zanevell-mañ :  
a ) Ur weladenn e ti ar medisin.  
b ) Klañv ez oc'h bet.Displegit petra a oa ho kleñved ha  
penaos ez oc'h bet louzaouet.



1 - Yann en deus graet un hunvre hag eo gantañ gwall nec'het.  
Dre va c'houk,emezañ,em eus gwelot pevar razh.Unan a oa lart  
evel toazh,flour e groc'hen evel hini ur c'hoz.Iaou all a oa,  
hag i moan ha kastiz,ken na oa nemet an eskern anezho.Un dru-  
ez e oa gwelout kement a razhed.Daoust petra a c'hoarvezo ga-  
nin ? Petra ' soñjez a se Marijan ?

2 - Marijan a oa ken nec'het hag ha gwaz.Ne gave penn ebet d'ar  
gudenn-se.Galvet e voe Jobig,ar mab,a oa nevez graet gantañ e  
Bask,ha kontet dirazañ an hunvra.

- Va zad,eme ar paotrig,me a oar petra eo ar pevar razh.Ar razh  
lart evel an toazh ha flour e vlev evel ur c'hoz eo Fañch,ostiz  
traoù ar bourk,an hini ma kasit dezhañ bemdez hoc'h arc'hant.  
An daou razh kastiz,poan dezho o fitval, eo mamm ha me,divoue-  
det gant ar razh lart,hag ar razh dall eo c'hwi,va zad,pa ne  
welit ket an droug a rit !

3 - Yann estlammat gant kement a furnez,a lavaras:  
- Didallet on bremañ.N'eo ket me a lardo ken Fañch !  
Hag hervez an istor,ar penh en devoa lavaret a reas.

( "Marvailhoù ar Vrotoned",p.p.51:52 )

#### I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet.( dous,  
soazhet,treut ,afer )





LENNADENN 4 : AL LUNEDOÙ.

1 - Bremañ 'z eus tri-ugent vloaz, pa oa yaouank Fant, ne dae ket kalz a vugale d'ar skol, ha setu perak ar paour kaezh plac'h ne oar ket lenn. An dra-mañ a gav parv.  
- An disterañ tamm bugel, emezi dezhi hec'h-unan, a zo desketoc'h egedon. An holl dud a oar ar c'helleier, dre ma ouzont lenn ar c'ha-gziennoù. Arsa ! erru on skuizh o vezañ ar vrasañ genaouegezh eus ar c'hanton ! Me a ya da vont da bremañ ul lunedoù da di Per-rig ar C'hwil.

2 - En deiz war-lerc'h ma oa deuet ar c'hoant fentus-se e penh Fant gozh ar wiaderezh, hag hi da redek eus an til neizh d'egile da glask un dousen viou evit prenañ lunedoù. P'he deus dastumet daouzek gwenn ha tomm, e lavar da Job dresañ dezhi he c'hoef war he fenn hag eñnañ dezhi he mouchour war he choug. Goude bezañ lakaet un davañjer fresk, stad enni gant he fanerad viou war he brec'h setu hon hini gozh war hent ar bourk. Meur a soñj a zeuas e spered Fant.

3 - Pegen gouezhet, emezi, en em gavo, va faotr kozh, emberr, pa glevo ac'hanon o lenn dezhañ buhez an Aotrou Sant Erwan, pe hini Sant Jozep e baeron ! Sur a-walc'h en devo c'hoant da gaout ivez ul lunedoù. Hag ur gazetenn bep sul !... Nag a joa !... Pemp gwenneg ar sul a gouste din, sur, ar gazetenn-se, met n'eus forzh; me a lakaio pemp gwennegad butun nebeutoc'h em fri !... Pegen berr e kavin an amzer bremañ d'ar sul, pa vin plac'h ar gêr !... Na brav eo gouzout lenn !

( da henvilh )

I . STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet . (patron, kriz, saouzanet, kein, kelaouennoù, nevezintioù)
- 2 - Peseurt labour a ra ar wiaderezh kozh ? Daoust ha bez' ez eus c'hoazh gwiaaderien dre ar vro evel gwechall ? Anavezout a rit loened bihan hag a zo mat da wiadiñ ? Petra a reont ? ( kevnid, gwiad-kevnid )
- 3 - Pet gwenneg a zo ezhomm evit ober ul lur ? 20 gwenneg . Piv a anavez un anv evit pemp gwenneg ? ur real. Pet real a a zo ezhomm evit ober ul lur ? 4 real.
- 4 - Klaskit gerioù stummet evel gwennegad: ur voutailhad, ur volennad, ur worenad.
- 5 - Peseurt kemma a zo etre ur voutailh-win hag ur voutailhad-win ?

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak ne oar ket Fant lenn ?
- 2 - Perak e fell dezhi prenañ lunedoù ?
- 3 - Pensaos e kav an arc'hant he deus ezhomm ?
- 4 - Peseurt dilhad a wisk evit bezañ kaer ?
- 5 - Perak e fell da Fant deskiñ lenn ?
- 6 - Pensaos ez esperno Fant arc'hant a-walc'h evit prenañ ur gazetenn ?

III AR YEZHADUR : menez ar c'hemmadur.

Kentel . 1 - Lennit an dilinennad 2 en ur lakaat Job e-lec'h Fant ha grit ar c'hemmadur a vo ret. ( Job kozh ar gwia-der, hag eñ, en deus, da Fant, dezhañ, e goef, e benn, dezhañ, e vouchou-er, e choug, ennañ, e banerad, e vree'h, hon hini kozh )  
2 - Job, hag a zo ur paotr, a zo un anv gwregel.  
3 - Lakait ar ger "mat", pe "vrav", warlerc'h an anvioù-mañ:  
ur paotr mat, brav, ur vrec'h vat, vrav,  
ur c'hi mat, brav, ur giez vat, vrav,  
un ti mat, brav, ur gegin vat, vrav .  
An anv-gwan mat, pe brav, a gemm goude un anv gwregel.  
4 - An anvioù paotred a vez gourel. An anvioù marc'hed a vez gwregel. Evit gouzout reizh an anvioù all ez eo ret lakaat mat pe brav war o lerc'h. Ma 'z eus ur c'hemmadur ez eo gwregel an anv.

Poentadur . 5 - E meur a lec'h e lannadenn e kaver ar virgu-lenn-grec'h ( ' ) ; kila-skit e-lec'h peseurt lizhe-kennoù eo bet lakaet bep tro.

Perak e skriver c'h gant ur virgulenn-grec'h ?

Poelladennoù . 25 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur islinen- nañ ur wech an anvioù tud; div wech an anvioù traoù.

26 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur lakaat Job e-lec'h Fant.  
27 - Dilinennad 2. Teurel evezh ouz: war-lerc'h, dousen, daouzek, eñnañ, lakaat, he c'hoef, un davañjer, brec'h.

IV. AR VERBOU: amzer-da-zont dibersonel .


- 1 - E peseurt amzer e komz Fant en dilinennad 3 ?
- 2 - verb kaout: me am bo lunedoù, te az po, eñ en devo, hi he devo, ni hor bo lunedoù, c'hwi ho po, i o devo.  
verb bezañ: me a vo yac'h verb hadañ: me a hado ar park  
verb mont: me a yelo, verb gouzout: me a ouezo ar c'hleñved.  
verb ober: me a ray ur palastr, pe me a raio ur palastr.

Poelladennoù : 28 - Displegit ar verboù-mañ en amzer-da-zont : kaout ur yac'hed mat, bezañ kreñv, selaou ar medisin, mont da di an apotiker, gouzout an hent, ober well.  
29 - Lakait an dilinennad 3 eus al lennadenn en amzer-vremañ.

V. AR G'RIADUR : korf an den, ar c'hleñvedoù.

Kentel . 1 - Diskouezit lodennoù pennañ ho korf: penn, kitemn, kilpenn, tal, blv, dremm daoulagad, diskouarn, divjod, (divoc'h), fri, giweuz (muzelloù), karvan, sigez (groñj).  
Izili, skoaz, brec'h, ar vrec'h, arzorn, dorn, biz, ivin, lez, morshed, reskennoù, gien, gar, troad, ufern (ibil-troad)  
korf bras, bruched, skovent, kalon,  
korf, kreuz ( stomok ), avu, bouzelloù, lounezh ( l. lounezhi ).  
2 - Klaskit kleñvedoù ar penn: sifern, poan-benn, pennsac'h...  
ar c'horf-bras: paz, par-yud, taol-gwad,  
ar c'horf: red-korf, start-korf, tani-jenn-breñvonn.  
an izili: remm, saizi, gwashied gros, droug an urlou.

( kendalc'h ar gentel-mañ war ar bajenn 6 )



1 - Pa eo erru Fant er bourk,hag hi da di ar Bistouler da wer - zhañ he vioù.Pemzek lur a douch evito.  
- Trawalc'h evit prenañ ur brav a lunedoù !  
Kement a hast he deus d'o c'haout ken ez a d'ar red eus ti ar marc'hadour vioù da weiout Pêrig ar C'hwil,ur paotr a c'honeze e vara oc'h adwerzhañ kozh traoù.

2 - Ac'hanta ,Fant,erru oac'h ?  
- Ya va faotr,erru oan.Penaos emañ ar bed ganit ?  
- Mat sur,mat sur,a c'hras Doue ! azezit aze,war ar chipod-holen. Petra ' zo ezhomm ?  
- Va feiz,Pêrig,me ' fell din kaout ul lunedoù .  
- Mat,mat,bez' em eus lunedoù trawalc'h evit lakaat war gement fri a zo er c'hanton,hag ouzhpenn c'hoazh.Sed,deuit da zibab ar re a blijo deoc'h ar gwellañ.

3 - Pa vez kalz a draoù da zibab e vezer nec'het, ha Fant a oa bet ur pennad o pavata ar c'hozh lunedoù e-raok kaout ur re di-ouzh he c'hoant.A-benn ar fin,memes tra,e lavaras:  
- Ar re-mañ o deus gwer sklaer hag a yafe ganin a-walc'h.Pege-ment e kousfent din ?  
- Me am eus paecet anezho pemzek lur,met pa 'z eo c'hwil eo,ho po anezho evit ar pezh....

4 - Feiz vat,ker a-walc'h eo c'hoazh.Hag un tammig boest da la-kaet anezho out barrek a-walc'h da reiñ din c'hoazh war ar mar-c'had ?  
- Arsa ! deomp 'ta.Kasit anezho ganeoc'h .  
Fant a zo stad enni. Un devezh mat he deus graet.Setu-hi bet dezhi ul lunedoù.

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet en destenn.  
( lorc'h enni,en ur c'haloupat,da choaz ,pod-holen,gouest, chalet )
- 2 - Petra a ra Fant evit dibab al lunedoù ? Petra eo ur pavad ?  
Diskouezit ho pavioù .  
Klaskit gerioù stummet evel pavata :marc'hata,skouarniata, dornata,brec'hata (briata).
- 3 - Anvit ur vleuvenn vihan velen dezhi un anv stummet gant ar ger pav : pavbran;un anv-tiegezh : Pavgamm .  
Petra eo un den pavgamm ?

II . AR MEMOZIOU.

- 1 - Penaos e c'honez Pêrig ar C'hwil e vuhes ?
- 2 - Daoust ha gouzout a ra Fant dibab lunedoù ? Perak ?
- 3 - Perak ez eo laouen Fant ?
- 4 - Peseurt frazenn a ziskouez mat emañ e ti ur marc'hadour kozh traoù ?

III . AR YEZHADUR : an niver.

Kentel . 1 - Kemeromp ar gerioù-mañ e-barzh al lennadenn:  
ur vi, fri, paotr, marc'hadour.

Petra a lavarer pa vez meur a hini ? vioù , frioù,paotred, marc'hadourien.

Vi,fri,paotr,marc'hadour a zo gerioù unan;  
vioù,frioù,paotred,marc'hadourien a zo gerioù lies.  
2 - Klaskit liesterioù ar gerioù-mañ : den,ki,buoc'h .  
den,tud buoc'h,saout ki,chas ( koun ).  
Tud,saout,chas a zo liesterioù direizh.

3 - Evit stummañ al liester ez implijet dreist-holl an dibennoù -où, -ed, -ien .An dibenn -où a vez implijet dre vras evit an traoù;an dibennoù -ed hag -ien evit an dud hag al loened.  
Kalz a zibennoù all a vez implijet ha bez' ez eus ivez liesterioù direizh-tre evel ,tud,saout,chas.

Poelladennoù. 52 - Diskrivit an dilinennad 3 hag islinennit an anvioù traoù.

33 - Lakait ar poentoù hag ar pennlizherennoù.  
Na c'hwec e oa c'hoari e-mesk ar bleunioù ar c'hizhier bihan a reas ar c'hoari koukoug a-dreñv ar gwez tev ,hag ar c'hoari patati ober a rejont da c'houde un tamm ehan war al le-ton pa voe tost dezho mont en-dro d'an ti,e voent strafuilhet holl

( "Me a Lenno", p.102 )

34 - reizhskrivadenn: dilinennad 3. (sklaer,kousfent,paecet) .

IV. AR VERBOU: amzer-da-zont personel.

1 - lisplegomp ar verb bezañ yac'h ha lakaomp arc'hoazh da gen-tañ: arc'hoazh e vin yac'h, arc'hoazh e vimp yac'h,  
e vi e viot.  
e vo e vint e vior

2 - Greomp heñvel gant "hadañ ha mont":  
hadañ: er park e hadin, e hadi, e hado,  
 e hadimp, e hadot, e hadint, e hador.  
mont : da di an apotiker ez in, ez i, ez ay (ez aio)  
 ez aimp, ez sot, ez aint, ez eor .

3 - Displegomp ar verboù-mañ:  
 Pa vin bras, ez in d'ar skol vicherel, hag e labourin kalz.

Poelladennoù. 35 - Displegit ar verboù-mañ:  
 Hiviziken e vin aketus . Hiviziken e sentin diouzhtu.  
 Bemdeiz ez in resis d'ar skol.

36 - Displegit dre skrid niverenn 3 ar gentel.

Evezhiadenn diwar-benn ar verb mont: yelo, aio, ay.

Pa vez ar rener da gentañ, da lavarout eo pa implijer an disple-  
 dur dibersonel e reer gant yelo : me a yelo d'ar gêr.

En displegadur personel ez implijer hini pe hini eus an daou  
 stumm-mañ aio, ay : D'ar gêr ez ay d'ar gêr ez aio.

V. AR GERIADUR : ar skol.

Kentel . 1 - Anvit an diankachoù-skol ha displegit petra a rit  
 gant pep hini anezho : kaier ( kaier-skol, kaier-ar-gêr,  
 kaier-brouilhoñs ) paper-splu, boest-plu, reolenn, goumenn, kreion,  
 kreion-du, kreion-liv, kreion-big ( kreion amerikan ), doug-pluenn,  
 kelc'hier, doublekimetr, skouer, sac'h-skol, levr ....  
 Skrivañ, tresañ, linennañ, islinennañ, muzuliañ, diverkañ,  
 sec'hañ.....

2 - Anvit ar rebeuri ar skol : taol, bank, ( skaoñ, skifvier ), ska-  
 bell (skebell), pod-liv, burev, kador, taolenn (du pe wer), torch,  
 ar wialenn, kartennoù, ar velleñ (sifer), al levraoueg, armel an  
 diankachoù, ar muze, kleiz...

Poelladennoù. 37 - Displegit an daou verb-mañ:  
 Bemdeiz e skrivin sketus-tre.  
 Al levrioù a lennin gant evezh.

38 - Klokait an destenn-mañ.  
 Yann en deus bet ur ....digant e vaeronez. Talvoudus-  
 tre eo. Daou solieradur a zo ennañ. En hini uhelañ e lak ....  
 hag e .....; en hini izelañ e ..... hag e ..... Atav e vez  
 klozet mat ha renket aketus en ..... N'en deus ket gallet avat  
 serriñ e-barzh e ..... nag e ..... re hir e cant; nag e ..... dre  
 ma oa re ledan. A-wechoù ez a gentañ d'ar gêr en e .....

39 - Ur c'heneil en deus kuzhet ouzhoc'h ho sac'h-skol.  
 Displegit pegement ez oc'h bet nec'het, perak, ha petra a zo bet  
 c'hoarvezet.

## LENNADENN 6 : AL LUNEDOU (kendalc'h ha diwezh).

1 - Pa 'z eo erru ar gêr, e hast buan ober he zammig labour, ha  
 goude se, e klask e fons he fres levr "Buhez ar Sent".  
 - Peseurt ezhomm ac'h eus eus "Buhez ar Sent" ? N'ouzon ket  
 petra ' zo erru ganit hiziv. Gwall joads ec'h eus feson da vezañ.  
 - N'eo ket hep abeg, hag emberr e welli petra am eus d'ober gant  
 "Buhez ar Sent", pa lennin dit buhez da Sant Paeron.

2 - ...Te lenn ! 'M eus aon out trelatet da vat. Biskoazh  
 kemend-all ! Piv 'ta en deus graet skol dit ?  
 - Den ebet, avat, met me 'm eus bet ul lunedou !  
 - Hag a gav dit penaos, war zigarez ec'h eus bet ul lunedou, e  
 ouegi lenn, hep bezañ biskoazh desket ?  
 - Ya, moarvat ! Mar befe ret mont d'ar skol evit gouzout lenn  
 gant lunedou, ne dalvezfe ket ar boan bezañ graet ar seurt  
 binvioù-se !  
 - Na, gwelout a raimp ! a lavaras Job en ur zifollañ da  
 c'hoarzhif. E wreg kavet ganti al levr a oa o klask, a lakaas  
 raktal war beg he fri al lunedou ken karet.

3 - Ha Fant ha digeriñ al levr, ha da sellout ennañ. Met allas !  
 ne chom ket pell hep bezañ distromplet, rak kaer he deus kaout  
 povar lagad, ne wel nemet gwenn ha du evel a-rack.

Al lunedou koulskoude n'int ket kollet, rak Job a zo  
 erru fall e zaulagad hag en deus ezhomm eus ur re evit gwe-  
 lout gwelloc'h an neud war ar steuenn.

( "Marvailhoù ar Vretoned", p.p.20/23, moull.1941 )

### I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (e labour,  
 raktal, en ur stagañ, sotaet, en abeg, digarez, stumm, hac'h armel,  
 e strad, didouellet )
- 2 - Daoust hag e c'heller, pa seller a-dost, lakaat abeg e-lec'h  
 digarez ? Pehini eo ar ger kreñvañ ?  
 Evit tremen hep mont d'ar skol, petra a zo ezhomm ? (abeg)  
 Evit mont da vale d'ar bourk ? ( un digarez )
- 3 - Peseurt diforc'h a zo etre biskoazh ha biken ?  
 Klokait ar frazennoù-mañ gant unan eus an daou c'her -se :  
 .....ne don bet en Amerika  
 .....n'em eus gwalet ur valum vev  
 ..... ne din da vale el loar  
 ..... ne rin poan d'am mamm .
- 4 - Klaskit gerioù damheñvel ouzh biskoazh ha biken :  
 morse, kammed, jamez . Aozit frazennoù ganto.

### II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak e lavar Job d'e wreg ez eo trelatet ?
- 2 - Daoust hag e oar Fant da betra e servij al lunedou ?
- 3 - Daoust hag e oar mat Job ? Perak ?
- 4 - Petra a c'hoarvezas gant al lunedou ?

III. AR YEZHADUR : an niveriñ.

- 1 - Pet lagad he devo Pant gant he lunedoù ? pevar .  
Pet lagad en deus an den ? daou.  
Pet lagad en deus an den born ? unan .

unan, daou, pevar a dalvez da displegañ an niver. Bez'ez int anvioù-gwan-niveriñ.  
Niverit betek ugent : unan, daou, tri, pevar, pemp, c'hwec'h, seizh, eizh, nav, dek, unnek, daouzek, trizek, pevarzek, pemzek, c'hwezec, seitek, triwec'h, naontek, ugent.

- 2 - Lakait 1, 2, 3, 4, dirak an anvioù-mañ: paotr, plac'h .  
ur paotr ur plac'h tri faotr teir flac'h  
daou baotr div blac'h pevar faotr peder flac'h.  
daou, tri, pevar a zo gourel div, teir, peder a zo gwregel.

3 - Er skol Yann a zo ar c'hentañ, an eil (eilvet), an trivet (an trede), ar pevarvet, ar pempvet (kendalc'hit betek ugent).  
Er skol, Annaig a zo ar gentañ, an eil (eilvet) an deirvet, (an drede), ar bedervet ar pempvet (kendalc'hit betek ugentvet).

An anvioù-gwan-petvedañ a dalvez da verkañ ar renk.

4 - Merzet hoc'h eus moarvat ez implijer un anv unan goude an anvioù-gwan-niveriñ. Tu a zo da lavarout koulskoude :  
Daou baotr pe daou a baotred div blac'h pe div a blac'hed.  
Kendalc'hit en doare-se gant ar gerioù-mañ : konikl, ti, prener, galleger, gwele, den, breur, martolod.

5 - An anvioù-gwan-niveriñ a lavar eus pet a gomzer: daou baotr, div blac'h.  
An anvioù-gwan-petvedañ a verk ar renk: Yann a zo ar c'hentañ.

Poelladennoù . 40 - Lennit da gentañ ha goude skrivit an niveroù-mañ gant lizherennoù: 9 19 8 18 15 3 5  
7 17 13 6 14 20 11 16 12 1 4 2 10

41 - Grit dre skrid niverenn 4 ar gentel.  
42 - Reizhekrievadenn: dilinennad 3 (allas, didouellet, a-raok, koulskoude, gwelloc'h, steuenn).

IV. AR VERBOU : amzer-da-zont personel.

Kentel . 1 - ar verb gouzout: skrivañ a cuezin, a cuezit, a cuezoz, a cuezimp, a ouiot, cuezint, a cuezor.  
ar verb ober: dastum timbroù a rin, a ri, a ray (raio)  
a raimp, a raot, a raint, a reor.

2 - Displegomp ar frazenn-mañ:  
Pa cuezin tresañ e rin taolennoù kaer.

Poelladennoù . 43 - Displegit ar verboù-mañ :  
arc'hoazh e cuezin va c'hentel,  
arc'hoazh e rin ul lizher .

44 - Grit dre skrid niverenn 2 ar gentel.  
45 - Lakait dilinennad 3 al lemmadenn en amzer-da-zont.

Kentel : evezhiadennoù diwar-benn ar verb ober hag un nebeut verboù.

1 - Ar verb ober en deus daou stumm evit an trede gour unan. Hini pe hini anezho a c'hell bezañ implijet:  
me a ray ur pellizher pe me a raio ur pellizher.

2 - Un nebeut verboù all o deus daou stumm -y ha -io.  
ar verb pesketa : me a besketay, me a besketajo,  
brasaat : me a vrasay, me a vrasajo ;  
dont : me a zeuy, me a zeujio ;  
rañ : me a roy, me a roio .

Poelladennoù . 46 - Displegit en daou stumm ar verboù-mañ :  
me a besketay e-pad ar vakañsoù me a vrasay buan  
me zeuy arc'hoazh me a roy ur prof'd'ar paour.

V . AR GERIADUR : an ti-post.

Kentel . 1 - Fellout a ra deoc'h kas ur c'helou, penaos e c'hellit en em gemer ? kas ul lizher, ur pellskrid (pellizher, telegram) pe pellgomz (telefonij).

2 - Displegit petra a zo d'ober evit kas ul lizher: skrivañ al lizher war baper dereat, lakaat ar chomlec'h war ar golo a-raok timbrañ, klozañ al lizher, postañ al lizher pe c'hoazh e erbediñ.

3 - Displegit labour paotr-al-lizhiri (fakteur) : rannañ al lizheroù, ar c'helaouennoù, ar pakadoù-post ; sevel ar boestoù - lizhiri.


4 - Penaos e reer da bellgomz ?  
4 - Penaos e reer da bellgomz ?  
pa 'z eus ur pellgomz otomatek: stummañ an niverenn gant ar bla-

den ;  
pa n'eus ket: goulenñ an inter, goulenñ an niverenn; da skouer :  
evit an niverenn 5 e Ploueg, an niverenn 7 e Pempoull, m.p.  
( evit an displegadennoù-mañ e vefe mat implijout daou deflefon bihan....)

5 - Penaos e c'hellit kas arc'hant dre ar post : dre ur gartenn-arc'hant, ul lizher-arc'hant pe ur chekenn-bost. (diskouez ur skouerenn eus pep hini.)

Poelladennoù . 47 - Skrivit ur pellizher d'ho tad, pe d'ho paeron da zegemenn dezhañ ur c'helou mat bennak. ( aotreet eo pellskrivañ en brezhoneg, hag en holl yezhoù Europa )

48 - Henc'hit ur golo ha skrivit ul lizher d'ur mignon da zanevelañ dezhañ ur valeadenn c'hraet e-pad ar vakañsoù.



1 - Dirak ar baotred, digor o genou ganto o sellout, e lakais ar pezh kanol ouzh ar c'hleuz hag e tispakis va boestad alumetez. Ober a ris dezho mont war o c'hiz, gant aon e c'hoarvezje droug ganto pa strakje an tenn. Ha neuze, ken dispont ha tra, e tanis ar vouchemn. Hogen n'ouzon ket petra a c'hoarie ganti rak, goude bezañ divogedet un disterañ, e varvas an tan enni.

2 - Feuket e oa an tamm ac'hanon o klevout ar vouced o skri-  
gnat a-dreñv va c'hein. Gant an droug a oa ennon, e tigrammis  
Kult ar vouchemn devet hag e lakais un alumetezenn enaonet  
e-barzh an toull. Kerkent e voen dallet gant ul luc'hedenn,  
e-keit ha ma kleven ur strakadenn feuls ha ma santen ur gwall  
stokadenn ouzh ma dorn dehou.

3 - Ar baotred, fougeet hag estlammet, a youc'has gant al le-  
venez pa weljont flamm an darzhadenn hag un dra bennak o  
treiñ uhel en nec'h, a-us d'am fenn. Poan an boa em dorn, duet  
holl gent ar poultr devet, met ne oa ket gloazet a-drugarez  
Doue. Klask a ris va fezh kanol war ar c'hleuz, hogen ne gavis  
nemet e lec'h. Strinket e oa bet, dispennet holl er park all.  
Daoust d'am dorn da leskiñ, e oan laouen da vezañ diskouezet  
ma gouzিয়েzha da ac'han poultr, ha, diwar an deiz-se, e kreskas  
ma brud e-touez moused ar bourk.

( Yeun ar Gôw " E Skeud Tour Bras Sant Jermen", p.186 )

I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. ( tizhet,  
deviñ, greñv, lorc'hus, bamet, paotred, c'hoarzhñ, anoazet, tarzhje. )

2 - Petra eo ur pezh-kanol amañ ?  
Peseurt ster a c'hellfad reiñ c'hoazh d'an dro-lavar-se ?  
Kefveriañ gant ur pezh den pe ur pezh a zen.  
Klaskit gerioù all stummet gant ar ger pezh : ur pezh-fall  
(ur gwall bezh), ur pezh-lebour, ur pezh-nicher, pezh-c'hoari.

II . AR MENOZIOU.

- 1 - Perak e c'houlennas ar c'hanolier digant ar vouced mont war o c'hiz ?
- 2 - Petra a c'hoarvezas gant ar vouchemn ?
- 3 - Perak e lakaas un alumetezenn en toull ?
- 4 - Perak e santas ur stokadenn ?
- 5 - Petra a nije a-us d'e henn ?
- 6 - Perak e kreskas diwar-se e vrud ?
- 7 - Klaskit ar gerioù a ziskouez e oa un tamm lorc'h ennañ..

III. AR YEZHADUR : ar ger-mell.

Kentel . 1 - " E lakais ar pezh-kanol ouzh ar c'hleuz ", da la-  
varout eo ar c'hanol a anavezet mat, an hini a zo bet  
ijinet gantañ.

" E lakais ur pezh-kanol ouzh ar c'hleuz " ; n'eus  
forzh peseurt kanol.

" ar " a zo ur ger-mell sasis ; " ur " a zo ur ger-mell sresis.

2 - Lakait ar ger-mell dirak ar gerioù-mañ :  
lagad (al, ul ) troad ( an, un ) penn ( ar, ur )  
Al, ul a vez implijet dirak ar gerioù o kregiñ gant l ; an, un,  
dirak n d t h hag ar vogalennoù ; ar, ur dirak al lizherennoù  
all.

3 - Lakait ar ger-mell dirak ar gerioù-mañ :  
Kador, ar gador taol, an daol pedenn, ar bedenn  
gar, ar c'har doujañs, an doujañs, brec'h, ar vrec'h  
mamm, ar vamm  
met : ki, ar c'hi tad, an tad paotr, ar paotr,  
gopr, ur gopr deiz, un deiz breur, ar breur,  
mab, ar mab.

Klaskit an diforc'hoù ar c'hennadurioù, ha perak.

4 - Ar ger-mell strizh a zo al, an ar. Ar ger-mell amstrizh  
a zo ul, un, ur. Al, ul a vez implijet dirak l ; an, un, dirak  
n d t h hag ar vogalennoù ; ar, ur dirak al lizherennoù all.

Poelladennoù . 49 - Diskrivit an dilivennad 2 hag islinennet  
ur vech ar ger-mell strizh, ha div vech ar ger-  
mell amstrizh.

50 - Lakait ar ger-mell strizh dirak ar gerioù-mañ : tal, blev,  
dremm, diskouarn, elgez, barv, gouzoug, skoaz, biz, dant.

51 - hag ar re-mañ : brec'h, gar, kalon, gomenn, boest, taol, taolenn,  
kartenn, kador, mellenñ.

52 - Reizhskrivadenn : dilivennad 2. ( tigrammis, alumetezenn, dallet,  
luc'hedenn, feuls, stokadenn.

IV. AR VERBOU : amzer-andremenet dibersonel.

Kentel . 1 - E peseurt amzer ennañ " lakais " ? ( frazenn 1 )  
ha c'hoarie ? ( frazenn 3 ) en amzer-dremenet o-daou.  
2 - Tu a vefe bet da lavarout : " Dirak ar baotred... e lakaas ar  
pezh-kanol ouzh ar c'hleuz hag e tispaken va boestad alumetez " .

" lakaen, tispaken", kement-se a c'hoarvezas alies: amzer-dremenet-amresis  
" lakais, tispakis", kement-se a c'hoarvezas ur wech: amzer-dremenet-resis.

3 - verb kaout: me am boa daoulagad mat, te az poa, eñ en doa, hi he doa, ni hor boa, c'hwi ho poa, i o doa.

verb bezañ: me a oa naet atav verb hadañ: me a hade abred  
verb gouzout: me a ouie gouren

verb mont: me a yae da neuial verb ober: me a rae embregerezh

Poelladennoù .53- Displegit ar verboù-mañ: kaout ivinoù naet  
bezañ kalonek lammat uhel.

54 - mont da bark ar sportoù gouzout splujañ.  
ober pimpoellennoù.

55 - Lakait an dilinennad 2 en amzer-vremañ.

V. AR GERIADUR : ar yec'hed .

Kentel .1 - Diskrivit ar fiñvoù a rankit ober e-pad an embregerezh-korf. (dav e vefe lakaat unan eus ar skolidi d'o displegañ dirak ar re all ): alanan, c'hwezhañ (alanat kreñv), fronal (rufañ),

bezañ en e sav, en e goazez, en e c'hourvez, en e gluch (en e buch), en e zaougromm (en e zaoubleg),

sevel, azezañ, gourvezañ, kluchañ, daougrommañ (daoublegañ) luskañ, fiñval, fringal, arsav, treiñ, krommañ, plegañ, stouñ, soublañ, sonnañ, astenn, daulinañ, mont war-raok, kilañ (souzañ), redek, daoulammat, mont goustad (war e c'horregezh, war e bouezig )

2 - Grit ur rummad gant ar gerioù a zere ouzh an den klañv hag ur rummad gant ar re a zere ouzh an den yac'h: mav, sart, dihet, morglañv, gwan, izil, dinerzh, dieter, toc'hor ( e par ar marv), livrin.

3 - Displegit an diforc'hoù a verker gant ar gerioù-mañ : mac'hagnet (mupumjet), seizet (nodet, peluzet), kabac'h .

4 - Displegit petra a zleer ober war-dro ar c'horf evit e virout yac'h : en em walc'hiñ gant gour yen ha soavon; skarzhañ an ivinoù ; gwalc'hiñ an dent gant ur broust ha toaz, broustañ ha kribañ ar blev, kibellañ pe kemer ur strinkadenn (glaviadenn).

Poelladennoù.56 - Gant verboù tennet eus niverenn 1 ar gentel savit 5 frazenn diwar skouer houmañ :  
" Ken dispont ha tra e tanis ar vouchenn".

57 - Danevellit un dro-gamm bennak bet c'hoariet ganeoc'h, pe bet c'hoariet deoc'h.

## LENNADENN 8 : AN TAN.

( Katell gozh a zo manet kousket gant ur c'horfad. En he c'hi-chen eo gourveret bugel Janedig. E-keit-se un den a zeu e-barzh hag a laka an tan .)

1 - Souden, un trouz, eec'h evel an tan o kregiñ, a savas er penn all eus an ti, hag ur c'hwez loakus e gargas, ma tihunas Katell hanter spontet.

Moged a oa en ti ! Ar plac'h paour, strafuilhet-holl, a sav ha disro'hen, he brozh hepken warni, e tec'h er-maez, en ur huchal pennfollet, etrezek ar Gêrvenn: " An tan er C'hoadig! "

2 - An dud, dihunet er spont, a zerede, pep hini primañ m'halle. Unan a redas d'ar vourc'h da lakaat seniñ ar c'hloc'h, hag hep dale un niver bras a dud a voe degtmet dirak ar gêrig. An tan ivez n'en doa ket kollet e amzer. Ur penn eus an ti betek an nor a oa leun a flamm.

- N'eus netra d'ober aze, eme an dud. Saveteomp al loened ! Souden ur vaouez spontet a youc'has : ar bugel ! ar bugel ! Katell a oa e-kreiz he strafuilh, hanter vezv c'hoazh ivez mar-teze. Ar paour kaezh plac'h he soa ankounac'haet ar paotrig.

3 - Ar bugel ! eme an holl, evel un heklev spouronet. Ar bugel a zo en ti ! O Itron Varia ! mouget eo a-benn bremañ !

- Marteze n'eus ket a dan c'hoazh e penn ar c'havell, eme Gattell. An dud en em selle. Daou pe dri a dostaas d'an nor. Met ar risi a oa ken bras ma taent holl a-dreñv en ur grenañ.

- Fin' zo ! Re zivezhat eo ! eme an holl. O va Doue ! an aelig paour ! o Janig !

( da heuilh )

## I . STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù ialinennet. (spontet, danjer, bodet, dason, hopel, hep botoù, devus, a-greiz-holl, trelatet,

2 - Penaos eo stummet ar ger diaro'hen : di + arc'hen. Da betra e servij an arc'hener ?

3 - Stummit gerioù nevez gant an anvioù-mañ hag er rakger di, dis, pe diz .

di- aked, abeg, arc'hant, arvar, pardon, penn, perc'hann, poan, pohl, pouez, preder, priz, tanall, tro, troidell, truez, trubuilh, skiant, enor, evezh, feiz, frouezh, kabell, kalon, koumoul, kristen, galloud, goulou, labour, lost, nama, narzh, remed, rod, soñj, spont, studi, ment, mergl golo

dis- skorn, disheol, hual, neuz, gwri,

diz- aon, esper, ehan, golo,

4 - Klaskit gerioù stummet evel loakus: joaus, poanuis, c'hoan-taus, diwelus, klievedus (amzer glienvedus), kartrius.

## II. AR MEMOZIOU.

1 - Petra a zihunas Katell ?  
2 - Petra a ziskouez ez eo pennfollet ?  
3 - Perak ne fell ket d'an dud mont e-barzh an ti ?  
4 - Klaskit tri ger hag a ziskouez ez a ar spont war greakiñ.

III . AR YEZHADUR : an diskouezañ, e = ar ger-mell,  
en ur .

- Kentel . 1** - Diskouezit din ar paotr-mañ emañ amañ  
ar paotr-se emañ aze  
ar paotr-hont emañ ahont.
- 2 - Ar gerioù -mañ -se -hont staget war-lerc'h un anv a dalvez da ziskouez un den, ul loen pe un dra. Anvet e vezont anvioù-gwan-diskouezañ: ar paotr-mañ, ar paotr-se, ar paotr-hont.
- 3 - "Moged a oa en ti" " An tan er c'hoadig", Penaos ho pefe lavaret c'hwi ? " Moged a oa e-barzh an ti " "An tan e-barzh ar c'hoadig".  
Ar ger e gant ar ger-mell a vez skrivet en er el .
- 4 - Daoust hag ez eo en ur dirak "huchal" ur ger-mell ? Perak ? Klaskit ur skouer all en dilinennad 3. Aczit frazennoù gant en ur:  
Da skouer : Yann a ya d'ar skol en ur ganañ  
Yann a labour en ur c'hwitellat  
Tadig a selaou ar radio en ur zebrifiñ.
- 5 - En ur a vez lakaet dirak ur verb evit diskouez e reer daou dra war-un-dro: Yann a ya d'ar skol en ur ganañ.

**Poelladennoù . 58** - Diskrivit an dilinennad 1 hag islinennit ur wech ar ger-mell strizh ha div wech ar ger-mell amstrizh.

59 - Ar paour kaezh plac'h he doa ankounac'haet ar paotrig. Diskrivit 3 gwech ar frazenn -se en ur lakaat bep tro un anv-gwan diskouezañ disheñvel goude an anvioù.

60 - Reizhskrivadenn: dilinennad 1 (souden, c'hwez, strafuilhet-holl, diarc'hen, pennfollet, etrezek)

poentadur: klochedouigoù, tiredoù.

Perak e lakaer " An tan er c'hoadig" etre klochedouigoù ( " ) ? Perak ez eus kel lies a direoù en dilinennad 3. ?

61 - Diskrivit an dilinennad 3 en ur deurel evezh bras ouzh an tiredoù.

IV. AR VERBOU : amzer-dremenet personel.

**Kentel . 1** - Displegomp ar verb "bezañ naet" en ur gregiñ gant "naet". Naet e oan, e oas, e oa, e oamp, e oac'h, e oant, e oad.

2 - Displegomp hadañ : abred e haden, e hades, e hade,  
abred e hademp, e hadec'h, e hadent, e haded.  
ar verb mont: da neuial ez aen, ez aes, ez ae,  
da neuial ez aemp, ez sec'h, ez aent, ez aed.

3 - Displegomp ar frazenn-mañ:  
Pa oan yaouank, ez aen da bourmen d'ar c'hoad hag e pignen er gwez.

**Poelladennoù . 62.** Displegit ar verboù-mañ: Dec'h e oan kalonek. Bendeiz e krogen an tan er fornigell. Bemnoz ez aen da doumañ war an oaled.

63 . Displegit dre skrid niverenn 3 ar gentel.

V. AR GERIADUR : an tan.

**Kentel . 1** - Anvit an doareoù disheñvel a gaver da doumañ an ti: ar fornigell dre c'hlaou pe dre goad, an dommerez dre dreden pe dre c'haz butan, an dommerez-kreiz.

2 - Pa vez un tan-gwall, piv a vez galvet ? ar bomperien (paotred an tan) .  
Peseurt binvioù a vez ganto ? ribouloù, tuellinier, kelornioù, skoulioù, ar banveg-dialanet, ar goaf-benn.

3 - Petra a weler war an oaled pa vez tan warnañ ? glaou bev, etev ( etivi), flammoù, elvennoù (fulennoù), koad sec'h (bleñchoù), gwreskoù ( bruzhunailhoù).

4 - Klaskit an diforc'h a zo etre : devifiñ pulluc'hañ suilhañ. Klaskit gerioù all evito : leskiñ peurlieskiñ gouleskiñ.

5 - Klaskit gerioù all evit "lakaat an tan" : kregiñ an tan, c'hwezhañ an tan, enacuiñ an tan, entanañ, tanañ, tanflammañ.

**Poelladennoù . 64.** Renkit ar gerioù-mañ o vont eus an hini a verk ar yenion vrasañ d'an tommder brasañ: klouar, tomm, yen-skorn, tomm-pozh, leskidik, yen, grizias, gouyen.

65 - Dibabit unan eus an danevelloù-mañ: Diskrivit  
- pleustradeg paotred an tan .  
- Tanted ar Pardon,  
- un tan-gwall.

(kendalc'h ar bajenn 25.)

hag ar brousgwez (gwezigoù) : kelenn (gargel), haleg, skav, spenn, aozilh, skavgrac'h, boned kornek.

2 - Klaskit an diforc'h a zo etre ar gerioù-mañ : forest, koad, koadig, koad-med, brouskoad, etre kef, tos ha lañsadenn.

3 - Piv a anavez frouezh dn dery ? (mez, pizh-moc'h), ar fav ? (finij), an drez ? ( ar mouar )

4 - Klaskit gerioù all evit brank ha savit verboù ganto: skour (diskourrañ), skoultr (diskoultrañ), barr (divarrañ).

5 - Peseurt diforc'h a zo etre troc'hañ, bennañ, diakar ; dibennañ (divegañ ha distankañ) ; diruskañ (kignat) ; heskennañ, ha faoutañ;

6 - Peseurt plant bihan a weler er frankizenn (digoadem, heolien) ? brug, man, (touskan), lus, kabelloù-touseg.

7 - Petra a gresk alies war rusk ar gwez ? kinvi, illiav.

**Poelladennoù . 72** - Gant anvioù tennet eus an niverennoù 1 ha 2 hag an anvioù-gwan-mañ savit 5 frazenn:  
kamm, lañsennek, uhel, kinvi, stank.

73 - Gwelet hoc'h eus koadourien o tiskar ur wezenn. Diskrivit o labour.





LENNADENN 10 : AN TAN ( kendalc'h ha diwezh ).

1 - Jobig a oa en e wele, kollet gantañ tre-ha-tre e damm anaoudegezh. E benn a oa liaset, ha ne rae van na seblant ouzh den.  
- Penaos emañ kont gantañ ? eme Janig d'an hini a oa en e gichen.  
- Ne welo ket an noz, eme houmañ a vouez izel. Erru oc'h, a gredan, d'e walc'h o tremen. An Aotrou Person a zo vont ac'han.

2 - Janig a dostaas d'ar gwele.  
- Jobig n'anavezvez ket ac'hanon ? emezi gant ur vouezh hanter droc'het. Jobig, sell ouzhin !  
Degasit Yannig, emañ.

N'ec'h eus ket c'hoant da reiñ ur pok d'an aelig ? emezi gant ur vouezh tener. Jobig sell outañ. Degasit ra dit ur boked.  
- An aelig ? eme ar paour kaezh, izel-izel. Hag ur mousc'hoarzh a seblantas tremen war e zremm. Met kerkent e cheñchas liv.  
An holl a oa sioul hag a bede en ur ouelañ.

3 - Ar paour kaezh a guitaas hon traoñienn evit mont da glask e lod efrusted digant Hor Salver.

An deiz war-lerc'h, tud ar Gêrwenn ha kalz re all a heulie korf Jobig ar C'hoadoù d'ar vered. Meur a hini a ouele.

Ha da bell goude, war-dro serr-noz, ur plac'h, ur bugel ganti war he brec'h pe ouzh he dorn, a zeue sioulk da zaoulinañ war ar bez.

( "Bleuniou a Garantez", gant Koulmaig Arvor, mouladur "Gwalarn", niv. 59, p. p. 35.41 )

I . STUDI AR GERIOU.

- 1 - Klaskit gerioù all da lakaat e-lec'h ar re islinennet. ( abardaez-noz, ac'halec, paket, penn-da-benn, mañ, skiant, torkad )
- 2 - Eus pelec'h e teu anaoudegezh ? Petra eo un den anaoudek ? ( a oar un dra bennak, pe a oar trugerekaat ).  
Grit ur frazenn gant ar ger anaoudegezh vat.
- 3 - Penaos eo stummet ar ger mousc'hoarzhin ? klaskit gerioù-all o kregiñ gant mous : mouskouez, mouskanañ.  
Grit frazenn gant ar gerioù-se.

II . AR MEMOZIOU.

- 1 - Petra a ziskouez emañ Jobig o vont da vervel ?
- 2 - Piv eo Janig ?
- 3 - Perak e fell dezhi lakaat Yannig da boket da Jobig.
- 4 - Perak e kas dezhañ ur boket ?
- 5 - Daoust hag e oar bremañ Jobig piv a zo en-dro dezhañ ?
- 6 - Penaos o deus diskouezet an dud o anaoudegezh vat e-keñver Yannig ?

III . AR YEZHADUR : derezioù uheloc'h hag uhel.

- Kentel .1 - "Jobig a zo bet kalonek, n'eo ket gwir ?  
Tu a vefe bet da lavarout: "Jobig a zo bet kalonekoc'h".  
pe c'hoazh: "Jobig a zo bet ar c'halonekañ".  
Greomp 3 frazenn heñvel gant "Jobig" "fur".
- 2 - Klaskomp ober teir frazenn gant : kalon Jobig a zo mat. ( gwelloc'h pe gwel ; gwellañ ).  
Stad Jobig a zo fall .( falloc'h, pe gwazh, pe gwashoc'h ; gwashañ )

Poelladennoù: 74 - Lakait ar frazenn-mañ en derez uheloc'h hag en derez uhelañ : kreiton Yann a zo berr.

75 - Grit dre skrid niverenn 2 ar gentel.

76 - Diskrivit an dilinennad 3 en ur lakaat ar verboù en amzer-da-zont.

77 - reizhskrivadenn : an dilinennad 3 ( guitaas, traoñienn, efrusted, serr-noz, da zaoulinañ )

IV . AR VERBOU : amzer-dremenet-strizh dibersonel.

Kentel . 1 - Lennomp an dilinennad 3. Klaskomp amzer ar verb. Lennomp an dilinennad-se en ur lakaat ar verboù en amzer-dremenet-strizh.

2 - verb kaout : me an boe, te az poe, si en doe, hi he doe, ni hor boe, c'hwil ho poe, i c doe.

verb bezañ : me a voe fur .... hadan : me a hadas ed.

mont : me a yeas d'ar vered gouzout : me a ouzvas bevañ.  
ober : me a reas an aluzon.

Poelladennoù. 78 - Displegit ar verboù-mañ : kaout ur c'hleñvad stagus, bezañ madalezhus, bevañ laouen.

79 - mont d'an douaradur, gouzout louzañ, obergwelloc'h-gwellañ.

80 - Diskrivit an dilinennad 3 en ur lakaat ar verboù en amzer-dremenet-strizh.

V . AR GERIADUR : ar familh, ar vuhez, ar marv.

Kentel .1 - Piv ac'hanoc'h en deus c'hoesth e dad-kuñv pe e vamm-guñv ? e dad-you pe e vamm-you ?

2 - Pelec'h e lakaer ar c'horfoc'h marv ? er bez, er vered, er forn deviiñ ( broioù ' zo )

3 - Klaskit anvioù all evit intarment : douaradur, beziadur.

4 - Peseurt diforc'h a zo etre sebiadiadur ha douaradur .

5 - Pegoulz en em gav gouel an Anaon ?

Penaos e vez taolennet ar Marv paurvuiañ ? ur c'horf-eskern gant ur falc'h . Penaos e vez anvet neuze ? an Ankou.

Piv a vez graet an Ankou anezhañ e parrazioù ' zo ? an hini a varv da gentañ er bloaz.

6 - Anvit an dud a zo en ho tiegezh ( familh ) : tad, mamm, breur, c'hoar ( c'hoarzed ); hag en ho kerentiad : eontr ( tonton ), moareb ( tintin ), gourseontr, gourvoereb, niz, nizez ( marteze ! )

7 - Peseurt diforc'h a zo etre : kenderv kompes, kenderv ha kevniant ?

Penaos envel ur bugel hep tad na mamm ? emivad, minor .

8 - Peseurt diforc'h a zo etre : mab-kaer, merc'h-kaer, tad-kaer, mamm-gaer, tud-kaer, bugale-gaer ha les-tad, les-vamm, les-kerent, les-vugale, les-mab, les-merc'h ?

9 - Piv a anavez gerioù all evit mab-kaer ... h.a. : mabeg, merc'hag, tadeg, mamneg. ( implijet e Bro-Wened dreist holl ).

10 - Anvit ar servijerien ( ar goskor ) a gaver en tier pinvidik

ha displegit o labour : servijer, floe'h, nevel, maezh ( mitizhien ), plac'h-tiegezh, keginer, magerez, plac'h-krot, porzhier, deveznour, chalboter, blienier.

11 - Pere eo deverioù ar vugale e-keñver oc'herant : karout, enoriñ, sentiñ, skoazellañ .

12 - Daoust hag e c'hellit merkañ an diforc'h a zo etre dimez hag eured ? ( dimez = ar broese, a-wachou da vihanañ )

Penaos envel an den euredet hag ar plac'h euredet ? an ezhaoc'h ( ezhaoc'h ) hag ar wreg ( gwagez ).

12 - Peseurt diforc'h a zo etre priedoù ha danvez-priedoù ?  
Peseurt sakramant a zegemer an dud dimezet ? s.ar briedelezh.

Poelladennoù. 81 - Klokait gant gerioù tennet eus ar gentel.  
Jakez a zo un ..... E dad hag e vamm a zo marv.  
Emañ bremañ e vevañ e ti e ..... hag ..... e dad.  
Mont a ra ivez da di e ..... ar c'hoar d'e vamm da c'hoari  
gant e ..... hag e ..... E-pad ar vakañsoù e labour da  
skoazellañ e ..... er verèuri; kalonek eo ha bez' ez eo ur  
..... mat ! Plijout a ra dezhañ dreist-holl bezañ ..... war  
an traktor.

82 - Dibabit unan eus an div zanevell-mañ:  
Taolennit un eured.  
Displegit ur gontadenn diwar-benn an Ankou.

LENNADENN 11 : PER AR SKOL .



1 - Echu eo pleustradeg ar Bagad e porzh ar skol. War al le-  
tonenn eo chomet Yann, Erwan ha Jobig da c'hoari patate, mouchig-  
dall, meinigoù da c'hortoz amzer adverenn. Un nebeut merc'hedi-  
goù a zo diredet en-dro dezho. Gant an heol hag ar banneoù  
Elav a gouezh hogos bemdeiz en em led buan ar glazur e-pad ar  
vakañsoù.

2 - Hag e kresk ivez ar per e gwez al liorz. Seblantout a reont  
zoken dareviñ. Skuizhder, sec'hed ha naon a zeu war-lerc'h ar  
c'hoarioù ha ne vefe ket diaes terrif d'an eil ha d'egile !  
Met penaos en em gemer ? Betu ar gudenn.

3 - Kuzulikat a reer bremañ war al letonenn.  
- Ar Kener, en, en deus kemeret e varo'h-houarn evit mont da  
weladenniñ kerent e skolidi.  
- Lavaret en deus d'e garabasenn e tistrofe war-dro seizh eur,  
evit koanisañ hepken. N'eus riskl ebet eus an tu-se.  
- Prest goude, echu ganti he labour kannañ, ez eo aet kuit ar  
plac'h gant he mab yaouank.  
- Ur c'helorn hag ur ballig a oa gant ar paotrig. An abardaevzh  
a-bezh a dremenint war an traezh.

( da genderc'hel )

#### I. STUDI AR GERIOU.

1 - Dekait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinemet. (glazenn,  
vatezh, komz a vouezh izel ).

2 - Ar gerioù "kannañ" ha "kann".  
 Petra eo gwenn-kann ? loar-gann ? Mammig a zo aet da gannañ  
 d'ar c'hann, pe d'an ti-kouez.  
 Klaskit anv un evn o kregiñ gant kannerez : kannerezig-an-dour.  
 Piv a anavez un anv ken brav all d'al labous-se ? Hej-e-lost.

3- Peseurt kemma a zo etre kannañ ha kanañ ? Grit div frazenn.  
 4-Dacoust ha c'hwi ho pefe lavaret "da c'hortoz amzer adverenn" ?  
 Klaskit anvioù ar predoù en ho korn-bro :

lein, dalein, merenn, adverenn pe merenn vihan, koon, adkoon.  
 dijuniñ, addijuniñ, lein, merenn, koon, fiskoan.

Penaos ober eta evit tremen hep feziañ war an eur ? Lavarout,  
 da skouer : Plijadur vras a reot din o tont du-mañ disul da  
 leinañ (pe da verennañ) da 12 eur.

5 - Klaskit stumm unan meinigoù :maenig.

Klaskit liesterioù diabarzh all :  
 matezh, mitizhien azen, ezen ( azened )  
 dañvad, deñved oan, ein ( oaned )  
 porc'hell, porc'hell gad, gedon,  
 kar, kerent bugel, bugale,  
 troad, treid, dant, dent.

6 - Klaskit liesterioù en -on : saoz, saozon gad, gedon  
 kere, kereon ( kereour, kereourien ).

## II. AR MENOZIOU.

- 1- Perak e oa chomet ar baotred da c'hoari war letonenn ar skol ?
- 2 - Perak e oa ul letonenn druz e porzh ar skol ?
- 3 - Penaos e felle dezho terriñ d'o skuizhder, d'o sec'hed ha d'o naon ?
- 4 - Pelec'h e oa aet rener ar skol ? hag e garabasenn ?
- 5 - Penaos e ouient e oa aet ar garabasenn d'an draezhenn ?

## III. AR YEZHADUR : adweladur ar pemp kentel gentañ.

Kentel .1 - Lennit ar frazenn gentañ. Pet ger.

2 - Lavarit pet silabenn, pet vogalenn ha pet kensonenn a zo e pep ger.

3 - Klaskit en dilinennad 1 an anvioù-divoutin, an anvioù-tud, hag an anvioù-traoù.

4 - Deskomp dielfennañ :  
 bagad :anv tra, gourel, unan.  
 baotred :anv tud, gourel, lies.  
 Erwan :anv divoutin, gourel, unan.

Poelladennoù.1 - Diskrivit an dilinennad 1 en ur dielfennañ an anvioù unan ur wech, lies div wech.

2 - Skrivit war linennoù disheñvel an anvioù divoutin ha boutin.

3 - Dielfennit an holl anvioù, hervez ar skouerioù roet uheloc'h.

Poentadur. Klaskit da betra e servij an tiredoù en dilinennad 3.

Diskrivit an dilinennad 3 en ur verkañ pizh an tiredoù hag en ur zilinennañ e koulz.

Reizhskrivadenn: dilinennad 1. (pleustradeg, letonenn, merc'hed ).

## IV. AR VERBOU :amzer-dremenet-strizh personel.

Kentel.1 - Displegomp ar verb "bezañ fur" en ur gregiñ gant "fur".  
 fur e voen, fur e voes, fur e voe,  
 fur e voemp, fur e voec'h, fur e voent, fur e voed.

2 - verb hadañ: verb mont :  
 ed a hadis, ed a hadjomp, d'ar park ez is, ez ejomp,  
 ed a hadjout, ed a hadjoc'h, " " ez ejout, ez ejoc'h,  
 ed a hadas, ed a hadjont, " " ez eas, ez ejont,  
 ed a hadjod, " " ez ejod.

3 - Displegomp ar frazenn-mañ :  
 Pa voen dieub ez is er-maez hag e lammas gant ar gordenn.

Poelladennoù.1 - Displegit ar verboù-mañ : ouesk e voen,  
 gant kanetiniel e c'hoariis,  
 d'ar c'hoariadeg ez is gant plijadur.

2 - Displegit frazenn an niverenn 3.

## V. AR GERRIADUR :c'hoarioù ar vugale.

Kentel. 1 - Anvit ar c'hoarielloù a c'heller gwelout e n'eus  
 forzh peseurt ti :merc'hodenn (poupinell), kordenn,  
 polotenn ( ar bellenn ), ar vell ( ar baloñs ), ar gornigell,  
 ar c'helo'h, ar sarpant.

2 - Peseurt c'hoarioù a c'heller ober  
 e-barzh an ti :c'hoari ar c'hartoù, damez, ar bilibamm (gant  
 eskernigoù );

er porzh : redek, korollin (dañsal), brañsigellat, c'hoari  
 troadig-kamm ha dilech, mouchig-dall ha toull-kuzh  
 (koue), mell-droad, boullou, kilhoc, pilpod, maen-pal;  
er c'head: gwaregata (gant ur wareg ha saezhoù pe virc'h ),  
 brañsigellat, batalmat (gant ur vatenn pe un dalm ),  
 emvazhata.

war ul letonenn : gouren, emzornata, c'hoari tourig-ar-prad  
 (lakaat ar penn e-traoù ), c'hoari lamm-choug-  
 e-benn (pimpoelliñ ).

war an aod :neuiñ, splujañ, skejañ an dour (ober krampouezh)  
 gant mein plat.

en ur vag : roeñval, paoleviañ gant ur roeñv, leviañ (sturiañ);  
 merkañ an diforc'h etre leviañ ha leviata;

e-pad ar goañv :pa vez skorn hag ere'h, riklañ pe ruzañ,  
 ruzikañ gant botoù-riklañ, treinellat gant un

dreinell.  
 3 - Goulenit digant ho kerent pe ho tud-kozh displegañ deoc'h  
 c'hoarioù o bugaleerezh :c'hoari ar c'hrañ, ar spilhoc, bizibul,  
 ar bodig glas, al loull, c'hoari dotu (c'hoari ar gammell pe ho-  
 rell ).

4 - Grit ur frazenn gant pep hini eus anvioù-gwan-mañ:diduella,  
 plijus, bourrus, dedennus, hoalus, fantus, iakis, farsus, enoasis,  
 moredus.

Poelladennoù.1 - Lakait ar gerioù a vank en destenn-mañ.

Re ... eo chom en ti pa vez brav an amzer.  
 Penaos tremen an abardaevzh o c'hoari ..... ? Tu a ve-  
 fe da vont d'ar c'head d'aozañ .....ha ..... Peogwir ez eo  
 tomm an heol koulz eo diskenn d'an aod da .....Va mignon Ja-  
 kez en deus ur... ha marteze e vo gallet.....un tamm. Klas-  
 ket em eus deskiñ .....met n'on ket deuet a-benn c'hoazh.

2 - Ur yaouevzh bennak hoc'h eus ijinet ur c'hoari, pe ur c'hoa-  
 riell, gant ho kamaladeg. Displegit petra.

LENNADENN 12 : PER AR SKOL ( kendalc'h ha diwezh.)

- 1- Erwan, hag a oa pell diouzh bezañ hualet, a bignas er wezenn war ziskoaz Yann. Dastum ha diskenn a reas hini ha hini ar frouezh hanter zarev. Bez' e oa peadra da leuniañ ar godelloù hag an daouarn. Ret e oa bremañ pellaat sioul ha didrouz evel bugale vat hag onest a vefe bet, kinniget per dezho.
- 2 - A-greiz-holl, ne zegouezh seurt traoù nemet ha pa vezer en ur pleg fall bennak, e tifoupas Rener ar skol dre an toull-karr a sko war ar c'hardenn a ned ar porzh. Penaos ober ? Ne vefe ket bet dereat na fur tec'hout... Chom a-sav ha gortoz ma vefe tremenet an droug, da lavarout eo lezel Rener ar skol da vont da lojañ e varc'h-houarn er c'harridi evel ma ra bep tro.
- 3 - Abardaez mat ! Aotrou ! eme an holl.  
- Abardaez mat, bugale ! Na tomm eo !  
- Ya, eme Erwan, ha diviet omp bet gant pleustradeg ar Bagad.  
- Deuit 'ta ganin ! Me 'm eus amañ peadra da derriñ ho sec'hed. Hag e kasas ar vugale etrezek ar gwez-per. Diwar an douar e tastumas ur grabanad hag o c'hinnigas da Yannig. Ar paotrig a ruzias, a Blegas e Benn hag a anzavas e bec'hed.
- 4 - Ar Rener ne welas en-dro dezhañ nemet dremmoù ruz ha pennoù pleget ! Neuze e lezas un tenn-c'hoarzhin hag e lavaras :  
- Mat, keuz am eus ho pefe en servijet dija ! Frouezh ar wezenn-mañ a zo saourusoc'h, ha neuze n'eus forzh penaos ar per laeret a vez dalc'hmat un advlaz trenk ganto.  
Yann, Erwan ha Jobig n'int ket bet abaoe o tañva ar per e liorzha ar skol.  
( Herve Konan, skrid diembann ).

I. STUDI AR GERIOU.

- 1- Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (enkadenn, hent-treuz, divlaz, blazet, mat ).
- 2 - Da betra e servij an hual ? Hag ar sparl ?  
Petra a dalvez an troioù-lavar-mañ : Sparlet eo e garr (nec'het eo) ; berr eo war e sparl ( tost eo da vervel ).  
Daoust hag ez anavezit un dro-lavar all dezhi ur ster heñvel : emañ oc'h ober e dalaroù ( an talaroù eo an irvi diwezhañ ).
- 3 - Ar vugale a zo aet da gutuilh frouezh; klaskomp ur ger hepken evit displegañ ar menoz-se : frouesha.  
klask pesked : pesketa                      klask c'hwez : c'hwesa  
" logod : logota                      klask dour : doura .  
" gozhed : gozheta                      klask sistr : sistra.  
( dourañ : rein dour, dourañ al loened pe ur prad;  
douraat : rein dour d'al loened )

II. AR MENOZIOU.

- 1- Perak e felle d'ar baotred pellaat sioul ha didrouz ?
- 2- Peseurt ger a ziskouez mat e teuas ar rener en-dro en un doare dic'hortoz.
- 3- Perak e ruzias Yannig ?
- 4 - Pera e vez un advlaz trenk gant ar per laeret ?
- 5 - Perak ne zistroas ken ar baotred-se da laerezh per ?

III. AR YEZHADUR : adwelout ar c'hentelioù 5,6,7,8,9,10.

- Kentel. 1-** Petra eo pevar ? un anv-gwan-niveriñ.  
Niverit eus 1 da 20 gant ar ger paotr; gant ar ger plac'h.
- 2 - Displegit: Yann a zo ar c'hentañ.... betek deket.  
: Annaig a zo ar gentañ.... betek deket.
  - 3 - Klaskit en dilinennad 4 ar gerioù-mell strizh hag amstrizh.  
Displegit pegoulz ez implijer ar, an, al.
  - 4 - Penaos e oa an dremmoù ? ar per ?  
Peseurt gerioù eo "ruz" ha "darev" ?
  - 5 - Lakait "hanter" dirak an anvioù-gwan-mañ :  
kriz (hanter griz)                      darev,  
tost    brein,  
pare,    mezv,  
garv,  
gweet,
  - 6 - Sevit ar roll eus ar gerioù kemmet en dilinennad 1 ha skrivit e-kichen ar stummoù digemm:  
a bignas, pignas                      er wezenn, gwezenn  
war ziskoaz, diskoaz                      hanter zarev, darev  
bugale vat, mat

- Poelladennoù. 1-** Diskrivit an dilinennad 4 en ur islinennañ ar gerioù-mell.  
2 - Grit dre skrid an niverenn 5 eus ar gentel.  
3 - Diskrivit an dilinennad 1 en ur islinennañ ar gerioù kemmet; lakait etre klochedoù ar stummoù digemm.  
4 - Reizhskrivadenn: dilinennad 1 pe 4.

IV. AR VERBOU: amzer-dremenet-strizh personel.

- Kentel. 1 - verb gouzout :**  
bevañ a ouezis, ouezjout, a ouezas,  
" a ouezjomp, a ouezjoo'h, a ouezjont  
" a ouezjod  
verb ober :  
an aluzen a ris, a rejout, a reas,  
" a rejomp, a rejoo'h, a rejont,  
" a rejod.

- 2- Displegomp ar frazenn-mañ:  
Pa ouezis dastum an avaloù e ris va lodenn er park.

- Poelladennoù. 1 - Displegit ar verboù-mañ: abred e ouezis debriñ frouezh; dilojañ a ris an avaloù.**  
2 - Displegit frazenn an niverenn 2 dre skrid.  
3 - Lakait an dilinennad 1 en amzer-vremañ.

V. AR GERIADUR : ar frouezh.

- Kentel. 1 - Klaskit anvioù ar frouezh fresk a vez kavet bremañ da zebriñ: avaloù, avaloù-sitrons, orañjez, kraoñ, kraoñ-kelvez.**  
2 - Peseurt diforc'h a zo etre aval hag avalemm ?  
aval: ar frouezhenn; liester : avaloù ;  
avalemm: ar wezenn ; liester : avalemm.  
3 - Klaskit anvioù ar frouezh a gaver e boestoù-mir pe e konfizadurioù : sivi, flamboez, spezad, kastilhez, kastilhez-du, rezin, per, kerez, prun, abrikez, pechez.  
4 - Merzit mat an diforc'h a zo etre ar gerioù-mañ ha grit frazennoù ganto :  
sivi, sivienn, siviennoù, sivienned,  
per, perenn, perennoù, perenned,  
( kendalc'h war ar bajenn 49 ).



- 1 - Yann a veze graet eus an ozhac'h, ha Janed eus e bried. Houmañ ne oa ket eus deizioù kentañ ar sizhun. Pe ma karit gwell, un tammig sot e oa. Yann a lavaras un devezh d'e bried :  
- Ni n'hor bez ket friko alies. Mar karez, e lazimp ar pemoc'h a zo er c'hraou aze, hag e c'helli ober soubenn drusoc'h dimp.
- 2 - Arsa, eme Janed, te ' zo sot ! Daoust hag ar moc'h a vez debret ?  
- Sur avat, eme Yann. Ha lipet e vez ar mourroù diwarno c'hoazh !  
- Ma ! Lazh anezhañ neuze, ma karez, eme Janed, met ne zebriñ ket dioutañ.
- 3 - Antronoz e voe lazhet ar pemoc'h, ha pa voe dispennet, Yann a lavaras :  
- Sell, Janed, setu lakaet ar pemoc'h e pevar zamm. Un tamm a vo da Nedeleg, un tamm all da Veurlarjez, un all da Bask, un all da Bantekost.  
- Ya, ya, eme Janed, kompren a ran eo'hanout ! Ne soñjent ket e oa tud e-kichen an nor ouzh o selaou.
- 4 - En devezh war-lerc'h ez eas Yann e-unan da foar Komana. D'ar pardaer, ar re a oa bet o selaou anezho a zeuas da skeiñ war dor Janed.  
- Piv ' zo aze ? emezi. Hag unan da respont :  
- Me eo Nedeleg, deuet da glask va zamm kig. Ha Janed da reiñ dezhañ un tamm kig rektal. A-benn ur pennad, setu adarre un all o tont da skeiñ.  
- Petra ' zo adarre ? eme Janed.  
- Meurlarjez, deuet da glask e damm kig.  
- Mat, eme Janed, dal da damm neuze ivez, ha bale gantañ d'al lec'h ma kiri.  
- 34 - ( da heuliañ )

I . STUDI AR GWERIOU.

- 1 - Penaos ez anver ar blev a vount dindan an elgez ? ar barv. Hag ar re a sav dindan ar fri ? ar mourroù.
- 2 - Pegoulz e liper ar mourroù ? Petra eo "ober mourrennoù" pe "mourrennañ" ? ober begoù.
- 3 - Diwar peseurt anv-gwan eo bet savet "drugoc'h" ? drug. Taolit evezh ouzh ar c'heam en doare-skrivañ. Klaskit skouerioù all : kozh, koshaat ; fraez, fraesoc'h, frouezh, frouesha.

II. AR NEMOZIOU.

- 1 - Perak e lavarer ne oa ket Janed eus "deizioù kentañ ar sizhun" ?
- 2 - Petra a ziskouez e oa sot Janed ?
- 3 - Piv a rae "Nedeleg" ha "Meurlarjez" ?

III. AR YEZHADUR : ar ger-rener.

- Kentel . 1 - Lennomp ar frazenn: "Yann a lavaras un devezh ..". Pelec'h emañ ar verb ? Piv " a lavaras" ? Yann. Yann eo ar rener.
- 2 - Ar ger-rener eo ar ger a ro da c'houzout piv a ra an dra merket gant ar verb. Evit kavout ar rener e lakaer ar ger "piv" dirak ar verb. " Yann a lavaras un devezh".
  - 3 - Klaskit ger-rener ar verboù-mañ tennet eus an dilinennad kentañ : a veze graet, ne oa ket, a lavaras, n'hor bez ket, a zo.
  - 4 - Lennomp ar frazenn : "Pe ma karit gwell, un tammig sot e oa". Pelec'h emañ ger-rener "karit, e oa" ? N'eus hini ebet. Ar verb e-unan "lavar" dimp piv eo e rener. Klaskit en dilinennad 1 verboù implijet hep rener.
  - 5 - " D'ar pardaer, ar re a oa bet o selaou anezho a zeuas da skeiñ war dor Janed....Hag unan da respont." Klaskit ar verboù hag ar renerien. Pelec'h emañ renerien "selaou, skeiñ, respont" ? An anv-verb a vez implijet peurvuiañ hep rener.
  - 6 - Klaskit en dilinennad 4 anvioù-verb hag o renerien.
- Poellademoù -- 83. Diskrivit an dilinennad 1 en ur islinennad renerien.  
84- Grit an hevelep poelladenn war an dilinennad 3.  
85- Reizhskrivadenn : dilinennad 1 .(deizioù, c'hraou, e c'helli ).

IV. AR VERBOU : kaout ha bezañ.

- Kentel . 1 - Displegañ er pevar amzer studiet ar frazenn-mañ : "Bezañ laouen gant gouelioù Nedeleg". ( displegadur personel ha dibersonel ).
- 2 - Displegañ er pevar amzer studiet :  
" Kaout profoù kaer digant mamm-gozh".
  - 3 - Displegañ ar frazenn-mañ er pevar amzer; displegadur personel :  
" Ur c'halanna kaer ma eus ha prest ez on d'e lodennañ". ( 6 gour)

- Poelladennoù. 86. - Displegañ "Bezañ laouen gant Gouelioù Nedeleg". amzer-vremañ : displegadur dibersonel. (me a zo laouen ....)
- amzer-dremenet-strizh: displegadur personel (laouen e voen...)
- 87 - Displegañ : "Kaout profoù kaer". amzer-da-zont (me em bo ...)
- amzer-ardremenet (me am boa p...) amzer-da-zont (me em bo ...)
- 88 - Grit dre skrid niverenn 3 ar gentel: amzer-vremañ hag amzer-ardremenet.

V. AR GERIADUR : ar gouelioù.

- Kentel**. 1-Anvit gouelioù brasañ ar bloaz: nedeleg, gouel ar Rouanez ( Epifaneia ), Pask, Yaou-Bask ( Pignidigezh Jezuz ), Pantekost, gouel ar Sakramant, gouel an Drinded, gouel ar Werc'hez da Hanter-Eost ( gouel Savidigezh ar Werc'hez ), gouel an Hollsent.
- 2 - Pehini eo gouel brasañ ar bloaz evit ar gristenien ? Gouel Pask, gouel Dasorc'hidigezh Jezuz.
- 3 - Penaos e vez rannet ar bloaz gant ar gristenien ? Azvent, amzer Nedeleg ha goude ar Rouanez, ar c'horaz, amzer Pask, amzer goude ar Pantekost.
- 4 - Pehini eo ar gouel a blij ar muiañ d'ar vugale ? Perak ? gouel Nedeleg en abeg d'ar c'halanna (derod-mat, kouignaoa).
- 5 - Piv a ro e galanna bep bloaz d'e filhor ? (pe d'he filhor) ar paeron (pe ar vaeronez).
- 6 - Displegit petra a weler er stalioù a-raok Nedeleg : c'hoarielloù a bep seurt, gwezennoù-Nedeleg, Tadoù-Nedeleg, kraou ar Mabig-Jezuz.
- 7 - Petra a weler er wezenn-Nedeleg ? : neud arc'hant, stered, boullou, kantolioù-koar.
- 8 - Gant petra e reer kraou-Nedeleg ? paper-roc'h, delwennou-plastr, illav, pin, trenn-heskenn.
- 9 - Anvit tud ha loened ar c'hraou : Mari, Jozeb, ar vasserion, ( ar vugilion ), an deñved, ar Rouanez ( Rouaned ), an azen, an ejon, ar c'hañval.
- 10 - Klaskit klevout digant ar re gozh ar c'hustumou a-wechall evit Nedeleg ha dezhi kentañ ar bloaz : kouignaoa ( tro-kêr ), kanañ Nouel a zor da zor, ar "gozh sizhun".

- Poelladennoù .89 - Dibabit pemp rener en niverenn 9 ha savit pemp frazenn.
- 90 - Danevellit penaos eo bet tremenet du-se Noz-Nedeleg.

www. ....

( kendalc'h ar bajenn 38 )

Poelladennoù .97 . Klokait ar frazennou-mañ gant renadennoù.

- Erwan a lenn .... ( 2 renadenn )  
 Gwenola a selaou ..... ( 2 renadenn )  
 Tad-kozh a zanevell ..... ( 3 renadenn )

98. Taclennit ur veilhaedeg er gêr e-pad ar goañv .

LENNADENN 14 : PEMOC'H YANN HA JANED. (kendalc'h).

- 1 . Ur c'hard-eur bennak goude...toup ...adarre war an nor.  
 - Petra ' zo a nevez adarre ? eme Janed.  
 - Pask ' zo en em gavet da glask un tamm kig moc'h .  
 - Ma, eme Janed, bez' ez po da lod evel ar re all, daoust ma vihana fonnus ganin dija. Ne oa ket set mat kuit ma teuas un all da skañh .  
 - Petra an dieoul, eme Janed, a c'hoarvez gant an dud amañ o riboulat evel-se ?  
 - Me eo Pantekost, o klask e damm kig.  
 - Ma, eme Janed, spontus eo evelato: emañ va femoc'h o vont ganto, ha koulekoude e rankan sentifi ouzh Yann. Ha neuze, ne gollan ket holl. Al lard a chomo ganimp.  
 - Deuit, eme Janed, kemerit ho lod ha kerzhit gantañ da foar Landreger ! Ne garfen ket ho kwelout ken, nemet er baradoz da vihanañ !
- 2 - E-keit-se, Yann en doa bet amzer da ober hent ivez, hag ez erruas er gêr. Kerker Janed da drouzañ dezhañ :  
 - Che ! emezi, na te ' zo genaouek ! Bremañ e teuo skiant dit diwar da goust ! N'az poa ket lavaret din e vije mat un tamm kig da Nedeleg, un tamm all da Veurlarjez, un all da Bask, un all da Bantekost ? Bet int abaoe o kerzhat pep a damm, ha setu partiet ar pemoc'h !
- 3 - Ma ! eme Yann, mantrus eo ! Mont da reiñ ar pemoc'h evel-se ! Lavaret em boa dit e vije mat un tamm kig dimp da genver pep hini eus ar gouelioù-se !  
 - Ur wech all, eme Janed, e komzi fraesoc'h din !  
 - Alo ! eme Yann, al lard ' zo chomet ganimp da vihanañ, hag e c'helli hen lakaat gant ar c'haol. ( da heuliañ ).  
 - Hag a vo graet, eme Janed.

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet . (buan, mont ha dont, evit, sklaeroc'h )
- 2 - Piv a gavo ur ster all d'ar ger "fonnus" ? grit ur frazenn gant "fonnus" dezhañ ar ster-se. ( mammig a ra boued fonnus )
- 3 - Daoust hag e oa bet debret ar porc'hell penn-da-benn ? ne oa nemet peuzdebret. Klaskit gerioù all o kregiñ gant peuz- : peuzvarv, peuzdu, peuzvelen, peuzwirion, peuzallies.
- 4 - Pa vo debret a-bezh petra a lavaror ? : peurdebret eo. Klaskit gerioù all o kregiñ gant peur- : peurober, peurleuniañ, peurzorn, peurvad, peurbadus, peurvuliañ, peurzall, peurzu, peurlazhañ.

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Janed a gav dezhi bezañ finoc'h eget he fried ? Perak ?  
 2 - Peseurt fazi a zo bet graet gant Janed ?  
 3 - Petra a chom gant an daou bried en diwezh ?  
 4 - Daoust ha n'en doa ket komzet Yann fraez a-walc'h ?  
 5 - Petra a vo graet gant al lard ?

III. AR YEZHADUR : ar renadenn.

**Kentel**. 1-Lennomp frazenn gentañ an dilinennad 2. Klaskomp ar verboù hag o renerien. Petra en doa bet Yann ? amzer. da ober petra ? hent. Pelec'h e chomas ? er gêr. Pegoulz ?  
 a-keit-se.

ar gerioù "amzer, hent, ar gêr, e-keit-se" a zo implijet evit klokaat ster ar verboù. Anvet e vezont renadennoù.

2 - "Bremañ e teuo skiant dit diwar da goust".  
 klaskit ar verb hag e rener .  
 Da biv e teuo skiant ? dit. penaos ? diwar da goust  
 pegoulz ? bremañ .

ar gerioù "dit, diwar da goust, bremañ" a zo ivez renadennoù.

3 - Ar renadennoù a gloka ster ar b verb; hepzo ne vefe ket gouezet peurvuiañ petra resis a fell dezhañ displegañ. Respont a reont d'ar goulennoù: petra, da biv, pelec'h, pegoulz, penaos.

Poelladennoù. 91 - Diskrivit dilinennad 2 al lennadenn, hag islinennit ar verboù. Lakait ur groaz dindan ar renerien.

92 - Klokaat ar frazennoù-mañ gant renadennoù.  
 Yann a lemm ..... (petra) ..... (pegoulz).  
 Troc'het en deus ..... (petra) gant ..... (penaos).  
 Azezet eo ..... (pelec'h).

93 - Reizhskrivadenn: dilinennad 2. ( e-keit-se, kerkent, genaouek, Nedeleg, Meurlarjez, Pantekost, abaoe, kerc'hat.)

IV. AR VERBOÙ: hadañ, mont.


Kentel.1 - Displegañ er pevar amzer studiet ar frazennoù-mañ:  
 "Koroll en abadennoù ar c'helc'h." (Disp.personel ha dibersonel).  
 2 - "Mont da bardonañ disul". (displegatur personel ha dibers.)  
 3 - Displegañ ar frazennoù-mañ er pevar amzer studiet; disp.personel.  
 "Da bardonañ ez an hag e korollan war ar blasenn".  
 4 - Taolit evezh ouz ar stummoù disheñvel: korollleg, korolleg ; ez, aeg ; reg, reg .

Poelladennoù. 94. Displegit "Koroll en abadennoù ar c'helc'h", en amzer-amdremenet, displegatur personel.  
 en amzer-dremenet-strizh, displegatur dibersonel.  
 95. Displegit "Mont da bardonañ disul", en amzer-vremañ, displegatur dibersonel.  
 en amzer-da-zont, displegatur personel.  
 96. Displegatur frazennoù nivrennñ ar gentel: amzer-da-zont hag amzer-dremenet-strizh.

V. AR GERIADUR : an diduamantoh.

1 - Petra a rit d'an noz goude koan ? lenn.  
 Eus pelec'h e teu ho levrioù ? prenet, profet pe amprestet di-gant levraoueg ar skol.  
 Pe-seurt doareoù levrioù a lennit ? kontadennoù, romantoh, levrioù-beaj, buhezioù, danevelloù a bep seurt. (roit skouerioù).  
 Pe-seurt kelaouennoù a lennit ? Kelaouennoù skeudennaouet.  
 Anvit ur gelaouenn ban-deziek, sizhuniek, miziek, trimiziek.  
 2 - Radio. Petra a reer c'hoazh d'an noz ? selaou abadennoù ar radio. (skingomz)  
 Pe-seurt abadennoù a blij deoc'h ar muiañ ? kanaouennoù, c'hoarioù; keleier?  
 Petra a glever c'hoazh war ar radio ? sonerezh gant lazioù-kanaf, pe gant lazioù-seniñ, prezegennoù a bep seurt, ofisoù relijiel ha sarmonioù, ha zoken skol.  
 Pe program a blij deoc'h ar muiañ ?  
 Pe gaser a glever ar gwellañ en ho korn-bro ?  
 Deoust hag aes eo gouzout e pe-seurt tiez ez eus ur benveg pellwel ?

LENNADENN 15 : PEMOC'H YANN HA JANED. ( diwez ).



1 - Antronoz, ez ees Yann adarre d'ur foar bennak, ha kerkent Janned kemerout al lard, mont d'ar park gantañ, ha koumañs da frotañ lard ouzh ar c'haol ken e voe teuzet holl. Hi d'ar gêr neuze en ur ganañ. Pa erruas Yann ar gêr, e oa fougge enni o lavarout dezhañ:  
 - Hiziv, da vihanañ, e vezi kontant, pa 'm eus graet ar pezh az poa lavaret din.  
 2 - Ya, eme Yann. Ma n'ec'h eus ket intentat fall adarre !  
 - Lavaret az poa din, eme Janned, lakaat al lard gant ar c'haol, hag ez on bet o frotañ snezhañ outo.  
 - Disfizians am boa petra en em gavje, eme Yann. Lavarout a raen dit lakaat al lard da ober soubenn ha da hezhañ ar c'haol. Ma rez kemend-all ken e kasin ac'hanout da vale diwar va zro !  
 3 - Ne gav ket din e reas an dra-se ken, met traoù all ken gwazh pe washoc'h, ma 'z eo gwir ar c'hrennlavar-mañ :  
 Ar re 'zo sot ez yaouank-flamm  
 Evit koshaat ne furaont tamm...  
 ( "Marvailhoù ar Vretoned", p.p.41.44 )

I. STUDI AR GERIOÙ.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet: (fall, komprennet, lorc'h, laouen, fontet, kregiñ)  
 2 - Piv e gavo sterioù disheñvel-kreñn d'ar ger " gwazh".  
 - ar gwaz : an den, ar pried  
 - gwazh-dour : ar ruzelenn, stêrig.  
 - gwaz : ul loen-plu, brasoc'h eget an houad.  
 3 - Petra a dalvez "flamm" amañ ?  
 Petra a lavarer c'hoazh ? ( yaouank-flamm ).



## II. AR MENOZIOU.

- 1 - Petra a reas Janed gant al lard ?
- 2 - Petra a felle d'he gwaz ober ?
- 3 - Perak e tlefe bezañ bet disfiziahs diouzh e wreg ?
- 4 - Daoust hag e kav deoc'h e ray Janed kemend-all c'hoazh ?

## III. AR YEZHADUR : ar raganv, ar raganv-ougr.

Kentel .1- Lennomp ar frazenn: "Hi d'ar gêr neuze en ur ganañ".  
Piv eo "hi" ? Janed. "Hi" n'eo ket un anv; lakaet eo bet e-lec'h un anv hag anvet eo ur raganv.

- 2 - Klaskomp er frazenn a zeu war-lerc'h ar raganvioù ha lavaromp e-lec'h peseurt anvioù int bet lakaet. (enni, dezhañ ).
- 3 - Klaskomp e dilinennad 2 al lennadenn 13 ar raganvioù. Lavarit hag-eñ ez int renerien pe renadennoù .
- 4 - Pe raganvioù a vez implijet da zisplegañ ar verboù ?  
me, te, ef (hi), ni, c'hwi, i.
- 5 - Ar raganvioù a vez implijet evel renerien pe renadennoù e-lec'h an anvioù.  
Ar raganvioù a vez implijet da zisplegañ ar verboù a vez anvet raganvioù-gour.

Poelladennoù. 97. Diskrivit dilinennad 1 al lennadenn en ur islinennañ ar raganvioù.

98. Lakait ar gaoc'htre Yann hag e wreg en eil gour lies.
99. Heizskrivadenn: dilinennad 1. (antronoz, adarre, lard, fouge, hiziv.)

## IV. AR VERBOU : gouzout hag ober .

- Kentel .1- Displegañ er pevar lamzer studiet ar frazenn-mañ:  
"gouzout seniñ ar vombard" (disp. dibersonel ha person.)
- 2 - Displegañ er pevar amzer studiet ar frazenn-mañ.  
"Ober bigi koad" (displegadur personel ha dibersonel )
  - 3 - Displegañ, er pevar amzer, ar frazenn-mañ:  
"Pa ouzon va c'hentel e ran taolennoù gant pentur". (dis.p.)

Poelladennoù. 100. Displegañ "gouzout seniñ ar vombard",  
amzer-vremañ, displegadur personel.  
amzer-da-zont, displegadur dibersonel.

- 101 - Displegañ "Ober bigi koad",  
amzer-andremenet, displegadur personel.  
amzer-dremenet-strizh, disp. dibersonel.
- 102 - Displegañ niverenn 3 ar gentel dre skrid,  
en amzer-da-zont hag en amzer-dremenet-strizh.

## V. AR GERIADUR: an diduamantou.

- 1 - ar sonerezh. Anvit ar binvioù-sonerezh a anavezit: piano, violoñs, telenn, ar vombard, an daboulin, an daboulin vras, ar gitar, ar binioù, an drompilh, ar c'horn, ar c'hornboud, an ograou, ar flaut, ar c'hwitell.  
Anvit ar binvioù o deus sonioù skiltr, boud.  
Peseurt diforc'h a zo etre "soner" ha "sonaozour" ?  
an daou ster a vez gant ar ger "muzisian", (muziker; muzikour)

- 2 - Ar c'hoariva. Petra a blij deoc'h ar muiañ, ar sinema pe an teatr ?

Peseurt diforc'h a zo etre un drama hag ur pezh-fentus ?  
Petra a ra an arvesterien pa blij dezho ar c'hoari, pa ra berzh ar pezh ? (stlakañ o daouarn ) ha pa ne blij ket ? (c'hwibanat).  
Anvit ar pezh a weler en-dro d'al leurenn: ar stign, ar vevenn, ar c'hinkladurioù.  
Peseurt diforc'h a zo etre un "diviz" hag un "arvest" ?  
Petra a ra ar c'huzuliker ?

Poelladennoù. 103 - Displegit er pevar amzer eñ :  
Stlakañ en daouarn a ra an arvesterien d'ar c'hoarierien.

104 - Savit e 10 linenn bennak un diverradur eus " Pemoc'h Yann ha Janed".

( kendalc'h ar bajenn 43.)

## V. AR GERIADUR: ar gambr-gousket.

Kentel .1- Anvit an arrebeuri a weler en ur gambr-gousket  
annezet-mat: ar gwele, an daol-noz, ar armel (ar pres),  
ar c'hadorioù, ar gador-vrec'h, ar vatelasenn, ar winterelleg.

- 2 - Petra a weler war an daol-emwalc'hiñ ? : ar gibell gant ar potev, ar soavon, an toaz-dent, ar grip, an diluzierez, ar melezoù, ar serviedenn gant ar vanegenn, ar broust-dent hag ar broust-blev, ar skarzher-ivinoù.

- 3 - Anvit an dilhad-gwele: ar pallennoù, al liñselioù, an toagennoù, ar pennwele, ar plueg-treid, ar plueg-penn, ar golo-gwele.
- 4 - Peseurt dilhad a wiskit evit an noz, ur c'hrez-noz pe ur gwiskamant-noz (pijama) ?
- 5 - Gant peseurt benveg e lam ho tad e varv, gant ur razour tredanek pe un aotenn ( ar gontell, pe ar rozell ) ?

Poelladennoù. 115 - Aozit e 10 pe 12 linenn un diverradur eus " Kouskerien Vat".

- 116 - Danevellit un hufvre bennak graet ganeoc'h nevez ' zo.

LENNADENN 16 : KOUSKETIEN VAT.

Janed ar Gall

1 - En un tiig-soul e-traoù ar bourk e veve sioul daou gozhiad, hag he fried Yann Goarnison. Sioul e vevant diwar nebeut. Ne savent ket abred eus o gwele, dreist-holl e-pad ar goañv, pa vez hir an nozioù pa louet gouloù an deiz dindan ar c'houmoul poum-ner.

Ur sadorn d'abardaez, goude ar skol, e troas e penn Saig hag e gamladed reiñ tu d'an daou lezirek d'ober ur c'houk mintin a-zoare an deiz war-lerc'h, ar sul anezhi.

2 - Hag i da vont war o farlochoù, dre an noz tefval, da stoupañ gant ur pennwele kozh ar prenestr bihan n'oa nemetañ o reiñ sklerijenn d'an ti. Stouvet e voe ivez gant un dornad foenn an toull-kazh en nor, ma ne zeufe ket dre eno ur berad gouloù goude tarzh an deiz. Hag hon hailhevoded d'o gwele.

Antronoz da gouiz an ofereñn-bred, e oa didrouz ar vandenn e toull an nor o sela. - ou ha neket liv ar c'hañv a oa war o fas.

3 - Klevet e veze a vare da vare Yann o tic'henaouegif en e wele kloz.

- N'out ket dihun c'hoazh, Janed ? me gav hir-hir an noz-mañ.  
- Me 'm eus c'hoant kousket, Yann ! a responte Janed gant he mouezh habask.

Hag e tave an daou adarre. A-benn ur pennad e klevet Yann o vazailhat gwashoc'h-gwazh.

4 - Unnek eur hanter ' oa pa savas Janed da zigerif an nor da welout hag ankounac'haet en dije an heol e-unan diblouzañ. Ker-kent ha klevet ganto trouz e toull an nor, an hailhevoded, evel ur vandenn Filiped, o doa steuziet a-dreñv ar c'hleuzioù tro-war-dro. Reudif a raent kement e c'hoarzhent. Hag an dud o skeif etrezek o lein, tapet ganto an ofereñn-bred, a rae selloù estonet ouzh Janed ha Yann a-sevri o tibikouzañ o daoulagad war an treuzoù pa sone kreisteiz.

( tennet eus "Tonton Saig", gant F. ELIES, "Al Liamm", niv. 62 )

I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. ( beure, palavaroù pe daouarn, an deiz war-lerc'h, golvaned, sevel, lamponed, lochore. )

2 - Ar ger "louet". Petra a dalvez ar ger-se amañ ? Daoust hag ez anavezit ur ster all dezhañ ? ar fourmaj a zo louet. Petra' zo warnañ i louedadur.

3 - Klaskit gerioù stummet gant toull evel toull-kazh : toull-ker, toull-bez, toull-fri, toull-gouzoug, toull-strap, toull-gof, toullgofañ.

4 - Klaskit liester "kozhied" : kozhiaded, kozhidi. Roit skouerioù all : peroked, perokidi, merdead, merdeidi, tremeniad, tremenidi, boked, bekidi, houad, hoidi;

II. AR MEMOZIOU.

1 - Daoust ha lezirek e oa an daou gozhiad ?

2 - Penae e oa deuet a-benn an hailhevoded da herzel ouzh ar sklerijenn da vont en ti ?

3 - Perak e raent se ?

4 - Daoust ha plijadur o doa bet antronoz vintin ? Peseurt gerioù hen diskouez mat ?

III. AR YEZHADUR : an anv-gwan-perc'hennañ.

Kentel. 1- Da betra e servij ar gerioù lakaet dirak gwele ?  
va gwele a zo tomm hor gwele a zo tomm  
da wele a zo tomm ho gwele a zo tomm  
e wele a zo tomm (he gwele...) o gwele a zo tomm.  
Da lavarout da biv eo ar gwele, piv a zo perc'henn warnañ.

2 - An anvioù-gwan-perc'hennañ a dalvez da zisplegañ piv a zo perc'henn war un dra bennak: va gwele a zo tomm.

3 - Klaskomp an anvioù-gwan-perc'hennañ en dilinennad 1.

4 - Petra a c'hoarvez goude an anv-gwan-perc'hennañ ?  
Kemmadurioù. Displegomp ar frazennoù-mañ:

va c'hamb a zo brav	Hor c'hamb a zo brav
da gambr a zo brav,	ho kambr ....
e gambr a zo brav ( he c'hambr... )	o c'hambr....
va frenestr a zo ledan	hor prenestr a zo ledan.
da brenestr a zo ledan	ho prenestr ....
e brenestr ( he frenestr... )	o frenestr.....
Va taol a zo bihan	hon taol a zo bihan
da daol a zo bihan	ho taol....
e daol... ( he taol... )	o taol....

Poelladennoù. 104 - Displegit ar frazennoù-mañ :  
va c'hador a zo nevez .( kador )

105 - Va fallennoù a zo tomm. (pallen )

106 - Va gouloù a zo marv ( gouloù )

107 - Diskrivit an dilinennad 1 hag islinennit an anvioù-gwan-perc'hennañ.

108 - reizhskrivadenn : dilinennad 1 (dreist-holl, goañv, ar c'houmoul, poumner, abardaez, a-zoare, war-lerc'h.)

IV. AR VERBOU : amzer-dremenet-ametritz.

Kentel. 1 - verb kaout: me am eus bet ur gwele  
ur gwele am eus bet ,  
bet am eus ur gwele .

verb bezañ : me a zo bet fur verb hadañ : me am eus hadet gwinizh.  
fur ez on bet , gwinizh am eus hadet  
bet ez on fur. hadet am eus gwinizh

verb mont : me a zo aet da gousket gouzout: me am eus gouezet  
da gousket ez on aet en em walc'hiñ.  
aet ez on da gousket en em walc'hiñ am  
eus gouezet.

verb ober: me am eus graet ur c'houk  
ur c'houk am eus graet gouezet am eus en  
graet am eus ur c'houk. em walc'hiñ.

Poelladennoù. 109 .Displegit ar verb:kaout ur gwele tomm  
110 . ar verb : bezañ fur ha sentus.


111- ar verb: hadañ gwinizh

112- ar verb : mont abred da gousket.

113- ar verb : gouzout an em walc'hiñ.

114- ar verb: ober ur c'houk hir.

( kendalc'h war ar bajenn 41 )



1 - Kaer am boa, ne oan ket evit en em ober gant va buhez nevez. C'hwerf e kaven va boued, hir an amzer, trist e vezen dreist-holl o soñjal e oan bountet en ur prizon, kalet e kaven kevout ar vistri o c'hourdrouz hep paouez, oc'h hegan, o kastizañ, gant o daoulagad warnoc'h noz-deiz. Graet e oa ganin va soñj tec'hout kuit.

2 - Un abardaez a viz genver 1890, prestik goude distro deiz kentañ ar bloaz, August Ar Roc'h ha me, hon daou ken heuet an eil hag egile gant ar vuhez skolaj, a zivizas mont kuit etrezek ar gêr. Tostaat a rejomp goustadik ouzh ar porrastell, ha pa oa troet e gain gant ar porzhier, en em siljomp dre an nor vihan er-maez. Setu ni war an hent bras. Anaout a raemp dre belec'h degouezhout war hent Karaez. Treuziñ a rejomp kêr en ur sellout war hol lerc'h ur wech an amzer gant son e vefed deuet war hor seuliou d'hon dastum, ha setu ni war an hent mat. Yen e oa; erc'h a gouezhe stank, hag ar c'herzhed a oa diaes war an douar skornet.

3 - August a sellas ouzh e vontr : pemp eur. Dek lev hor boa d'ober da vont da Garnoed; gant kerzhout ul lev an eur, ne oamp ket tost d'en em gavout. Ba ! lojañ a rafemp en un ti bennak.  
- Pegement ac'h eus August ?  
- Ugent real.  
- Ha me ur skoad. Sell eizh lur dimp. A-walc'h eo da vont betek ar gêr. Dre ma kerzhemp evelato, soñjezon teñval a save d'hor penn. Peseurt degemer a vefe graet dimp ? Kroz emic'hañs, hag ar skourjez. Marteze e vefemp kaset d'ur skolaj bennak all. N'eus forzh. Decmp atav.

I. STUDI. AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islineennet. (hegasañ, skuizh, menozioù).
- 2 - Penaos eo bet stummet ar ger "porrastell" ? porzh - rastell. Klaskit el lennadenn ur ger eus an hevelep rumad : porzhier. Peseurt labour eo e hini ?  
Klaskit gerioù stummet gant "porzh" : porzh-mor, porzh - brezel, porzh-mac'hadourezh, porzh-houarn, aerborzh.
- 3 - Daoust ha ez anavezit ur ster all d'ar ger "eur", disheñvel-mik diouzh an hini en deus al lennadenn ? Grit ur frazenn gantañ er ster-se: "Bet eur o vale".

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak e oa heuet an daou yacuank gant o buhez-skolaj ?
- 2 - Penaos e tec'hjont kuit ?
- 3 - Pegement a hent o doa d'ober ?
- 4 - Ha kalz a arc'hant o doa ganto ?
- 5 - Daoust ha sur e oant da dec'hout evit mat eus ar skolaj ?
- 6 - Petra a oa ouzh o gortoz ?

III. AR YNZHADUR : ar raganv-perc'hennañ ha diskouezañ.

Kentel .1.- ar paotr a oa skuizh gant e vuhez er skol, me a zo laouen gant va hini, te a zo laouen gant da hini, eñ a zo laouen gant e hini, hi a zo laouen gant hec'h hini, ni a zo laouen gant hon hini, c'hwil a zo laouen gant hoc'h hini, int a zo laouen gant o hini.

An daou c'her "va hini" a zo lakaet e-lec'h "va buhez"; ar strollad-se a vez anvet ur raganv-perc'hennañ.

2 - Ar raganv-perc'hennañ a vez lakaet e-lec'h un anv hag a zispleg war-un-dro piv a vez ar perc'henni: E votou a zo gleb, va re a zo sec'h.

3 - Displegit : e votou a zo gleb, va re a zo sec'h.

4 - Sellit ouzh ar baotred o risklañ war ar skornenn, hemañ a zo reut, hennezh a zo ouesk, henhont a zo mibin.

Sellit ouzh ar merc'hed o tommañ : houmañ a zo bihan, honnezh a zo krenn, hounhont a zo bras.

Sellit ouzh ar vugale o c'hoari gant an erc'h, ar re-mañ en em gann, ar re-se a ruih ur voull, ar re-hont a ra ur boullom-erc'h.

Ar gerioù "hemañ...houmañ...ar re-mañ...a zo bet lakaet e-lec'h ar "paotr-mañ...ar plac'h-mañ...ar vugale-mañ", anvet e vezont raganvioù-diskouezañ.

5 - Ar raganvioù-diskouezañ a vez lakaet e-lec'h an anv hag e ziskouez war-un-dro : hemañ a zo reut.

6 - Displegit an dilinennad 1 eus al lennadenn en holl c'hourioù an eil war-lerc'h egile. Da skouer: "Kaer az poa, ne oas ket..."

Foelladennoù. 117 - Diskrivañ an dilinennad 1 en ur islinennañ ar verboù implijet en amzer-andremenet.

118 - Diskrivañ an dilinennad 1 ha lakaat ar verboù en eil gour unan.

119 - reizhskrivadenn: dilinennad 1. (kaer, c'hwerf, bountet, prizon, o c'hourdrouz, paouez, warnoc'h, noz-deiz, graet, tec'hout)

IV. AR VERBOU: an amzer-beurdremenet.

- Kentel. 1 - verb kacout: Me am boa bet ur vantell domm  
Bet am boa ur vantell nevez  
Ur vantell nevez am boa bet.
- 2 - verb bezañ.  
Me a oa bet raouliet  
Bet e oan raouliet  
Raouliet e oan bet.
- 4 - verb mont:  
Me a oa aet d'ar sportoù-goañv,  
Aet e oan d'ar sportoù-goañv,  
D'ar sportoù-goañv e oan aet.
- 3 - verb hadaf:  
Me am boa hadet kerc'h  
Hadet am boa kerc'h,  
Kerc'h am boa hadet.
- 5 - verb gouzout:  
Me am boa gouezet riklañ  
Gouezet am boa riklañ  
Riklañ am boa gouezet.
- 6 - verb ober:  
Me am boa graet ur boulom-erc'h  
Graet am boa ur boulom-erc'h,  
Ur boulom-erc'h am boa graet.

Poelladennoù.121 - Displegit dre skrid unan pe unan eus ar verboù-se.(tri stumm.)

122 - Lakait diilennad 1 al lennadenn en amzer-beurdremenet.

V. AR GERIADUR: ar pevar c'houlz-bloaz.

- Kentel.1 - Anvit pevar c'houlz ar bloaz:an nevez-amzer,an hañv,an diskar-amzer,ar goañv.
- 2 - hag an 12 miz:genver,c'hwevrer,meurzh,ebrel,mae,mezheven,gouhere,eost,gwengolo,here,du,kerzu.  
Lavarit e peseurt mizioù ez eus skol hag ehan-skol.
- 3 - Penaos ez anver deiz kentañ miz mae ? kala-mae pe kelig an hañv,  
ha deiz kentañ miz du :kala-goañv.  
Daoust hag ez anavezit daou c'her all eus an hevelep rummad: kalanna ( derou-mat) ha kalander (deiziadur ).
- 4 - Renkit ar gerioù-mañ hervez urzh an amzer : arc'hoazh,goude-arc'hoazh,hiziv,bremañ,dec'h,neizheur (dec'h-da-noz),derc'hent-dec'h, bremaik ( prestik,bremañ-souden ), emberr.
- 5 - Lakait hiziv pe feteiz en div frazenn-mañ:  
.....en eus labouret mat. ....e labourin mat.
- 6 - Pet deiz a zo er bloavezh bizeost ?
- 7 - Renkit ar gerioù-mañ hervez urzh an amzer: abardaez,serr-noz,beure (muntin),goude-kreisteiz (enderv),kreisteiz,sav-heol ( tarzh an deiz, strink-deiz ).
- 8 - Pere eo ar mizioù du ?
- 9 - Penaos e vez muzuliet an amzer ? gant an horolaj,ar montr-brec'h,pe an eurier.
- 10 - Anvit lodennoù an horolaj:momedar,pouezioù,redoù,an dremm gant an nadozioù.
- 11 - Petra a blij d'ho tad ober e-pad an hañv ? un hun-kreisteiz,pe un ec'hoazh.

Poelladennoù.123 - .....e oa brav an amzer.Gwir eo emacomp e .... miz ....hag ez eo krog mat.....Pegen disheñvel diouzh .....Koulskoude ar vugale a blij dezho.....en abeg d'ar .....a vez kinniget dezho da vare Nedeleg.Erwan en deus dizoloet er c'hrignol un.....kozh.An ....a zo lous,an....torret, met tu a zo avat da c'hoari gant ar .....

124 - Lavarit pehini eus ar pevar c'houlz-bloaz a blij deoc'h ar muñh ha displegit perak.

LENNADENN 18 : AN TEC'H ( kendalc'h ).

- 1 - Neuze e tegouezhas ganimp un den war an oad.  
- Da belec'h ez it evel-se ,daou ganfard ?  
- D'ar gêr .  
- Pelec'h emañ ho kêr ?  
- En Kallag ,mezomp-ni,rak ne c'houlomp ket diskuliañ a belec'h e oamp.  
- N'oc'h ket erru er gêr hiziv,emezaf.Mer kirit,bugaligoù,e teout dumañ ganin.Me a zo ahont o chom e Maner-ar-Glesker.Me a lavaro d'am gwreg aozañ deoc'h pep a vannac'h scubenn ha pep a wela, ha warc'hoazh ez eot kuit adarre.
- 2 - Ar c'hinnig-se a lezas ac'hanomp etre daou soñj.Met a-greiz-holl,setu me o kounañ istor Meudig Bihan hag ar Roñfl a zebre bugale.A dra sur,ar gwaz-mañ,mar pede ac'hanomp da vont da lojañ d'un ti anvet ken digristen ha Maner-ar-Glesker, a oa en e benn ar c'hoant d'hon lazhañ,hag hon sallañ en ur charnell.Ha me lavarout d'Ar Roc'h:" Diwallomp diouzh hemañ,n'omp ket gantañ." Ha ni hon daou da gemer hon lañs ha kuit d'an daoulamm etrezek Mousteru.
- 3 - An noz a oa kouezhet;teñval e oa evel en ur sac'h pa zegouezhjomp e bourk Mousteru.An tier a oa c'hoazh goulou war elum enno.Antreal a rejomp en un ostaleri a anavezomp.Sofj am eus eus anv plac'h an ti: Anastazi e oa hi.Ur plac'h yaouank koant ha drant, bepred ar c'hoazh war he diweuz . Hi ivez a anaveze ac'hanomp diouzh ar gwel,rak aet e oamp en hec'h ostaleri da evañ ur bannac'h kafe tomm pa oamp o tistreiñ goude ehan-skol Deiz Kentañ ar Bloaz. ( da genderc'hel ).

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet.(muzelioù, d'ar red,laouen,war enacu,vakañsoù, soñjal e )
- 2 - Klaskomp gerioù stummet gant "lamm":lamm-penn,lamm-choug-e-benn,lamm-distag,lamm-krenn,lamm-gavr,lammgroaz,lammour.
- 3- Peseurt diforc'h a zo etre "mont d'ar gêr" ha"mont e kêr" ? Klaskit anvioù deveret eus "kêr":kêriad (kêriz),kêriadenn, kêrbenn . Klaskit gerioù ar gerioù fentus-mañ: kerdrubuilh,kervouzhig, kerhun,keretra,pe kernebsudig.
- 4 - Perak e lakaer un tog-kognek (^) war ar ger "kêr" ? War beseurt gerioù e vez lakaet c'hoazh ? Pêr,hêr,stêr; e giz-se e vezont diforc'h'het diouzh : ker,per,her,ster.

II. AR MEMOZIOU.

- 1 - Perak ne fellas ket d'an daou ganfard degemer kinnig an den kentañ ?
- 2 - Perak e oant anavezet en ostaleri Mousteru ?
- 3 - Peseurt anv a zouge ar plac'h,yaouank ?
- 4 - Penaos e oa ?
- 5 - Daoust hag e c'hellfec'h ijinañ un diskoulm d'ar gontadem ?

III. AR YEZHADUR : an damziskouezañ.

Kentel .1- " Un deiz bennak e tec'has kuit an daou baotr, hep gouzout da zen abet. Ar bed a-bezh a oa dezho. An holl vistri a redas war o lero'h. Pep ti ha pep park a voe furchet. Nikun ne gavas anezho. Ar baotred n'o doa ket kemeret an hevelep hent, met unan all. An eil re hag ar re all a oa skuizh-divi.

Ar gerioù islinennet ne verkont netra resis. Implijet e vezont evel anvioù-gwan, pe evel raganvioù e-lec'h an anvioù. Grit ur roll eus an anvioù-gwan, hag unan all eus ar raganvioù.

2 - Klaskit 'an anvioù-gwan-damziskouezañ e frazenn diwezhañ an dilinennad 1. ( trois ar frazenn e galleg ! )

3 - Klaskit ar raganvioù-gour en dilinennad 2.

4 - An gerioù-damziskouezañ ne verkont netra resis. Implijet gant un anv e vezont anvioù-gwan-damziskouezañ; implijet en o unan e-lec'h un anv e vezont anvet raganvioù-damziskouezañ: un deiz bennak e tec'has an daou baotr; nikun ne gavas anezho.

5 - Lakaomp "an holl" dirak ar gerioù-mañ, ha greomp frazennoù; da skouer : an holl gerent a zo marv. tud, prenestroù, geot, gwer, dent, breudeur, mammoù.

Poelladennoù. 125 - Diskrivit an destenn (kentel, 1) hag islinennit ur wech ar raganvioù; ha div wech an anvioù-gwan-damziskouezañ.

126 - Islinennit an dilinennad 2 (lennadenn) en ur islinennañ ar raganvioù-gour.

127 - Grit dre skrid an niverenn 5 eus ar gentel.

128 - An destenn studiet uheloc'h ( kentel, 1 ) . (bennak, e tec'has kuit, o lero'h) ; pe an dilinennad 2.

IV. AR VERBOU : an amzer-da-zont-kent.

Kentel .1- "Elumet em bo ar goulou a-raok ma teuio an noz." Diskrivit ar frazenn-se hag islinennit ar verboù.

Petra a c'hoarvezo da gentañ ? Petra, da c'houde ? Ar verb kentañ a zo implijet en amzer-da-zont-kent.

2 - verb kaout: Me am bo bet ur gleuzeur-wele, Bet am bo ur gleuzeur-wele, Ur gleuzeur-wele am bo bet. verb bezañ: Me a vo bet sklerijennet, Bet e vin sklerijennet, Sklerijennet e vin bet.

ar verb hadañ: Me am bo hadet ed, Hadet am bo ed, Ed am bo hadet. ar verb mont: Me am bo enaouet ar goulou, Enaouet am bo ar goulou, Ar goulou am bo enaouet.

verb gouzout: Me am bo kempennet an tredan, Kempennet am bo an tredan, An tredan am bo kempennet. verb ober: Me am bo graet stered, Graet am bo stered, Stered am bo graet.

Poelladennoù. 129 - Unan pe unan eus ar verboù-se; tri stumm.

130 - Displegit ar frazenn-mañ:

Pe savo an heol, am bo dija labouret kalz.

131 - Lakait an dilinennad 3 en amzer-da-zont.

V. AR GERIADUR : ar sklerijenn.

Kentel .1- Pennaos e vez sklerijennet an douar en deiz ? (heol). Petra a weler war an oabl da darzh-an-deiz ha da serr-noz ? ar ruzell-veure hag ar ruzell-noz.

2 - Pennaos e vez sklerijennet an douar en noz ? gant al loar hag stered. Daoust hag ez anavezit ur steredenn bennak ? steredenn an hanter-noz (sterenn), gwerelaouen.

Ha gwelet hoc'h eus bet "hent Sant Jakez" ("Bali Sant Jaim, hent Bulad") ? Anvit ur steredenneg bennak: karr-kamm bras, ar c'harr-kamm bihan, ar yarig,

3 - Peseurt diforc'h a zo etre: steredenn-red ha steredenn-lostek; etre planedenn hag eil-blanedenn (loarem) ?

4 - Renkit hervez an urzh doareoù al loar: ar c'hann, an diskar, ar c'hresk, an nevez-loar.

5 - Pennaos e c'heller sklerijenniñ an ti d'an noz ? gant kleuzeurioù: ar gleuzeur-tredan, ar gleuzeur-betrol, ar goulou-koar war ar c'hantolor. Pehini eo ar skedusañ ?

Daoust hag ez anavezit gouleier all ? ar veilherez (al lutig ruz), al letern, ar goulou-godell (al lamp-godell), an tour-tan, ar goulou-straed.

6 - Pennaos eo sklerijennet ho marc'h-houarn ? gant un dredenarez, (an dinamo), ar goulou-melen, ar goulou-ruz, an neudenn.

7 - Peseurt binvioù bihan a ya war-raok gant tredan ? ar fer, ar vilin-gafe, ar razoar, ar radio (ar skingomzerez), an troer-pladennoù, ar suner-poultr, ar mekanik-de-wriat, ar mekanik-de-gannañ.

Poelladennoù. 132 - Lakait ar gerioù avank. Goude koan eo aet Yannig da vale war e varc'h-houarn. Emañ an ... o tont. En oabl e wel dija ... o lugerniñ ha du-hont er sav-heol eo krog al ... da bignet. Er bourk ez eo bet elumet ar ..... Diskennet eo ar paotr evit lakant e ..... da vont war-raok. Ar ..... a ro sklerijenn, met ar .... a chom diluf; moarvat ez eo torret an .... hag an .... ne zou ken betek ar glogorenn vihan. 133 - A-greiz-holl eo bet c'hwitet ar red-tredan e-pad ar veilhadeg. Danevellit ar pezh a zo bet c'hoarvezet.

(Kendalc'h ar bajenn 33)

5 - Taolit evezh ouzh: gwini, gwinienn, ur bod-gwini = ar plant. rezin, rezinenn = ar frouezh.


6 - Renkit ar gerioù-mañ en ur gregiñ gant kriz: taoulet, brein, azv, daret.

7 - Peseurt diforc'h a zo etre ar per hañvek hag ar re goañvek ? 8 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ: diginviñ, dibreñvedih, imboudañ, bleunniñ, dareviiñ, kutullh, hejañ, bashata, gwalennata, sec'hañ, peilhañ, gwaskañ, diveinañ.

Poelladennoù. 1 - Savit gant verboù an niv. 8 pemp frazenn en amzer-dremenet-striñ.

2 - Savit un diverradur eus ar gontadenn "Per ar Skol".

3 - Displegit penaos an en gener ho mamm d'ober konfigerurioù.



- 1 - Noz vat ! emezomp-ni en ur zont en ti.
- Sell 'ta ! emezi, c'hwi an hini eo ? Petra ' rit dre aze d'an eur-mañ ?
- O vont d'ar gêr emacomp.
- Ma, deuit d'azezañ e korn an tan da dommañ. Er c'hoagn e oa ur paotr kozh blev gwenn, an tad emichañs.
- O'hwi ' zo daou labous avat, emezañ. Aet oc'h kuit ?
- Ya, emezomp-ni.

Ar paotr kozh a zirollas da c'hoarzhif. N'en doa ket an aer da gacut tamm truez ebet ouzh hor stad. Anastazi a oa dousoe'h he c'halon.

- 2 - A-bean m'hor boa karget hor c'horf, ha prest da vont da gousket asambles en ur gwelc-kloz, e voe klevet ur wetur o ruilhal war an hent skornet, hag o chom a-sav dirak dor an ostaleri. Raktal e oa an toucher hag ur beleg en ti. Ar paotr kozh en e gogn a zalc'he da c'hoarzhif uhel, pezh a lakae droug enomp. Mar hor bize kredet lavarout e jeu dezhañ...

- 3 - "Ac'hanta ! daou ganfard, eme ar beleg, me ho kay a-benn ar fin. Savit alese, ha deuit ganin diouzhtu war ho kiz." Ha ni da vlejal, da ouelañ, da souzañ a-dreñv; mann d'ober. Dorn an Aotrou Bezvoet a oa evel un durkez, pa groge en hor brec'h, ne oa ket tu da ziskrapañ. An abad a droc'has berr hag a choukas ac'hanomp er c'harroñs peder-rod en doa feurmet. Pignat a reas evel un archer en hor c'hichen, ha "yo" da Wengamp, e-lec'h ma errujomp da hanternoz... Antronoz, piv a oa pinous e-barzh ar porzh-c'hoari nemet. Aogust ar Roc'h ha François Jaffrennou, deuet adarre d'o c'haoued. ( tennet eus "Envoremoù Yaouankiz" Taldir, "SAV", niv.26 )

### I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (toutek, moarvat, korn, sammas, pabor ).
- 2 - Peseurt ster a zo gant ar ger "labous" ? lampon, lakepod. Pehini eo ster gwirion ar ger ? evn. Daoust hag anavezout a rit anvioù-loened implijet e-giz-se c'hoazh ? amprevan, c'hwil ( c'hwil-du, c'hwil-derv ), marmouz.
- 3 - ar ger "chouk". Grit div frazenn gant ar ger-se: "Ar voest a zo leun-chouk"; " ar boentenn a zo chouk". hag ar ger "choug" ? an tad a zoug e vat war e choug.

### II. AR MENOZIOU.

- 1- Peseurt degemer a voe graet d'ar ganfarded gant ar paotr kozh ? ha gant Anastazi ?
- 2 - Klaskit ar gerioù a ziskoues e oa rust doareoù ar beleg en o c'heñver .
- 3 - Perak e oant pinous antronoz ?

### III. AR YERZHADUR : ar renadenn eñn ha dieñn.

Kentel .1 - " an daou baotr a zebras soubenn, d'an noz, en un ostaleri, gant plijadur". Klaskomp ar verb hag ar rener. An daou baotr a zebras petra ? pegoulz ? pelac'h ? penaos ?

- 2 - Petra a gaver etre "soubenn" hag ar verb ? netra. etre "an noz" hag ar verb ? da . etre "un ostaleri" ..... ? en etre "plijadur" hag ar verb ? gant. "soubenn" a zo ur renadenn eñn. "noz, ostaleri, plijadur" a zo renadennoù dieñn.

" da, en, gant" a dalvez da stagañ ar renadennoù ouzh ar verb; anvet e vezont araogennoù.

- 3 - Greomp frazennoù gant an araogennoù-mañ : war, diwar; ouzh, diouzh ; e , e-barzh; gant, digant, da ; dre ; a-us.

- 4 - Lakait an araogenn da dirak anvioù ar c'harioù-mañ ha grit frazennoù. Da skouer: Yann a zo aet da Gemper. Kallag, Treleven, Ploueg, Gourin, Gwengamp, Dinan, Brest, Montroulez.

Poelladennoù. 134-Diskrivit an dilinennad 2 hag islinennit ur wech ar renadennoù a verk al lec'h ha div wech an araogennoù.

135 - Grit pemp frazenn enno pemp eus an araogennoù meneget en niverenn 3 eus ar gentel.

136 - reizhskrivadenn : dilinennad 2. (c'hoarzhif, aer, keizh, bannac'h, kig sall, ruilhal ).

### IV. AR VERBOU : amzer-dremenet-kent.

Kentel .1 - " Me am boe dija debret va c'hoan, pa zeuas tadig er sal-debriñ".

Klaskit ar verboù hag o renerien. Pegoulz e c'hoarvezas an darvoudoù displeget ? en amzer-dremenet.

Peseurt darvoud a c'hoarvezas da gentañ ? E peseurt amzar emañ ar verb ?

- 2 - verb kacout:  
Me am boe bet ul lein vat,  
Bet am boe ul lein vat,  
Ul lein vat am boe bet.

verb bezañ :  
Me a voe bet seven ouzh taol,  
Bet e voen seven ouzh taol.  
Seven e voen bet ouzh taol.

verb hadet :  
Me am boe hadet boetrabez,  
Hadet am boe boetrabez,  
Boetrabez am boe hadet.

verb gouezet :  
Me am boe gouezet aozañ gwestell,  
Gouezet am boe aozañ gwestell,  
Gwestell am boe gouezet aozañ.

Poelladennoù. 137 - Grit dre skrid unan pe unan eus an displegadennoù uheloc'h.

138 - Displegit ar frazenn-mañ :  
Pa zeuas va mignon en ti, am boe dija debret va c'hoan.

V. AR GERIADUR : ar gegin.

Kentel. 1 - Peseurt arrebeuri a gaver er gegin: ar fornigell (dre c'hlaou, dre goad, dre c'haz pe dre dredan), an dommezed-dour, an dar gant pintoù an dour tomm hag an dour yen, al listrier, an armeliou, an daol, ar c'hadorioù, ar ganastell, an armel-yen, ar c'harezelladur.

2 - Anvit al listri a servij d'ho mamm d'ober ar gegin: ar pod-soubenn, an derinenn-soubenn, ar pod-kafe, ar pod-houarn, ar gaste-lodenn, ar ververez, ar billig, ar gibell, ar boutailhoù, ar founilh, an distouver, ar gloge, al loa-sil, al loa-bod.

3 - Peseurt listri a lakaer war an daol? an doubier, an asiedoù, an tasoù hag ar gwer, al loaioù, ar fourchetezennoù, ar c'hontelloù (kontilli), ar serviedennoù en o ruilhennoù, an dindan-plad, an dindan-voutailh.

4 - Peseurt binvioù a servij da naataat an ti? ar skubellenn, ar barr-skuber (palouer, broust), ar suner-poultr, an torch.

5 - Pa vez ho mamm o naataat an ti, petra a vez renket, diboul-trennet, gwalc'het, sec'het, torchet, rimiet, skrabet, barrskubet, skarzhet, skubet?

Poelladennoù. 139 - Lakait an araogennoù a vank.  
ar gegin a zo kempenn. Koant eo en gwirionez ....  
hec'h arrebeuri nevez .... koad livet sklaer, aes .... walc'hiiñ.  
N'eus netra a-ispilh .... ar vur. Pep tra a vez klenket .... an  
armeliou. Dour tomm ha dour yen a zo .... d'an dar. N'eo ket ret  
pignat .... ur gador evit tapout al listri. Tu a zo da dizhout  
pép hini anezho .... al leurenn. Ur goulou a ziskenn .... an  
doubl a-us d'ar geginerez.

140 - Aozit e 10 pe 12 linenn un diverradur eus "An Tec'h".

141 - Displegit petra a rit bemdsiz, pe a c'hellfec'h ober, evit skoazellañ ho mamm.

verb mont :  
Me a vos aet da verennañ,  
Aet e voen da verennañ,  
Da verennañ e voen aet.

verb ober :  
Me am boe graet fars-vioù,  
Graet am boe fars-vioù,  
Fars-vioù am boe graet.

LENNADENN 20 : ALANIG AL LOUARN HA LOM AN ARZH.

1 - Lammat a rejont er porzh kloz dreist ar gloued serret. An noz a oa didrouz. Er porzh e oa ur mell pengos derv, faoutet en un tu, ha daou c'henn dir a zalc'he ar faout digor bras.  
2 - "O filhor, eme Lom, krediñ a ra deoc'h eo va genou brasoc'h eget va c'horf? Nann, nann, n'eo ket. Me a car tailhañ va c'hoant hervez va ezhommou".

Lom eta a gredas Alanig. Lakaat a reas er faout e benn betek an diskouarn hag e dreid a-raok betek an daou c'hlin. Alanig a grogas diouzh e du gant e labour, hag, hep gouzout dare d'ar c'hompær, e temas an daou c'henn er-maez eus ar faout.

3 - "Aïou!" eme Lom o yudal gant ar boan en e benn hag en e dreid gwasket ha flastret gant ar faout o serriñ warno.  
- Petra a c'hoarvez geneoc'h, paeron? Grit peoc'h, pe an Aotrou Rustevel a zegouezho dezhañ dihunif.  
- O filhor karet! distardit ar faout, en anv Doue!  
Komzoù flour ar genaoueg n'o doa ket ar galloud da deneraat kalon vouzar Alanig.

4 - Lom neuze, pa welas e oa bet graet goap outañ, a grog ennañ ur fulor ruz. Diskrapat a reas gant e dreid a-dreñv, ha seul vui ma tiskrape, seul vuioc'h en doa droug, ha seul vuioc'h e kounnare, e c'harne hag e vallozhe. Kement a drouz a reas ma tihunas mestr an ti. Rustevel a lakaas e iri ar prenestr. "Piv a zo aze, emezañ. Den ne respontas anezhañ. Lom avat a gendalc'he da yudal ha da hopal. Rustevel a grogas en e vouc'hal hag a ziskennas er porzh.  
( da genderc'hal ).

I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (skrabellat, fulore, friket, kamalad, kounnar, tos).

2 - Pere eo binvioù ar c'hoador anvet amañ? ar vouc'hal hag ar genn. Displegit da betra e servij pep hini anezho.  
Anvit binvioù all implijet ganto: an heskenn, an horzh.

3 - Taolomp evezh ouzh an dro-laver-mañ :  
"seul vui ma tiskrape, seul vuioc'h en doa droug"; da lavarout eo : "pa ziskrape kalz, en deveze kalz a zroug".

Diwar skouer ar frazenn-se, savit frazennoù all gant verboù :  
seul vui ma krie, seul vuioc'h en doa poan-benn!  
seul vui ma sached, seul vui e krie!  
seul goshoc'h, seul sotoc'h!  
seul verroc'h, seul welloc'h!  
seul dommoc'h, seul falloc'h!

4 - Perak e skriver "ar genaoueg" gant ur "g" ?  
an anv "genaoueg" a ro "genaegegiñ", ober e c'henaoueg;  
"brezhoneg" "brezhonegiñ", komz brezhoneg;  
"mad" "madelezh";  
"droug" "drouglezh";  
met "genaouek" "genaegekoc'h";  
"brezhonek" "brezhonekoc'h";  
"mat" "en em vataat eus unan bennak";  
"drouk" "droukokoc'h", "droukast!"

## II. AR MENOZIOU.

- 1 - Petra a zo e-barzh ar faout ?
- 2 - Perak e tenn Alanig an daou c'henn ?
- 3 - Petra a zegouezhas ?
- 4 - Piv a zeuas war sikour Lom ?

## III. AR YEZHADUR : ar rannig-verb.

Kentel.1 - Diskrivomp ar verboù-mañ tennet eus an dilinennad 1.  
" an noz a oa didrouz ", " lammat a rejont er porzh ",  
" er porzh e oa ur mell pengos ", " daou c'henn dir a zalc'he ".  
Petra a gavomp dirak ar verboù-se ? a pe e , a vez anvet  
ar rannig-verb.

2 - Grit ur groaz dindan ar rener pa'z eus tro. Petra hoc'h eus  
merzet ? a implijet pa vez ar rener  
dirak ar verb.

Displegit ar verb : Me a had Yann a had  
Pa vez brav an amzer e hadan.

3 - Kemeromp an eil verb : " lammat a rejont ". Pelec'h emañ ar  
rener ? Perak neuze skrivañ " a rejont " ? ar renadenn eñ  
" lammat " a zo dirak ar verb.

4 - Lennit an dilinennad 2, ha klaskit ar verboù a zo implijet  
gant ur rannig.

5 - Ar rannig-verb a a vez implijet pa vez ar ger-rener, pe ar  
renadenn eñ dirak ar verb: an noz a oa didrouz; lammat a rejont.

Notenn. ar stummoù am hag em eus ar verb "kaout" a c'hell  
bezañ implijet dres evel ar rannigoù a hag e .  
Lennet em eus al levr bras al levr bras an eus lennet  
Kollet em boa ur c'hi ur c'hi bras an boa kollet.

Poelladennoù. 142 - Diskrivit an dilinennad 2 hag islinennit  
ur wech ar verboù implijet gant ar rannig a ,  
ha div wech ar verboù implijet gant ar rannig e .

143 - Lakait a pe e . Lom...lakaas e benn er faout .  
E benn ....a lakaas Lom er faout. Er faout...lakaas e benn.  
Lakaat...reas e benn er faout.

144 - Grit frazennoù heñvel gant : louarn, ternañ, an daou  
c'henn, eus ar wezenn.  
Al louarn a dennas an daou c'henn eus ar wezenn.

145 - Reizhskrivadenn: dilinennad 2. ( filhor, deoc'h, tailhañ,  
diskouarn, a-raok, ar c'hempaer, c'henn, er-maez )

## IV. AR VERROU : an doare - gourc'hemenn.

Kentel. 1 - " Grit peoc'h ! " Piv a gomz ? Petra a ro d'ar  
bleiz ? ( un ali ).

Ho mamm a lavar deoc'h alies: " Deus amañ diouzhtu ! ".  
Pa roer un urzh , pe un ali, d'unan bennak, ez implijer an  
doare-gourc'hemenn.

2 - Klaskit en dilinennad 3 ur verb all an doare-gourc'hemenn.

3 - ar verb bezañ: verb kaout :  
bez hegarat! Az pez un heskenn lemm !  
bezomp hegarat! Hor bezet un heskenn lemm !  
bezit hegarat! ho pet un heskenn lemm!

verb hadañ:  
Had gwinizh mat !  
Hadomp gwinizh mat !  
Hadit gwinizh mat !

verb mont :  
Kae da geuneuta !  
Homp da geuneuta !  
It da geuneuta !

verb gouzout : verb ober :  
Gouez diskourrañ ervat ! Gra dalc'hmat da zevel !  
Gouezomp diskourrañ ervat ! Groump dalc'hmat hon devar !  
Gouezit diskourrañ ervat ! Grit dalc'hmat ho tever !

Poelladennoù. 146 - Grit dre skrid unan pe unan eus ar verboù-  
se, dreist-holl 1, 3, 4, 6 .

147 - Displegit en doare-gourc'hemenn ar frazennoù-mañ :  
Kemerout un heskenn vras , mont d'ar c'hoad, ha bezañ kalonek.

## V. AR GERIADUR : ar meuzioù.

Kentel.1 - Petra a vez evet ha debret gant an dijuni ? kafe,  
laezh, chokolad, bara hag amann, bara kras , krazennoù.

2 - Petra a c'heller kemer evel rakveuzioù ?

saladenn yen : avaloù-douar, tomatez, viou  
kilhevardon : kig-sal, morzhed-voe'h, pastez  
pesked : pesked yen , pesked-mir pe grestenneged .

Petra a servijer da goan ? soubenn gant bara pe doazennoù.

3 - Gant petra e vez temzet ar saladenn ? eoul, gwinegr, holen,  
pebr, sezo, mailhonezem.

4 - Peseurt kig a zebrer evel meuz pennañ ?  
kig fresk : kig-bevin, kig-leuc, kig-dañvad, kig-maout.

5 - Peseurt diforc'h a zo etre scoubilh (hilienn, chaous ), chug  
ha druzoni ?

7 - Peseurt avajoù a gaver en Breizh ? dour, dour-melar, sistr,  
gwin, bier, chufere.

8 - Daoust hag e c'hellfec'h merkañ un diforc'h etre : milzin,  
figus, lontek ha marlonk ?

9 - Petra a fell d'al labourerien-douar lavarout pa implijont  
an troioù-lavar-mañ : gwastell on ; du-mañ eo bet ar yar-  
here ?

6 - Petra a zebrer e-giz dibenn-pred ? fars gant keavon,  
frouezh a bep seurt ha gwastell.

Poelladennoù. 148 - Ur pred war ar maez .  
Aet oc'h bet da vale gant un nebeut mignoned.  
Kaset ho poa ganeoc'h bitailh. Displegit penaos hoc'h eus  
en em gemeret evit prientiñ ho pred ha petra hoc'h eus  
debret.





- 1 - Lom, pa glevas mouezh an den, a ziskrapas ar pezh a c'hellas. E groc'hen a oa holl entanet hag e gorf a oa glebiet gant c'hwann an anken. Ne dalveze ket dezhañ ober bec'h. Kollet e oa Alanig ivez a grede dezhañ e oa graet gant Lom. Setu eta, pa welas Rustevel o tont, ur vouc'hal lugermus en e zorn, e lavaras d'e gompaeur : " He, Lom ! Pennaos emañ ar bed ganeoc'h ? Livirit din 'ta, ha mat eo ar mel. Goustadik, goustadik, arabat debrñ re. Setu an Aotrou Rustevel o tont da zegas deoc'h ur bannac'hig gwinn da lakaat ar pred da ziskenn. An dra-se a raio kalz a vad deoc'h. N'eo ket gwir, kompaeur ? " Hag Alanig a gemeras hent Kastell-Al-Laer.
- 2 - Rustevel, pa zegouezhas, a chomas souezhet. Un arz en e borzh ! Hep soñjal e oa aes dezhañ reiñ taol ar marv d'al loen, redek a reas d'an ostaleri da glask sikour... Ar baotred a yeas gant Rustevel. Unan a gemeras ur forc'h-hourn, unan all ur rastell, un trede un trañch. Hemañ a gemeras un horzh, hennezh ur gontell lezhañ moc'h, ar marichal ur varrenn-houarn, ar c'here ur mineoued hir ha lemm, ha meur a blac'h he c'hrog-yod.
- 3 - Lom en e spontadem a sachas kement ha kement ha ma c'hellas temañ e benn hag e dreid eus ar faout. Siwazh dezhañ ! Glac'harus e oa e stad. Blev ha kroc'hen e benn, un hanter eus ur skouarn, hag e holl ivinoh a oa chomet er pengos ! un druez e oa gwelout anezhañ gant ar gwad o redek puilh dreist e choug. A, nana, ne oa ket mat mel ar pengos derv ! C'hwerv-put e oa. Evel ar vestl.

( ALANIG AL LOUARN, gant Jakez Riou, p.p.26/27 )

## I . STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù ialinennet. ( truezus, fonnus, poan, c'hwezhet ).
- 2 - Peseurt organ eus ho korf a re ar vestl ? Peseurt liv ha peseurt blaz a gaver gant ar vestl-se ?
- 3 - Eus peseurt ger e teu entanet ? Klaskit gerioù all stummet gant "tan": anvioù, tanflamma, tangwall, tourtan, tan-foll (tan-red, tan-noz) tantad, tanijern ; verb, tanañ ; anv-gwan, tanus ( ar c'hoad a zo tanus : an tan a c'heil kregin ennañ. )
- 4 - Klaskit en dro-lavar all bennak evit "reiñ taol ar marv da unan bennak" : "obar e stal dezhañ".
- 5 - Klaskit liester "forc'h": ferc'hier (feier). Deoust hag ez anavezit liesterioù heñvel ?
 

bazh, bizhier	sac'h, seier (sec'hier)
kazh, kizhier,	roc'h, reier, (rec'hier)
falc'h, file'hier,	kloc'h, kleier (klec'hi)
garzh, girzhier,	kraou, krevier,
gaou, gevier,	glav, glaveier,
yalc'h, yile'hier,	kleze, klezeier,
	bizou, bizeier.

## II. AR MEMOZIOU.

- 1 - Perak e seblante lom bezañ kollet ?
- 2 - Diskouezit ez eo Alanig Gompaeur ?
- 3 - Petra a lakaas souezhet Aotrou ar C'hastell ?
- 4 - Klaskit micherioù an dud a zegas da lazhañ Lom.
- 5 - Diskouezit en doa gouzavet kalz al loen paour.
- 6 - Petra a soñjit eus emzalc'h Alanig ?

## III. AR YEZHADUR : an araogemoù - raganv-gour, ar raganv-gour eñ.

- Kentel .1 - "Siwazh dezhañ ! " . ar ger "dezhañ" a zo lakaat evit: da Lom. Gellout a rafan lavarout : siwazh din, dit, dezhañ (dezhi), dimp, deoc'h, dezho.
- 2 - Displegit : ar vouc'hal e zo ganin, ..... evito. ar mel a zo evidon, evidout, evitañ, (eviti), evidomp, evidoc'h, Yann a zo dirazon, dirazout, dirazañ .....
  - 3 - Er gerioù : evidon, ganin, dirazon, eo kemmesket ar raganv-gour gant an araogemoù : evit, gant, ha dirak.
  - 4 - Lennomp ar frazenn-mañ : "un druez e oa gwelout anezhañ". Gellout a ran lavarout: un druez e oa gwelout ac'hanout, anezhañ, (anezhi), ac'hanomp, ac'hanoc'h, anezho.  
Klaskit implij "anezhañ" er frazenn : renadenn eñ da "gwelout".
  - 5 - Ha koulskoude "ac'hanon": an araogem a + raganv-gour. Tu a veze bet c'hoazh da lavarout : hor gwelout, un druez e oa va gwelout, ho gwelout, da welout, o gwelout, e welout, (he gwelout) .  
Ar gerioù-se a dalvez da anvioù-gwan-bero'hennañ ha da raganvioù-gour pa vezont renadenn eñ.

- 6 - Displegit evel-se :  
 al louarn a glaskas va zouellañ,  
 da douellañ,  
 e douellañ, ( he zouellañ )  
 hor touellañ,  
 ho touellañ,  
 o zouellañ .
- 7 - Ar verb "eme" a vez displeget diwar skouer "evidon".  
 Displegit: Brav eo an amzer, emezon.
- Poelladennoù.149 - Displegit : ur bal a zo ganin.  
 150 - Un davanjer a zo warnon.
- 151 - Brav eo an amzer, emezon.  
 152 - Disul e klaskas va gwelout.  
 153 - Lakait an dilinennad 2 en amzer-da-zont.  
 155 - reizhskrivadenn : an dilinennad 2 ( a ziskrapas, e groc'hen,  
 ar vouc'hal ).

IV. AR VERBOU : an doare-divizout dibersonel.

Kentel. 1 - " Ma vefe brav an amzer, ez afe da vale".  
 Dacoust hag ez in da vale ? N'eo ket sur, un diviz a zo:  
 ma vefe brav an amzer. Verboù ar frazenn-se a zo implijet en  
 doare-divizout.

- 2 - verb kaout: me am befe ur bal, ni hor befe ur bal,  
 te az pefe, c'hwi ho pefe ur bal,  
 en en defe, i o defe ur bal.  
 hi he defe,

verb bezañ : me a vefe oberiant. verb hadañ: me a hadfe gwinizh.  
 verb mont : me a yafe da vale. verb gouzañ: me a oufe palat.  
 verb ober : me a rafe un alez amañ.

- 3 - Peurlvialañ ez implijer ar stummoù-mañ, a zo re an amzer-dremenet:  
 me am bije ur bal, me a yaje da vale,  
 me a vije oberiant, me a ouije palat,  
 me a hadje gwinizh, me a raje un alez amañ.

Poelladennoù.156 - Displegit ar verboù-se dre skrid.  
 157 - Lakait an dilinennad 2 eus al lennadenn en  
 doare-divizout.

V. AR GERIADUR: ar binvioù.

Kentel. 1 - Klaskit anvioù ar binvioù a servij d'al liorzher:  
 ar foro'h, ar bal, ar rañbal, ( ar bal-avalou ), ar falc'h,  
 ar falz, ar strep, ar gontell-gamm, ar vouc'hal, an heskenn, an  
 दौरaer, ar garrigell.

2 - Peseurt binvioù all a gaver er mereurioù: an alar gant e  
 souc'h hag e gilheroù, an ogedoù ( tramailhoù ), ar c'harr ( kirri ),  
 an dumporell, an haderez, an diaoul, ar ruilh, an traktor, ar  
 rastellerez.

3 - Gant peseurt binvioù e c'heller mediñ ? gant an droc'herez,  
 al liammerez, an dornerez, ar saverez-plouz.

4 - Peseurt benveg a c'hell ober an holl labourioù-se war-un-dro ?  
 ar vederez.

5 - Peseurt binvioù a implijed gwechall ? ar falc'h, ar freilh pe  
 ar c'houfr, ar wenterez hag ar c'hrouer.

6 - Peseurt binvioù a gaver e ti ar gov pe ar marichal ? ar  
 c'hovel, ar vegin, an anev, ar c'hevel, ar morzhol, ar viñe-taol,  
 al livn, ar gizell-houarn, an turgn, an horzh.

7 - Peseurt diforc'h a zo etre ar c'harrer, ar c'halvez, hag an  
 amunuzer ?

8 - Peseurt binvioù a gaver en o zi-labour ? ar vouc'hal, an hes-  
 kenn, ar rabod, an talar, an talar-tro, ar gizell-goad.

9 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ : lemnañ, didofignañ, dizal-  
 lañ, troadañ, troc'hañ, faoutañ, heskennat, juntañ, klotañ, strobañ,  
 dresañ, livnañ, kufivaat, lufrañ, diverglañ, gwernisañ, koarañ, livañ,  
 paperennañ, gwerennañ, diatredañ, miñsañ, munudañ, bruzhunañ, kalfichat,  
 drailhañ, malañ.

Poelladennoù.158 - Grit 5 frazenn gant ar verboù hag an anvioù-  
 mañ : lemnañ, troc'hañ, heskennat, paperennañ, bruzhunañ;  
 heskenn, falc'h, planken, ar vur, morzhol.

159. Aozit unan eus an div zanevell-mañ:

- a - Un hanter devezhiad tremenet o liorzhiñ.  
 b - Ijinet hoc'h eus bet ur c'harr. Displegit penaos ho pos en  
 em gemeret d'e aozañ ha petra hoc'h eus graet gantañ.

( kendalc'h ar bajenn 70 )

V. AR GERIADUR : ar metaloù, an ijinerezh.

Kentel.1 - Klaskit peseurt ster a zo gant pep hini eus ar gerioù-  
 mañ: kailh-houarn, houarn, dir, houarn kannel, follenn-houarn,  
 houarn staenet, houarn-gwenn, potin (houarn teuz).

2 - Anvit metaloù all : kouevr, zing, plom, staen, aluminium, nikel,  
 platin, acour, arc'hant, arc'hant-bev.

3 - Petra eo ur gouevrenn ? Klaskit krouiñ gerioù nevez diwar  
 ar skouer-se gant gerioù an niverenn 2 ( plomenn, staenenn ).

Poelladennoù.167 - Klaskit sevel frazennoù gant ar gerioù-mañ:  
 mestr-ijinerezh, ijinour, micherour, mestr-micherour,  
 uzin, labouradeg, chanter, ijinadenn. ( dre skrid 5 frazenn. )

168 - Roit e 10 pe 12 linenn un diverradur eus "Bazh Yann".

LENNADENN 22 : WAR HENT AN FOAR.

1 - Beure mat em boa kuitast ar gêr evit mont da weladenniñ ur mignon. E bourk Kaouenneg e tapis ur c'harr-boutin, leun-chouk a dud, gant un adkarr emañ tri c'hasedad moc'h bihan. A-greiz-holl unan eus ar re-se a savas ar ballenn a c'hollas e gased, a vountas e benn er-maez.

2 - Ha me da bouezañ war ar buanaer e doare da lañsañ war ar c'harr. E penn an hent e kouezhis war ur stop ha ret e voe din lezel div pe deir wetur da dremen dindan va fri. E-keit-se e reas ar porc'hellig ul lamm er-maez war leurenn an adkarr.

3 - Ha me war-lerc'h gwashañ m'hallen, met war-lerc'h e chomen, hag e ranken chom, en abeg d'an hent troidellek. Trouz a raen gant ar c'horn, hag ar c'harr a heuilhe riblenn an hent ouzh en em c'houlenn mearvat peseurt diod a oa o klask distremen en ul lec'h ken risklus. ar porc'hellig a dostaas ouzh revr an adkarr na oa talbenn a-dreñv ebet warnañ: n'helle ken nemet kouezhañ war an hent ha frikañ e benn. Pignat a reas neuze war c'horre unan eus ar c'hasedoù hag en em ledañ warnañ e-giz ur c'hi.

4 - Prest goude en em gavjomp gant ur pennad hent etin a-walc'h. Distremen a ris ar c'harr en ur ober sin dezhañ d'ehan. Santif a reas, evel just ! hag ur momez goude e teus er-maez ar blenier hag un den hag a redas d'ar penn a-dreñv. Ar porc'hellig a oa en e sav war e gased, prest d'en em zifenn diouzh ret !  
( Herve KONAN, skrid diembann . )

I. STUDI AR GERIOU.

1- Lakait gerioù all a-lec'h ar gerioù islinennet. (predig, sod, pemoc'hig, tapis, -gwele, leun-kouch  
2 - Klaskit ar gerioù a bell ouzh ar c'hirri, ha displegit ster pep hini . ( gwetur, karr, karr-boutin, adkarr, talbenn, )

II. AR ANNOZIOU.

- 1 - Penaos e teuas ar pemoc'hig er-maez ?
- 2 - Perak ne gouezhas ket war an hent ?
- 3 - Klaskit ar gerioù a daolenn nec'hamant an danevellier .
- 4 - Penaos e teuas a-benn an danevellier da sovetaat al loen ?
- 5 - Ijinit un diviz etre heajourien ar c'harr-boutin goude an darvoudig-se.

III. AR YMEZHADUR : dielfennadur .

**Kentel.** 1- Rener ar verb a c'hell beza :  
un anv : ar pemoc'h a lammas eus ar c'hased,  
ur raganv : hemañ a bignas war ar c'hased ,  
ur verb : gwerzhañ moc'h a oa aes.

2 - Renadenn ar verb a c'hell bezañ :  
un anv : ar blenier a welas ur pemoc'h,  
ur raganv : ar blenier a wale anezhañ a-bell.  
ur strollad gerioù gant ur verb :  
Ar pemoc'hig a glaskte tec'hout  
e-pad ma ruilhe ar c'harr-boutin.

3 - Dielfennomp ar frazenn-mañ: ar blenier a welas ar pemoc'h

ar blenier ger-mell stag ouzh blenier.  
a anv boutin rener da welas.  
a rannig-verb.  
a verb  
a welas ger-mell stag ouzh pemoc'h.  
ar pemoc'h anv boutin renadenn da welas. ( pe renadenn etin )  
war ar raganv a stag ar verb welas ouzh e renadenn kased.  
ar ger-mell stag ouzh kased.  
c'hased anv boutin renadenn lec'h da welas.  
( pe renadenn dietin o verkañ al lec'h ).

4 - Dielfennomp ar frazenn-mañ: Hemañ a lammas eus e gased.

5 - Evit dielfennañ ur ger e roer e natur hag e implij.

**Poelladennoù.** 1 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur lakaat "ni" e-lec'h "me".

2 - Dielfennit : ar blenier a saveteas ar pemoc'h.  
ar pemoc'h a lammas war an hent.

3 - Reizhskrivadenn: dilinennad 2. (c'harr, a-keit-se, er-maez, gased, leurenn ).

IV. AR VERBOU : an doare-divizout, displegadur personel.

**Kentel.** 1 - verb bezañ: oberiant e vefen, e vefes, e vefe,  
e vefemp, e vefec'h, e vefent,  
e vefed.

verb hadañ: gwinizh mat a had'en, a hadfes, a hadefe,  
a hadfemp, a hadfec'h, a hadfent,  
a hadfed.

verb mont : d'ar marc'hallac'h ez afen, ez afes, ez afe,  
ez afemp, ez afec'h, ez afent,  
ez afed.

2 - Displegomp ar verboù-se gant stummoù an amzer-dremenet :  
oberiant e vijen, gwinizh mat a hadjen, d'ar marc'hallac'h ez  
ajen.

3 - Displegit ar frazenn-mañ :  
Ma vefen pinvidikoc'h, e preñfen ur c'harr-tan.

**Poelladennoù.** 1 - Displegit ar verboù-mañ: aketus e vefen,  
va marc'hadourzh a werzhfen,  
d'ar stal-dilhad ez afen.

2 - Displegit niverenn 3 ar gentel.

V. AR GERIADUR : ar stalioù.

**Kentel.** 1- Anvit ar varc'hadourien-roued a gaver er vourc'h, ha  
lavarit petra a werzh pep hini enezho: baraer (pobar),  
pastezer, spiser, kiger, tavarnier, ostiz, marc'hadour-pesked,  
frouezher, liorzher, porailher (marc'hadour yer ).

2 - Displegit kemend-all diwar-benn ar varc'hadourien dilhad:  
kere (kereour), merser, marc'hadour-dilhad, marc'hadour-botoù,  
kemener.

3 - Ar varc'hadourien diankachoù-ti hag all : marc'hadour-butun,  
marc'hadour-glaou, levrier, perukenner.

- 4 - Peseurt diforc'h a zo etre tavarn hag ostaleri ;etre ostiz ha tavarnour;etre ostiz hag ostiziad ?
- 5 - Peseurt diforc'h a zo etre forn ha ti-forn ?
- 6 - Peseurt diforc'h a zo etre : paeañ war al lec'h ,darnbaeñ, kemer war zle pe war dermen ,ha peurbaeñ ?
- 7 - Klaskit an diforc'h a zo etre :gwerzhañ war c'hounid ha war goll ;gwerzhañ dre vras ha dre er munud ;gwerzhañ d'an uhelañ diner,pe diouzh ar goulou .
- 8 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ : prenañ ,marc'hata, gwerzhañ ,prizachañ,koustout ,yalc'hañ ,diyalc'hañ.
- 9 - Dacust hag ez anavezit an diforc'h a zo etre ur bilhed - bank hag ur chekenn ?

- Poelladennoù.1 - Grit un diverradur eus "Lom an Arzh hag Alanig".  
 2 - Ijinit un diviz etre ur varc'hadourez hag ur brenevez.  
 3 - Kaset oc'h bet gant ho mamm d'ober prenaadennoù .Danevellit.

( kendalc'h ar bajenn 67 ).

- Poelladennoù.1- Diskrivit an dilinennad 2 en ur islinennañ an anvioù-verb.  
 2 - Displegit ar verb "c'hoari gant an nijerez " er pevar amzer.  
 3 - Displegit ar verboù " tañva ar frouezh" ha "pesketa ur brezhel ",en amzer-da-zont dibersonel.  
 4 - Displegit dre skrid div frazenn an niverenn 8 eus ar gentel.

V. AN GERIADUR : ar beajoù.

Kentel.1-Penaos e c'heller beajiñ war zouar,war vor hag en aer?  
 marc'h-houarn,marc'h-tan,skouter,karr-tan,karr-boutin,tren,lestr,bag,;nijerez,helikopter.

2 -Grit frazennoù gant ar gerioù-mañ:porzh-houarn,an draf,an drafer,arsav,bilhed mont-dont,sal-c'hortoz,sal-brejañ,simid (simidi),stlejerez,bagon,ar c'hombod,ar c'hontroler.

3 - A-hed an hentoù hag er c'hêrioù e kaver a bep seurt skritelloù,perc ? kroaz-hent,tremen-diwallet,tremen-tren,stop,tremen-difennet,tremen-untu ,arsav-difennet,parking.

Da betra e talvez ar gouleier ruz,gwer hag orañjez ? hag ar barrennoù melen ? War peseurt tu eus an hent e tleer kerzhout? Perak ?


4 - Grit frazennoù gant ar gerioù-mañ:kabiten,martolod (merdead) treizhad (treizhidi),stur,nadoz-vor,eor,peñse,bag-saveteerezh,porzh,kas,leuveenn.

5 - Anvit lodennoù pennañ ul lestr:kouc'h,kein,araog (staon),aroz,ar wern,ar fardaj hag ar c'herdin.

6 - Peseurt diforc'h a zo etre ar gerioù-mañ:hent-bras,hent-treuz,hent-karr,hent dall,gwennoù,roundour.

Poelladennoù.1- Grit 5 frazenn gant 5 eus ar verboù-mañ:douarañ,dizouarañ,porzhiañ,diborzhiañ,divorañ,treizhañ,eoriañ,dizeoriañ,penseañ.

2 - Danevellit ur veaj bennak,war zouar,war vor,pe marteze dre aer !



1- Yann Gwenn a oa diskennet abred a-walc'h an deiz-se diwar lein an tornaod a-hed ur wenoùenn droidellek betek traezhenn Porlazo.Ne oa den c'hoazh war an eod met a-raok pell e tiredfe un nebeut peaketaerien a vicher evit mont d'ar morad war an enezenneg -se en em astenn du-hont er-maez , hag a zo arvet Ar Roc'hoù.

2 - Meur a wech en doa bet goulnnet Yann ur plas diganto hag atav e oa bet nac'het outañ.Gwelloc'h e kavent kemer ganto tud a zoare eget foeterien-hent.Met Yann en doa lekaet an e benn bezañ war an enezenneg a-raok ar besketaerien.E korn an draezhenn,nebell diouzh div pe deir bag gozh hag a chome eno da c'hoañva ha da vreiñañ,e tizolas ur vag plat hep perc'henn, evit ar mare da vihanañ.

3 - Yann a riklas ar vag war an dour,a daolas e-barzh e sac'h, ennañ peadra da zebrif ha da ourmela ,hag a lammis enni d'e dro.Ur roeviv hepken a chome ha ret e voe dezhañ pouleivat . Skuizhus e oa sur-mat,met brasoc'h e oa e blijadur,hevel na oa ouzh ur c'habiten en e sav war vourzh e lestr na vez o kuitaat ar porzh war-du ar c'heinvor. ( da gendro'hel ).

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Klaskit gerioù all da lekaet e-lec'h ar gerioù islinennet.( tud a feson,rederien-vro,kammigellek.)
- 2 - Klaskit ar gerioù a gomz eus trach ar vor,ha displegit pe-tra int ha da betra e servijont: tornaod,traezhenn,er-maez,morad,enezenneg ,ur vag plat,ourmela ,roeviv,poulevat,bourzh,lestr ,c'heinvor.

- 3 - Studiomp mone-done ar mor :  
tre a zo : ar mor a ziskenn  
dazre a zo : n'hell ken diskenn
- lanv a zo : ar mor a sav.  
gourlanv, pe gourlen a zo :  
n'hell ken sevel.
- 4 - Displegomp war-o-hed an troioù-lavar-mañ :  
ar besketaerien a zo war va lerc'h , war da lerc'h ....  
ar pesk a zo em c'hichen, en hor c'hichen,  
es kichen, en ho kichen,  
en e gichen, en o c'hichen,

## II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak ez eo bet savet Yann ken abred ?
- 2 - Perak e kemar ur vag plat ?
- 3 - Petra en deus kaset gantañ en e sac'h ? Peseurt binvioù ?
- 4 - Penaos e kas e vag war-raok ?
- 5 - Perak ez eus lorc'h ennañ ?

## III. AR YEZHADUR : Renadennoù an anv hag an anv-gwan.

Kentel. 1- " En e sav war vourzh e lestr "  
War vourzh petra emañ en e sav ? ar ger "lestr" a zo ur  
renadenn d'an anv bourzh.

2 - "Heñvel diouzh div pe deir bag hag a chome aze da c'hoañva ha  
da vreinañ". Nepell diouzh peseurt bigi ? ar re " a chome aze  
da c'hoañva ha da vreinañ."

Renadenn un anv a c'hell bezañ ur strol-  
lad-gerioù en o zouez ur verb ,da lavarout eo ul lavarenn.

3 - "Heñvel ouzh ur c'habiten". Yann a oa heñvel ouzh petra ?  
" Ouzh ur c'habiten " a zo ur renadenn d'an anv-gwan "heñvel".

4 - An anvioù hag an anvioù-gwan o devez renadennoù. Renadenn  
an anv a c'hell bezañ ul lavarenn : nepell diouzh div pe deir  
bag hag a chome eno da c'hoañva ha da vreinañ"

Poelladennoù. 1 - Echuit ar frazennoù-mañ : ar mor a zo leun a  
.....Ar paotr a oa laouen eus e.....Va breur  
a zo heñvel ouzh va.....An avaloù-mañ a zo mat da .....Ar  
skolidi a zo sentus ouzh .....

2 - Lakait ur renadenn d'an anvioù islinennet.  
Kazh..... a zo dispar da logota. Gwelloc'h egetañ eo c'hoazh ki  
.....Serrat int bet o-daou e grignol ....Met kann a zo savet  
etrezo. Bisig a zo piget war unan eus treztoù.....Ar c'hi pa'  
z eo bet skuizhet o harzhal a zo aet da c'hourvez war ur ga-  
c'had....E-keit-se al logod a c'hoarzhe e toulloù ar....

3 - Dielfennit gerioù ar frazennoù-mañ :

Yann a boulesive a nerzh e gorf.

Ar besketaerien a youc'he war penn ar c'hae.

4 - Reizhskrivadenn : dilinennad 1 .(a-walc'h, tornaod, ur wenojenn  
droidellek, traezhenn , pesketaerien, enezenneg, er-maez.)

## IV. AR VERBOU : doare-divizout , displegadur personel.

Kentel. 1- V. gouzout : pouleñvat a oufen, a oufes, a oufe,  
a oufemp, a oufec'h, a oufent,  
a oufed,  
verb ober : ur roued a rafes, a rafes, a rafe,  
a rafemp, a rafec'h, a rafent,  
a rafed.

2 - Displegit ar verboù-se gant stummoù an amzer-dremenet :  
Pouleñvat a ouijen..... Ur oued a rajen.....

3 - Displegomp ar frazenn-mañ :  
Mar goufen pouleñvat e rafes ur valeadem war vor.

Poelladennoù. 1- Displegit ar verboù-mañ :  
Pesketa a oufen ur vag a rafes.

2- Displegit dre skrid niverenn 3 ar kentel.

3 - Lakait an dilinennad 3 en doare-divizout.

## V. AR GERIADUR : ar pesked.

Kentel. 1- Klaskit anvioù un nebeut pesked-ster : karpenn, begeg,  
dluzh, silienn, eog, mandeg. ( lakait an anvioù-se al lies-  
ter : dibenn -ed )  
pesked-mor : harink, sardinenn, lizenn, garlizenn,  
rae, brezhel (brizhill), ton, moru, silienn-vor, braog (draeneg),  
meilh (moulleg), gwrac'h, touilh.

2 - Klaskit sevel frazennoù gant ar gerioù-mañ : skant, draen  
(drein), angell, skouarn (brenk).

3 - Peseurt kregrin a gaver war adoù Breizh : meskl, istr,  
brennig, rigadell, bigornenn (bigorned), ourmel, kistinenn-vor;  
peseurt kretenneged : legestr (ligistri), grih-mor,  
gavr-vor (chevrenn, chevretezh), krank, morgevidenn

4 - Penaos e c'heller pesketa ? gant ur roued, ur roued-stlej,  
ul lochetour ( roued e beg ur vazh ), un higen, al laz pe ur  
walenn, an treant ( evit ar valum, da skouer ).

5 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ : en em stlejañ, fistilhañ,  
en em angellat, lonkañ, plaouiañ, kregiñ, dantañ, pakañ, didorañ,  
salañ, mogediñ.

6 - Peseurt loened-vor a zo gludennek : ar vlonegenn-vor, ar  
stiogan ( soue, morc'hast ).

7 - Pegoulz ha penaos e pesketaer an talareged ?

8 - Peseurt evned a vev war c'hlemar mor ? gouelan (oriar),  
skrev (skrav), morvran (morvaout).

Perak ez int talvoudus evit ar besketaerien ?

Poelladennoù. 1 - Grit 5 frazenn gant verboù tennet eus an ni-  
verenn 5.

2 - Bet oc'h bet o pesketaer ur wech bennak. Danevellit.

LENNADENN 24 : UN DREIZHADENN ISKIS. ( diwezh.)

1 - Taget gant ar skuizhder, pe diskaret gant kleñved ar mor, en em bavas Yann, gourdvezet e strad e vag vihan. A-us da veg Bilfaod, e wele ar ruzell-veure o splannañ hag an heol a save tamm-ha-tamm eus donder ar mor. War an aod ar besketarrien a bigne a bep eil en o c'hanot da roeñval war-du o bigi-dre-lien, pe dre-geflusker. E vag-ñ n'he doa na lien, na keflusker, na kenderc'hel a rae koulskoude gant hec'h hent, gant red an dour, war-du ar Roc'hon moarvat; an donvor, sur-mat.

2 - Pa zihunas ar merdead, ne wele ken ledenezenn Gilbenn, na Beg Bilfaod, na bae Pempoull, nag oufig an aod-Torret. Anavezout a rae war-du ar sav-heol Beg-douar Frec'hel gant e zacu dour-tan, an hini kozh hag an hini nevez. A-dreñv dezhañ e oa ruz an oabl gant an heol o vont da guzh. N'en doa ket amzer da goll. Pouleñvat a reas a lazh-korf, betek an aod, da lavarout eo betek traezhenn Erge-Penteür ( Erquy ).

3 - N'eo ket brav douarañ en ur porzh dianavez, war ur vag laeret, hep un tamm bara na peadra da brenañ. Ha Yann a dremlennas an noz e strad al lestrig hag en deiz war-lerc'h e c'hou-tan, an hini kozh hag an hini nevez. A-dreñv dezhañ e oa ruz an oabl gant an heol o vont da guzh. N'en doa ket amzer da goll. Pouleñvat a reas a lazh-korf, betek an aod, da lavarout eo betek paeañ e zle hag al lestr-dre-dan a yeas da gerc'hat e skaf.

( Herve KONAN. Skrid diembann. )

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Klaskit gerioù all da lakaat e-lec'h ar gerioù islinennet. (bagig, foñs, motor, da goach, a nerzh-korf, lugerniñ).
- 2 - Klaskomp el lennadenn ar gerioù a denn da draoù ar mor, ha displegompe ster: kanod, roeñval, bigi-dre-lien, donvor, ledehezenn, beg, bae, oufig, tour-tan, douarañ.
- 3 - Klaskomp gerioù o kregiñ gant "mor":  
evned : morbig, pesked : morgazh gerioù all : morwreg,  
morvran, morgevnid, morc'hlay,  
morwaz, moraj, morlaer,  
mordouseg, moraer.

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak e c'hourvezas Yann e strad e vag ?
- 2 - Penaos e tivinas e oa pell diouzh ar gêr ?
- 3 - Perak e oa nec'het o touarañ ?
- 4 - Penaos en em gemeras, evit kaout arc'hant da vont d'ar gêr ?
- 5 - Daoust hag ez eo bet dibabet mat anv ar pennad ? Klaskit un anv all.
- 6 - Klaskit un anv evit pep dilinennad.

III. AR YEZHADUR : an doareenn hag ar stagenn.

Kentel. 1 - " ar vag vihan " Penaos eo ar vag ? ar ger bihan hag a zoare an anv bab a zo un stagenn.

2 - Tu a vefe bet da lavarout : " ar vag a zo bihan ". Er frazenn-se ar ger bihan a zoare an anv bag dre hanterezh ar verb a zo; beg' ez eo un doareenn.

3 - Dielfennomp an anv-gwan bihan en div frazenn-se:  
bihan : anv-gwan-doareañ implijet evel stagenn d'an anv bag.  
" " " doareenn " "

4 - " Yann a oa ur foeter-bro " " An dud-se a zo pesketaerien ". Klaskit implij foeter-bro, pesketaerien : doareennou int ivez.

Poelladennoù. 1 - Diskrivit an dilinennad 1 en ur lakaat ar verboù en amzer-vremañ.

2 - Dielfennit gerioù ar frazennou-mañ : Yann a oa kalonek. Va zad a oa ur pesketaer. E contr a zo ur roeñver ampart.

3 - Reizhskrivadenn dilinennad 1 ( skuizhder, kleñved, ruzell-veure, splannañ, tamm-ha-tamm, bigi-dre-lien, dre geflusker, kenderc'hel ).

Kentel . 5 - An anv-gwan a c'hell bezañ ur stagenn, " ar vag vihan ", pe un doareenn, war-lerc'h ar verboù bezañ, seblantout, " ar vag a seblant bihan ".

An anv a c'hell ivez bezañ implijet evel doareenn : " Yann a oa ur foeter-bro ".

IV. AR VERBOU : an anv-verb.

Kentel. 1 - Kemeromp dilinennad 1 al lennadenn; klaskomp ar verboù n'int ket displeget : splannañ, roeñval. Displegompe ar verboù-se en amzer-vremañ : me a splann, me a roeñv. Petra hon eus lezet da gouezhañ ? an dibennoù.  
Splannañ ha roeñval a zo anvioù-verb.

2 - Pehini eo an dibenn-anv-verb ar muiañ implijet ? -añ. Roit skouerioù.

Klaskit anvioù-verb oc'h echuiñ gant :

- iñ : deskiñ, debriñ, berviñ...
- at : moanaat, furaat, kaeraat ( petra a verk an dibenn-se ? )
- out : bout, c'hoarvezout, gwelout, gouzout...
- al : krial, neuial....
- ezh : laerezh
- el : gervel, mervel, menel...
- er : embreger...
- a : tañva, kafea, boueta....

3 - Displegompe ar verb " hadañ " en amzer-vremañ : Ed a hadañ... E pep stumm e kaver ur rumad lisherennou ha na gemmont ket : anv et vezont ar wriazienn.

Evit kavout ar wriazienn-verb diouzh-tu n'eus nemet lakaat ar verb en doare-gourc'hemenn. Klaskit gwriaziennou ar verboù uheloc'h. Petra hoc'h eus merzet ?

4 - Klaskit gwriazienn ar verb-mañ : c'hoari. Klaskit anvioù-verb hep dibenn ebet : tañva, pesketa...

5 - Displegit ar verb " c'hoard " er pevar amzer ehn : Gant va nijerez e c'hoari-an, e c'hoari-ez.....

6 - Displegit ar verboù " tañva " ha " pesketa " en amzer-da-zont dibersonel : me a dañvaic ar frouezh ( me a dañvas ) me a besketaic ur brezel ( me a besketay ).

7 - Ar verb " gallout " en deus div wriazienn : gall- ha gell-. Kavet e vez c'hoazh " lavarit " ha " livirit " " kiri " ha " kari ".

8 - Taolit evezh ouzh skritur ar ger " kanan " en div frazenn-mañ : Pa vez brav e kanan. Emaon o kanan isouen. an n gant un dildenn ( n ) a vez kavet en anv-verb met nann en amzer-vremañ.

( kendalc'h war ar bajenn 62. )



1 - Ur wech e oa hag ur wech n'oa ket, met ur wech e oa bepred. Hag e oa ur paotr yaouank ha dre ma kreske e oad e kreske ivez e nerzh en un doare burzhudus. E anv ' oa Yann. N'oa nemet daouzek vloaz hag e servije da varc'h-limon d'e dad. E vit kerc'hat ar foenn d'ar gêr ha kas an teil d'ar park, eñ a sache war ar c'harr.

D'ar mareoù-se evez, e oa bet un devezh gant e dud o prenañ an ejon en ur foar. P'oa ar c'houlz da zont d'ar gêr e oa mouzhet an ejon. Ne felle mui dezhañ bale. Ha Yann fourañ e benn dindan e gof ha degas anezhañ d'e graou war e choug.

2 - D'an oad a ugent vloaz ne ouie mui petra da ober, kement a nerzh en doa. Hag eñ lakaat en e benn mont da redek ar bed evit klask e bar. A-raok en em lakaat en hent e falvezas gantañ kaout ur vazh. Met bishier koad ? D'ober petra ? Ne badjent ket outañ. Ha da gaout ar marichal da lakaat ober ur vazh.

Ar marichal a boagnas e-pad eizh devezh d'ober ur vazh vrav. Tev e oa evel brec'h un den ha rikamanet holl penn-da-benn. Sur, avat, e soñje, Yann, an den krefiv, a vezo lorc'h ennañ gant ar vazh-mañ. Met, pa oa deuet d'he degas dezhañ, e savas Yann e zivrec'h evel un den souezhet: "O ! Marichal ! emezañ, brav sur eo da vazh ! Met petra ' rin-me gant an dra-se ? Ar vazh-se ne zere ket ouzhin-me. N'eo nemet evit ur bugel !" hag ouzh he c'hemerout e kanmas hag e tiganmas anezhi etre e vizied.

3 - Ar marichal en em lakaas d'ober unan all. Fardañ a reas anezhi ken tev ha morzhed un den. Met honnezh ne blijas ket kennebeut da Yann. He zerrin a reas war benn e c'hlin. Ar marichal a zastumas an tammou. Pa oa distroet d'e c'hovel e labouras e-pad ur miz penn-da-benn da renkañ ur vazh da Yann. En dro-mañ e reas anezhi ken hir hag ur wezenn-bin ugent vloaz. Yann a veze bemdeiz o sel-

lout ouzh al labour. Ha pa oa schu e kemas ar vazh en ur lavarout: " Mat, mat sur. Houmañ a zo diouzh va doare".  
Hag e paeas, na petra 'ta !

(" E KORN AN OALD", p.28 )

I. STUDI AR GERIOU.

1 - Klaskit gerioù all da lakaat e-lac'h ar re a zo bet ia-linennet. ( paotr, falveze, fellas, aozañ, souezhus, amzer, kin-klet.)

2 - Klaskit gerioù stummet evel "divrec'h" = div vrec'h.

ur vrec'h	,divrec'h	ur voç'h	,divoc'h
skouarn	,divskouarn	ur weuz	,diweuz
gar	,divc'har	ur vorzhed	,divorzhed
skoaz	,divskoaz	al lez	,divlez
dorn	,daouarn	glin	,daulin
ilin	,daouilin	troad	,daoudroad
lagad	,daoulagad	ufern	,daoufern

ar stummoù-se hag a grog gant div-, daou- a vez anvet an niver-daou.

3 - Klaskit sterioù disheñvel d'ar ger "brec'h" :

- brec'h un den
- brec'h ur vilin, ur vrec'hvor, brec'h ur stêr,
- ur c'hleñved danjerus a vezer vakaset en e enep.

II. AR MENOZIOU.

1 - Ken krefiv ha petra, e oa Yann ? Krefivoc'h eget petra ?  
2 - Petra a ziskouez e oa krefiv an div vazh fardet gant ar marichal ?  
3 - Pennaos e voe govellet e-benn ar fin ur vazh dereat evit Yann ?

III. AR YEZHADUR : ar c'halvadenn, an anv stag-ha-stag

Kentel . 1 - Lennit ar frazenn: "O ! Marichal ! emezañ..."  
Petra eo ar ger Marichal ? ur verb, un anv ?

Daoust ha barrek oc'h da gavout implij ar ger-se ?  
N'eo na rener, na renadenn; implijet eo evit gervel un den, ur c'halvadenn eo.

2 - Grit frazennoù gant anvioù implijet evel galvadennoù enno: Fistoulig ! deus amañ !  
Yann ! kae d'ar bourk da brenañ bara !  
Bisousig ! tec'h diwar an daol !

3 - Petra a gaver war-lerc'h ar c'halvadenn ? ur poent-estlammañ.

4 - Lennit ar frazenn: " Yann, an den krefiv, a vezo lorc'h..."  
Petra eo ar ger den ? Peseurt implij en deus er frazenn ?  
Lakaet eo bet e-kichen ar ger "Yann" evit displegañ piv eo Yann. Bez' ez eo un anv stag-ha-stag.

5 - Grit frazennoù gant anvioù stag-ha-stag.

6 - Petra a vez lakaet a-raok ha goude an anv stag-ha-stag ? virgulemou.

7 - " Marichal ! brav eo da vazh ! " an anv marichal a zo implijet amañ evel galvadenn.  
 " Yann , an den kreñv , a vo lorc'h ennañ . " ar ger den a zo un anv stag-ha-stag ouzh Yann .

Poelladennoù.160.Diskrivit an dilinennad 1 en ur lakaat ar verboù en amzer-da-zont.

161.Lakait ar pemp ger-mañ e-giz galvadennoù e penn 5 frazenn:  
 Yann!..... Fistoulig !.....  
 Mammig !..... Bisousig !.....  
 Tadig !.....

162 - Aozit 5 frazenn diwar skouer houmañ :  
 Fañch, ar marichal, a c'hoveliar ur vazh houarn evit Yann.

163 - Reizhskrivadenn : an dilinennad 1. ( paotr, nerzh, burzhudus, daouzek, varc'h-limon, kerc'hat, foenn, ar c'harr ) betek .... " ar c'harr " .

IV. AR VERBOU : implij an anv-verb hag an anv-gwan verb.

Kentel.1- " Ha ni da vlejal, da ouelañ, da souzañ adreñv ". (L.19 )  
 "Setu Yannig o tapout ar billig war an tan, o lakaat amann e-barzh hag o vont d'ar c'hav da dennañ sistr". (L.1 )  
 Lennit an div frazenn-se ha klaskit ar verboù ha stummoù an anv-verb. Petra a verzit ? An anv-verb a c'hell bezañ implijet e-lec'h ar verb displeget.

Lakait an div frazenn-se er pevar amzer eñn.

2 - Savit div frazenn heñvel . Da skouer: " Ha me da gemer ur morzhol, da skeiñ war ar boentenn, ha da vloesañ va biz .

3 - Lennit ar eil frazenn: "Setu Yannig o tapout...."  
 Daoust ha ne vefe ket tu da lakaat da e-lec'h an o -se ?  
 " Setu Yannig da dapout ar billig war an tan, da lakaat amann e-barzh ha da vont d'ar c'hav da dennañ sistr ". An o -se n'eo ket eta ur raganv-gour met un doare araogenn evel da .

4 - Savit div frazenn diwar skouer ar frazenn-se .

5 - " N'en doa ket ankounac'haet an taolioù gwialenn en doa tapet war e beñsoù e-barzh sal vras presbital Lokireg evit ar pezh en doa bet tañvaet ". Islinennit ar verboù ha klaskit an amzer : an amzer-beurdremenet.  
 Bez' ez eo un amzer di-eñn = un anv-gwan verb + verb-skoazell.  
 Displegomp ar frazenn-se er pevar amzer di-eñn.

6 - Daoust hag ez anavezit verboù hag a vez implijet er pevar amzer dieñn gant "bezañ" da verb-skoazell? mont, dont.  
 " Perak n'ont ket deuet d'hor c'here'hat ? "  
 Displegit ar frazenn-se er pevar amzer dieñn.

7 - " Diskennet an daou archer war ar garreg ". Klaskit ar verb. Gellout a rafen lavarout: " An daou archer a zo diskennet war ar garreg " pe " An daou archer a ziskennas war ar garreg ". An anv-gwan verb a c'hell bezañ implijet e-lec'h ur verb displeget.

Poelladennoù.164.Displegit ar frazenn gentañ er pevar amzer eñn.

165 - Displegit an eil frazenn er pevar amzer eñn.  
 166 - Displegit frazenn an niverenn 5 er pevar amzer dieñn.

- 70 - ( kendalc'h war ar bajenn 59 )

LENNADENN 26 : YEUNIG HAG E GAZHEZ.

1 - Ur wech e oa un den hag en doa tri mab. Kouezhañ a reas klañv hag e varvas.

- Petra a reomp-ni, bremañ, eme an tri breur ?  
 - Rannomp ar pezh a zo, eme an daou goshañ; ni a fell deomp mont da redek bro.  
 - Evel ma karot , a lavaras Yeunig, ar yaouankañ. Me ne din ket ganeoc'h. Me a chomo amañ, gant ar gazhez vihan a c'houlennan d'am lod .

2 - An daou goshañ a yeas en o roud. Yeunig a dapas e gazhez hag a yeas ganti d'un toull menleuz a oa eno e-kichen. E mare kreisteiz, e lavaras ar gazhez d'he mestr: " Me ' zo o vont da bourmen un tammig. Met ne vo ket pell e teuin en-dro. " Dont a reas en-dro en gwirionez, hag e tegase ganti ur volennad soubenn ur pladad kig, un tamm bara, hag ur banne cwin. Ar paotr yaouank a zebras . Ar gazhez vihan a lavaras neuze: " Mont a ran c'hoazh da bourmen , met hep dale pell e vin adarre amañ . "

3 - Palez ar Roue a oa tost d'ar vengleuz. Ar gazhez vihan a yeas da grial dirak ar prenestroù : " Miaou ! Miaou !  
 - Petra ' zo 'ta ? Loenig paour !  
 - Va mestr a zo kouezhet en ur poull-fank hag en deus kailha-ret e zilh. C'hwi a rofe din mar plij dilhad da gas dezhañ da lakaat ?  
 - A galon vat, a lavaras ar mitizhien a oa eno ". Hag e rajont dilhad dezhi. A-raok an noz e tegasas anezho en-dro hag e lavaras dezho mil trugarez.  
 - Piv da vestr ? a c'houlennas diganti unan eus ar mitizhien.  
 - Un aotrou bras ha pinvidik, emezi. ( da genderc'hel. )

I. STUDI AR GERIOU.

1- Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (klañvaat, miaoual, mailhet pe lousaet, bannac'h, bale, kastell ).

2 - C'hwi a oar petra eo ul loenig evel-just ?  
 Lavaromp : ul loen bihan pe ul loenig,  
 ur vuoc'h vihan pe ur vuoc'hig ,  
 ur c'harzh bihan pe ur c'harzhig ,  
 un dañvad bihan pe un dañvadig ,  
 un oan bihan pe un oanig

lavaromp c'hoazh: loened bihan pe loenedigoù ,  
 paotred vihan pe paotredigoù ,  
 plac'hed bihan pe plac'hedigoù ,  
 deñved bihan pe deñvedigoù .

II. AR NENZOICU..

1 - Piv en deus bet al lodenn vrasañ , an daou henañ pe ar yaouankañ ?  
 2 - Piv en deus bet al lodenn wallañ ? Perak ?  
 3 - Perak e tistro ar gazhez vihan an dilhad d'ar gêr ?



### III. AR YEZHADUR :- ar gerioù kevrennek.

Kentel.1- Keñverioomp ar **strolladoù** gerioù-mañ tennet eus al lennadenn :ur volennad soubenn ,ur pladad kig,un tamm bara hag ur poull-fank.

Perak ur **varrennig-stagañ** e poull-fank ? un anv hon eus aze hepken ,un anv kevrennek.

2 - Stummit anvioù kevrennek gant ar ger "poull":poull-bez, poull-kannañ,poull-ar-galon,poull-dourañ,poull-tro.  
Lakait ar gerioù-se el liester :poullou-bez,poullou-kannañ..

3 - Ha soñj hoc'h eus bezañ studiet anvioù kevrennek all ? : penn ( lennadenn 2 ),porzh (1.17) ,toull (1.16) ,lamm (18) ; diwezhatoc'h e vo studiet : kilhog (28) ,skoulm (29) ,lost (33).

4 - Adsellomp war-lerc'h al lennadenn23 ouzh ar gerioù stummet diwar "mor" . Kemeromp ar ger "morbig";lakait el liester : morbiged. Daoust hag ez anavezit ur stumm all d'ar ger-se ? pig-vor.Lakait el liester : piged-mor.

Daoust hag e komprenit bremañ perak n'eus ket a varrennig-stagañ e "morbig" ?

5 - Klaskit stummañ gerioù nevez gant "ti":eskopti,maerdi, karrdi,kannidi,kloc'hdi,klañvdi,kelemdidi,levrdi,mirdi,kloerdi, leandi, hag ur ger kozh :kouldri.

6 - An anvioù kevrennek a vez stummet gant daou anv.Dispartiet e vezont gant ur varrennig-stagañ pa c'heller lakaat an anv kentañ el liester:ur poull-bez,poullou-bez met ur vorbig,peogwir e lavarer morbiged.

Poelladennoù.167Diskrivit an dilinennad kentañ en ur lakaat ar verboù en amzer-da-zont.

168-Grit pemp frazenn gant gerioù o kregiñ gant poull.

169-Grit pemp frazenn gant gerioù oc'h echuiñ gant -ti.

170-Reizhskrivadenn :dilinennad 2 (toull-mengleuz,kreisteiz, en-dro,ur volennad,adarre) .

### IV. AR VERBOU : doareoù ar verb.

Kentel.1- Gellout a ran lavarout :

An tri breur a rannas madou o zud.

An tri breur a rannfe madou o zud.

Rannomp ar pezh a zo ! eme an daou goshañ !

Rannet ar madou,ez ejont da vale bro .

Ret e oa bet rannañ ar madou.

Implijet hon eus ar verb "rannañ"e pemp doare disheñvel; o c'hlasait hag o anvit.

2 - E brezhoneg ez eus pemp doare-verb:an doare-displegañ; an doare divizout ; an doare-gouerc'hennañ ;an anv-gwan-verb, hag an anv-verb.

3 - Peseurt doare a ra diguer d'nor yezh,hag a gaver e Galleg pe e Saozneg da skouer? an doare-sujañ .

4 - Klaskit,dre ober frazennoù,stummoù disheñvel ar verb "chom " er pemp doare.

Poelladennoù.171 - Lakait verboù displeget an dilinennad 2 en doare-divizout.

### V.AR GERIADUR: loened ar vereuri.

Kentel: l-anvit al loened bihan da gentañ,ha erit ur frazenn gant pep ger:ar yar,ar poësin,ar c'hilhog,ar yar-Indez,an houad,ar waz,ar garz,ar dube (ar goulm),ar pañ,an alarc'h,ar c'honikl (koulin,lapin) .

2- al loened-labour bremañ: ar marc'h (marc'hed),ar gaver kezekenned ,ebeul ,marc'hig (pone) ,azen (ezen),mul,ejen (ejened, pe oc'hen) .

3 - Peseurt diforc'h a zo etre "kezekenned" ha"kezeg" .

4 - Klaskomp bremañ peseurt loened a gaver e-mesk ar chatal: buoc'h (buoc'henned,pe saout) ,farv (tirvi) pe kole ,leus, dañvad,dañvadez ,maout (meot) ,oan (oaned pe ein) ,gavr (gevvr pe givri) ,menn ,pemoc'h (porc'hell) ,gwiz ,houc'h .

5 - Peseurt loened a gaver hogos e pep ti ? ar c'hi hag ar c'hazh.

6 - Klaskomp peseurt ster a zo gant ar gerioù-mañ :kash (ki-zhier) ,kazhez ,tarkash,bisig,kolen-kash.

7 - A bep seurt chas a zo,lavarit da betra e talvez pep hini eus ar re-mañ:ki-porz,ki-chase (ki-hemoic'h),ki-red (ki-puze),ki-deñved,ki-rodellek (ki-foutouilhek) ,levran (levrini,levren),ki-douar,ki-logotaer .

8 - Peseurt loened o deus ur geol ? ur moj ? ( da sk.ar moc'h) .

9 - Klaskit lakaat un anv dirak pep hini eus an anvioù-gwan-mañ :kornek,pluek,vezhiant,skiantek ,habask,mouzher, pennek,taer,pennfollet,kounnaret.

10 - Gant peseurt binvioù e reer war-dro al laezh ? ar c'horoerezh ,ar digouvanerezh ( pe diziennerzh) ,ar ribod ,ar vererezh-amann .

11 - Kriadennoù al loened a vo studiet war-lerc'h al lennadenn 32 .( ober ur sell outo bremañ,mar karer ) .

Poelladennoù. 172. Savit pemp frazenn gant anvioù-gwan an niv. 9 hag anvioù ar gentel.

173. Lakait ar gerioù a vank. Erwan a sikour e dad d'ober war-dro al loened.Dougen a ra greun d'ar.... ha foenn d'ar .... e-barzh o rastell.Plijout a ra dezhañ kas .....d'ar prad,loened kuñv ha keant int,met gwelloc'h eo gentañ tremen hep ober ned kuñv ha keant int,met gwelloc'h eo gentañ tremen hep ober war-dro ar .....re lous int ! Bez' en deus ivez un nabeud loened dezhañ :div.....wenn ha daou..... a vev didrouz war-un-dro en ur c'hraou kozh.Plijout a rafe dezhañ kalz kaout un... da vont da vale,ket avat un .....hag a zo re bennek. E c'hoar vihan he deus a-walc'h gant he .....bihan anvet Bisou-sig !

174. Moarvat e plijfe deoc'h kaout ul loen bennek .Lavarout pehini a zibabfec'h,ha perak,ha displegit penaos e rafec'h war e dro.



- 1 - Un devezh all ez eas d'ar palez c'hoazh.  
- Miaou ! miaou !  
- Petra 'zo 'ta ?  
- Roit din, mar plij, ur c'hrouer. Va mestr en deus c'hoant da c'houzout pegement en deus a our.  
2 - Ar mitizhien a gontas d'ar Roue. " A ! gwir, eme ar Roue, me a vo eürus d'ober anaoudegezh gant un den ken pinvidik". An devezh war-lerc'h e tegasas ar gazhez vihan ar c'hrouer d'ar gêr. Met ouzh ar foñs e oa stag ul loeiz our, a ankounac'haas ar gazhez. Bennoz ha trugarez, emezi. " Hag hi kuit. Met ar mitizhien, pa weljont ar pezh, a hopas warni : " Mignonez vihan ! mignonez vihan ! Amañ 'z eus ur pezh our stag ouzh foñs ar c'hrouer. Deus 'ta d'e gerc'hat. - O ! emezi, ne dan ket da. Dale'hit anezhañ ganeoc'h. Du-mañ ne vank ket eus ar seurt-se.  
- Klev, kazhez vihan, ar Roue en deus c'hoant da welout da vestr.  
- Mat ! ne a zegaso anezhañ amañ."  
3 - Degouezhet er vengleuz en devezh-se, e lavaras d'he mestr :  
- Arc'hoazh e ranki mont da di ar Roue.  
- Met paourkaezh bisig, ne welez ket n'eus nemet druilhoù en-dro din !  
- Ma chomez hep sentiñ ouzhin e krabiñsin ! Met ! klev ! Er palez ez eus mezher kaer a-hed leurenn ar gambr. Sav da dreid pa valei warno. Panevet da se e kwezhfes. Bale drant ha sonn da benn. Anez e tremeni evit ar paour.  
4 - Goude bezañ lavaret kement-se, e skoas un taol pav war an daol. Ha setu, n'ouzon ket penaos, e voe gwisket diouzhtu he mestr gant dilhad eus ar re binvidikañ. ( K. Jezegou, "E Korn an Oaled").

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet. (kazhig, krafignin, danvez, pilhoù, drant, glask).
- 2 - Klaskit an diforc'h a zo etre "kemer, klask ha kerc'hat". Grit ur frazenn gant pep hini eus ar gerioù-se.
- 3 - Daoust hag ez anavezit "bisigoù" ha n'int ket loened ? Pe-lec'h e vezont kavet ?
- 4 - Petra a zo war ar ger "eürus" ? an daou-bik. Perak ? Daoust hag ez anavezit gerioù all hag a vez skrivet gant an daou-bik ? " eün, emrous". Implijet e vez a-wechoù e "allies, gwazhied, breuriez".

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak e oa bet lezet ur pezh our e foñs ar c'hrouer ?
- 2 - Penaos e kerzh an den pinvidik ? Perak ?
- 3 - Penaos e kerzh allies an dud paour ? Perak ?
- 4 - Displegit e div pe deir frazenn ho soñj diwar-benn ar c'hazh-se.

III. AR YEZHADUR : An islavarenn-stag.

- Kentel. 1 - Adlennomp kentel yezhadur at lennadenn 23 diwar-benn renadennoù an anv.
- 2 - Lennomp bremañ ar frazenn-mañ : "Met ouzh foñs ar c'hrouer e oa stag ul loeiz our a ankounac'haas ar gazhez". Islinennomp ar verboù, ha greomp ur groaz dindan pep rener.  
3 - Petra a oa stag ? ul loeiz our. (ger-rener)  
Petra a ankounac'haas ar gazhez ? ul loeiz our. (renadenn).  
En gwirionez ar ger "a", a zo ur raganv-stagañ, a zo bet lakaet e-lec'h "ul loeiz our".  
" a ankounac'haas ar gazhez ", a zo un islavarenn-stag, renadenn d'ar d'ar strollad-gerioù " ul loeiz our ".  
" ul loeiz our " a zo anvet " ar ger-diaraok ".  
4 - Klaskomp bremañ dielfenniñ ar frazenn-se :  
Kentañ lavarenn : Met ouzh foñs ar c'hrouer e oa stag ul loeiz our. ( lavarenn bennañ ).  
eil lavarenn : a ankounac'haas ar gazhez. ( lavarenn-sujañ-stag, renadenn d'an anv loeiz our.)  
5 - Dielfennit ar frazennoù-mañ :  
Me a viro em armel an tog a blijo din.  
D'ar blotoù e taolin ar porant a vo graet fall.  
Kavet em eus mat al loerù a oa bet graet gant ar mekanik.  
Mirout a rin e-pad pell ar botoù-ler a brenis e kêr.  
6 - Dielfennit ar frazennoù-mañ :  
Ar roched a gannas ar vatezh a lakain disul.  
Ar stammenn a zougan allies a zo bet kinniget din gant va mamm.  
7 - Ar raganv-stagañ a dalvez da stagañ ul lavarenn a-bezh ouzh an anv a zo klokaet gant al lavarenn-se : " Me a viro em armel an tog a blijo din". Lodenn diwezhañ ar frazenn-se "a blijo din", a zo ul lavarenn-sujañ-stagañ implijet evel renadenn d'an anv " tog".

- Poelladennoù. 175 - Diskrivit an dilinennad 3 en ur lakaat ar gaoz etre Yeunig hag e Gazhez en eil gour lies.  
 176 - Dielfennit dre skrid niverenn 5 ar gentel.  
 177 - Dielfennit dre skrid niverenn 6 ar gentel.  
 178 - Reizhsrivadenn:dilinennad 3.(warc'hoazh ,druilhoù,sentiñ,krabiñsin ,leurenn,kouezhfes,somm ) .

IV. AR VERBOU: dielfennañ ar verb.

Kentel.1 - Kemeromp verb ar frazenn-mañ : " ar mitizhien a gontas d'ar Roue" ha klaskomp petra a c'hellfemp lavarout diwar e benn. ( skrivañ war an daolenn ar pezh a vo lavarret gant ar skolidi; goude e vo renket pep tra.)  
 an anv-verb :kontañ,  
 an doare : doare-displegañ,  
 an amzer : amzer-dremenet-strizh ,  
 ar gour : trede gour unan.

2 - Dielfennañ ur verb a zo reiñ e anv-verb, an doare, an amzer, hag ar gour. " a gontas " :verb kontañ,doare-displegañ,amzer-dremenet-strizh,trede gour.

3 - Dielfennit pevar verb an dilinennad 1.

Poelladennoù. 179 - Dielfennañ dre skrid verboù an dilinennad 1.  
V. AR GERIADUR : an dilhad,labourioù ar merc'hed.

Kentel.1 -Grit tri rummad gant ar pezhioù-dilhad-mañ:  
 a) dilhad ar baotred b) dilhad ar merc'hed c) an dilhad a c'hell bezañ douget gant an holl :  
 bragoù,brikoloù,jiletenn-stamm (chupenn),porpant,mantell,mantell-c'hlav,kabig,roched,bragoù-dindan,niviz,kravatenn,mouchouer-godell,levitenn,lost-pig,brozh,couriz,tavañjer,skoulm,kinkladurioù, bragerizoù,gouzougenn,ur ouel,loer,berr-loeroù.

2 - Peseurt doareoù boteler a anavezit :botoù-koad,botoù-ler,heuzoù,chaosonoù,kofignonoù ( gant ur foulenn e-diabarzh ), sandalenoù.

3 - Peseurt doareoù togoù :boned,kalabousenn (kasketenn),tog-kern-uhel,tog-plouz,koef,katiolenn,skerb (evit ar merc'hed).

4 - Ha gouzout a rit da betra a servij an traoù-mañ ; seizenn,lasoù,milgin,nozelem,doubleür,kloched,bac'hig,spilhenn,spilhenn-alc'houez,godell (chakod,fiched),spilhenn-vlev.

5 - Diskouezit pelec'h e lakaer ar bragerizoù-mañ:chadenn,troc'houzoug,tro-vrec'h,gwalenn-viz' ( bizoù,bizaoued ), bizoù-skouarn.

6 - Klaskit evit pep ger eus ar roll kentañ ar ger kontrol en eil bann : nevez ,diouzh ar c'hiz,tanav ,diardoù,flamm,ledan,nevez-flamm,bras,moan,tenval,teuc'het,strizh,kozh,er-maez a c'hiz ,tev,kinklet,berrik,tuzumek.

7 - Peseurt diforc'h a zo etre "ralek" ha"teuc'hek".

8 - Peseurt dilhad a c'heller ober gant an davezioù-mañ:lien,kotoñs,gloan,flanelenn,seiz,voulouz,ler,nilon.

9 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ da zisplegañ ar preder a gemer ho mamm gant ho tilhad:gwalc'hifñ,kannañ,sec'hañ,diwaskañ,

istribilhañ,feriñ,ampezañ,plegañ,renkañ,klenkañ,merkañ,broudañ, stammañ ( brochennat,brouedañ ),gwriat.

10 - Klaskit ha displegit ster resis ar gerioù-mañ :freselat,gouremiñ,takonañ ( peñseliat ).

11 - Daoust ha gwelet hoc'h eus ur c'harr-nezañ ? da betra e servij ar gegel ?

Poelladennoù. 180 - Grit dre skrid an niverenn 6.

181 - Grit pemp frazenn gant verboù an niv. 9.

182 - Ur wech bennak hoc'h eus bet roget ho tilhad en ur c'hoari.Danevellit ar pezh a c'hoarvezas.

=====

( kendalc'h ar bajenn 80 )

Poelladennoù. 191 - Lakait ar gerioù a vank:  
 Breizh a zo dreist-holl bro al labour-douar.E  
 mir eost e weler er parker a bep seurt binvioù o troc'hañ  
 .....hag .....Gwechall e haded ivez... a vez medet o  
 gwengolo.

Douaroù Breizh a vank dezho .... ,peurvuiañ.Degaset e vez dezho dindan stumm ar .... a denner eus ar mor.  
 Skuilhañ'reer ivez....a droc'her e-pad ar berz a-hed an aod.Lakait ouzhpenn un nebeut .....ha war an douaroù .....ez eoster ar bloavezhioù war-lerc'h ..... pinvidik.

192 - Ur wech bennak hoc'h eus bet graet un devezhiad labour en ur vereuri.Danevellit .

LENNADENN 28 : LIP-E-BAV HAG ALANIG.

- 1 - " Ha plijout a ra deoc'h kement-se al logod ? " a c'houlennas Alanig . " Logod e-leizh a servijin deoc'h. Ar miliner, va mignon, en deus en e vilin ouzhpenn ur c'harrad logod. Bemnoz e vez draillhet seier nevez dezhañ. Sac'hadoù bleud a ya en o c'hof. Kemeret o deus an hardisegezh da zont zoken en e di d'ober abadennoù dañs, pa vez leun o c'hof. Pellik ' zo ne c'hell mui kousket e-pad an noz gant ar choloni a vez e kement korn eus an ti, eus ar c'hav d'ar c'hriagnol . "
- " O, eme Lip-E-Bav, deomp buan 'ta. Din-me e plij kenañ-kenañ ar c'hig logod. Nag ur c'had, nag ur glu jar ne dalvez ul logodenn. "
- 2 - Setu int o-daou d'ar vilin.... Alanig en doa graet un toullig er voger, rak dre ar vilin e oa aas-tre mont da glud ar yer. Hag en deiz a-raok , en doa plantet tro e gouzoug kilhog ar miliner, gwellañ kaner ar barrez. "
- 3 - Mab ar miliner a oa aet klañv p'en doa gouezet e oa marv e gilhog. Beradoù gwad ha plu a gavas war al leur-di. Klask a reas tro an ti dre belec'h en doa gallet al louarn dont en-diabarzh, hag e kavas an toullig, hanter guzhet en ur c'horn. Ne oa ket bet pell o stennañ ul las, ha gwazh a se evit al louarn a zeuio da astenn e fri. "

Alanig a santas c'hwez al las stennet.

( da genderc'hel ).

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet . ( takennoù, stignañ, er vur, kraou, sanailh, trouz, korolladegoù ).
- 2 - Klaskomp sterioù disheñvel ar ger c'hwez pe c'hwezhezh:
- a ) Alanig a santas c'hwez a las stennet pe Alanig a c'hweasaas al las stennet.
  - b ) Jobig a c'hwezhezh en e viniou. ( ar biniou a zo ur benveg dre c'hwezhezh ); verb c'hwezhañ.
  - c ) Tomm eo an amzer, Jobig a c'hwez kalz ( verb c'hweziñ ); gwelet e vez ar c'hwez ( pe c'hwezadur ) ; war e dal.

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Diskouezit ez eus kalz a logod e ti ar miliner.
- 2 - Pehini eo ar c'hig gwellañ gant ar c'hazh ?
- 3 - Petra en doa graet Alanig d'ar c'hilhog ?
- 4 - Perak e oa klañv mab ar Miliner ?
- 5 - Petra a reas ?
- 6 - Ijinit un diskoulm d'ar gontadenn.

III. AR YEZHADUR : al lavarenn-distag, al islavarenn-doareañ.

Kentel. 1 - " Mab ar Miliner a oa aet klañv pegoalz p'en doa gouezet ( renadenn a verk an amzer ). Petra e oa marv e gilhog. ( renadenn eün ). Er frazenn-se hon eus tri verb displeget; bez' hon eus ivez tri menoz disheñvel. Er frazenn-se ez eus teir lavarenn : ul lavarenn-bennañ ha div islavarenn. "

2 - Da betra e servij ar ger p' ( lakaet evit pa ) ? da stagañ an islavarenn ouzh al lavarenn-bennañ : anvez e vez ur stagell-suj. "

3 - " Alanig a santas c'hwez al las astennet".  
Pet verb ? Pet lavarenn ? unah hepken: ul lavarenn distag.

4 - " Alanig a lazhas ar c'hilhog , hag a zeuas d'ar gêr gantañ".  
Pet verb ? Pet lavarenn ? div lavarenn. Pehini a zo renadenn d'eben ? hini ebet; div lavarenn distag hon eus amañ, unanet gant ar stagell-unaniñ " ha " . ("hag" dirak ar vogalennoù. )

5 - " Al louarn hag ar c'hazh a oa aet da c'hoari".  
Da betra e servij ar stagell-unaniñ " ha " en div frazenn-se ?  
Da unaniñ daou anv en hini gantañ, ha daou anv-gwan en eben.  
6 - " Nag ur c'had nag ur glu jar ne dalvez al logodenn".  
Na a dalvez amañ da unaniñ daou anv ("nag" dirak ar vogalennoù).

7 - Eilpennoù ar frazennoù da heul diwar skouer houmañ :  
Al labourer a hado e ed a-raok ma teuio an noz.  
A-raok ma teuio an noz e hado al labourer e ed.  
Al labourer a droc'ho e ed peogwir eo brav an amzer.  
An eost a zo mat o vezañ m'eo sec'h an amzer.  
An eost en deus sec'het buan dre ma oa tomm an heol.  
Al labourer a zastumas e winizh gant aon na vefe glebiet .  
Ar vederez a zo bet klenket er c'harrdi evit na vefe ket debret gant ar mergl.

8 - Dielfennit ar pemp frazenn-se.  
9 - An islavarenn-doareañ a servij da renadenn d'ar verb. Kre-  
giñ a ra peurlusañ gant ur stagell-sujañ da verkañ an amzer ,  
al lec'h, an doare, an diviz.  
Ar stagelloù-unaniñ a servij da unaniñ daou c'her  
heñvel, pe div lavarenn heñvel.

Poelladennoù. 183 - Diskrivit an dilinennad 3 hag islinennit  
ar verboù en amzer-dremenet-strizh.  
184 - Grit dre skrid an niverenn 7 eus ar gentel.  
185 - Dielfennit an 2 pe 3 frazenn gantañ.  
186 - Dilinennad 3. ( e gilhog, leur-di , dre belec'h, diabarzh,  
astenn, stennet ).

IV. AR VERBOU : ar stumm-nac'hañ .

Kentel. 1 - " Ne oa ket bet pell ".  
Klaskit lavarout ar c'hontrol : " Pell e oa bet ".  
Pere eo ar gerioù a zo bet lammet kuit ? ne .... ket.  
An daou c'her-se a servij dimp da lavarout "nam", da nac'hañ.  
Ar verb " oa bet " a zo implijet er frazenn gantañ er  
" stumm-nac'hañ ".  
2 - Displegit ar verb " bezañ sentus " ha " hadañ ed " en  
amzer-vremañ: me a zo sentus me a had ed.  
Lakait an div amzer-se er stumm-nac'hañ, bremañ :  
me n'on ket sentus me ne hadan ket ed.  
Petra a vezit ? implijet hon eus an displegadur personel.  
An displegadur personel a vez implijet dalc'hmat gant ar  
stumm-nac'hañ.  
3 - Displegit ar verboù " bezañ sentus " ha " hadañ ed " en  
amzer-dremenet-amstrizh :  
me n'on ket bet sentus me n'em eus ket hadet ed.  
sentus n'on ket bet ed r'am eus ket hadet .

- 4 - Displegit ar verboù "bezañ disent" ha "hadañ ed", en doare-gourc'hemenn, er stumm nac'hañ :
- |                      |                  |
|----------------------|------------------|
| na vez ket disent    | na had ket ed    |
| na vezomp ket disent | na hadomp ket ed |
| na vezit ket disent  | na hadit ket ed  |
- En doare-gourc'hemenn ar gerioù-nac'h a zo : na....ket.
- 5 - Lakait ar frazenn-mañ er stumm-nac'hañ :
- Me a viro em armel an tog a blijo din.  
 Me ne virin ket em armel an tog na blijo ket din.
- Klaskomp ar c'hemmoù c'hoarvezet :
- ar rannig-verb ne vez ket implijet gant ar gerioù-nac'hañ.
  - " na " a zo raganv-stagañ ar stumm-nac'hañ.
- 6 - Lakait er stumm-nac'hañ frazennoù niverenn 5 ar gentel-yezhadur war-lerc'h al lennadenn 27 .
- 7 - Lakait er stumm-nac'hañ frazennoù niverenn 6 en hevelep lec'h.
- Poelladennoù.187- Grit dre skrid an niverenn 3.  
 188- Displegit ar verboù
- |               |    |                  |
|---------------|----|------------------|
| Bezañ lezirek | ha | Troc'hañ melchon |
|---------------|----|------------------|
- en amzerioù-mañ : doare-displegañ , amzer-vremañ ,  
 amzer-dremenet-amstrizh.  
 doare-gourc'hemenn, amzer-vremañ.
- 189 - Grit dre skrid an niverenn 6.  
 190 - Grit dre skrid an niverenn 7.

V. AR GERIADUR : an trevadoù.

- Kentel. 1 - Klaskit anvioù an edoù a anavezit:gwinizh,heizh, kerc'h,maiz ,ed-du.
- 2 - Klaskit sturioù ar gerioù-mañ :ar gorzenn ( ar c'harenn ), an danvouezenn ( ar penn-ed,an doc'hadenn ) ,ar greun,ar sac'h-greun ,ar plouz ( ar c'holo ),ar soul.
- 3 - Peseurt diforc'h a zo etre ur feskenn ( ur malan,ur vando-senn ) hag un drañn; etre :foenn-tirienn,foenn-melchon hag adtroc'h.
- 4 - Peseurt plant a hader evit al loened :irvin,boetrabez, melchon,melchon-ruz,melchon-lann.
- 5 - Daoust ha barrek oc'h d'ober un diforc'h etre:prad,kozhenn, foenneg,melchoneg; etre :foenn-tirienn,foenn-melchon hag adtroc'h.
- 6 - Sec'h pe c'hleborek ,treuzus d'an dour pe zidreuzsus eo an douaroù traezhak ,grouanek ,priek ?
- 7 - Peseurt diforc'h a zo etre difrouezh ha fraost,etre druz ha strujus ( frouezhus ) ?
- 8 - Peseurt ster a zo gant an troioù-lavar-mañ :lakaet eo an here ;emañ ar yar oc'h ober hec'h here.
- 9 - Klaskit e-touez an danvezioù-mañ ar re a zegas druzoni, temzioù,pe raz d'an douroù : teil , temz-ludu ,rotel (plant breinet ) ,mailh,maerl ,bezhin.( druzoni pe humuz ).
- ( kendalc'h war ar bajenn 77 ).



- 1 - Va mignon, it dre an toull-se e-barzh ar vilin.Me a chomo amañ da ziwall e-pad an noz,e-pad na viot o chaseal al logod. Ne vezo ket diaes deco'h pakañ ur bern anezho.Selaouit.Me glee-vit ket anezho oc'h ober cholori.Pa ho pezo graet ur c'horfad, c'hwï a lavaro din.Arabat eo dimp en em goll henozh .Warc'hoazh d'ar beure ez aimp a-gevret da balez ar roue,rak berroc'h e vez kavet an hent pa vezer daou-ha-daou o veajiñ
- 2- Lip-E-Bav a selle ouzh an toull gant kalz a-ziefizians. " N'ous toull all ebet ? ", emezañ da Alanig. Hag Alanig dezhañ en ur ober goap : " Feiz,nann,n'ous toull all ebet. Daoust hag unan n'eo ket a-walc'h ? Ha ken aonik-se ez oc'h ? N'em bijet ket kredet.Ma, distroomp d'ar gêr.Va gwreg a frito da goan gwellañ kig an ti." Neuze Lip-E-Bav ,gant ar vezh,a lammas en toull.Ha kerKent ar skoum-lagadenn a stardas dezhañ toull e c'houzoug.
- 3 - Pa santas en-dro d'e c'houzoug ar skoum-lagadenn daonet, e redas dezhañ un anken vras penn-da-benn da livem e gin.Sachañ a reas a-raok,sachañ a reas a-dreñv,ha da gemant sachadenn,ez ae ar skoum war strishaat,ha muioc'h-mui e veze stardet gouzoug ar c'hasz paour,aet berr e alan gant ar skoum ha gant ar spont.Neuze Lip-E-Bav a c'halvas Alanig gant ur vouezh flour ha truzsus.Alanig a selle outañ hag a lavaras dezhañ en ur c'hoarzhñ :
- 4 - Ac'hanta ! Lip-E-Bav ! ha blaz mat a zo gant ar c'hig lodod ? Lart a-walc'h int ha tener eo ar c'hig ? Met petra ' gle-van ? Perak e rit kement-se a reuz ? Marteze n'eo ket rozet ar pred gant a-walc'h a aked evit ho kenou nizik ? Petra a vank deco'h ? Holen ? Pebr ? sezo ? Lavarit din "ta ,ma ! z in

da zihuniñ ar miliner, da lavarout dezhañ degas deoc'h ar pezh noc'h eus ezhomm evit ma plijo ar pred-mañ d'ho teod ha d'ho staon. 'M eus gon avat, ne selacuit ket ac'hanon. Ho kalon a oa digor, met bremañ ho kenou eo an hini a zo digor-bras. Chomit eta d'ober miaou keit ha ma karot. Bremaik e teuo ar mestr da reiñ deoc'h fest ar vazh, evel ma roas an Aotrou Rusteval d'ar paour-kaezh Lom. Alo ! kenavo , genaoueg ! Ma tegouezh deoc'h en em dennañ bev ac'halen, e teuo deoc'h, meur a wech moarvat, soñj eus Alanig Al Louarn."

Haç Alanig kuit. ( da gendro'hel ).

### I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet. ( hemolo'h, war-un-dro, gwelenn, blizidik, krouglas. )
- 2 - Diskouezit ho staon.
- 3 - Petra a fell d'al louarn lavarout : "ho kalon a oa digor". Klaskit un dro-lavar dezhi an hevelep talvoudesezh : ilboued an eus.
- 4 - Ul lagadenn a zo un dra dezhañ stumm ul lagad. Klaskit gerioù aozet heñvel : kalonenn ( kalonenn an aval ), brec'henn, garenn ( g. ur c'horn-butun ), ur bapereñ.
- 5 - Klaskit gerioù kevrennek stummet gant "skoulm" : skoulm-red ( skoulm-lagadenn ), skoulm-gall, skoulm-kreñn, skoulm-higenn, skoulm-yod.

### II. AR MENOZIOU.

- 1 - Perak ez eo leun ar c'hazh a zisfiziañs ?
- 2 - Dre beserit komzou treitour e teu a-benn Alanig da vountañ ar c'hazh en toull ?
- 3 - Diskouezit pegen goapaus eo Alanig.
- 4 - Perak e komz Alanig eus "fest ar vazh" ?

### III. AR YEZHADUR : ar rakverb.

- Kentel 1 - " Me a chomo amañ, er-maez, da ziwall ". Pelec'h e chomo ? amañ, er-maez. An daou c'her-se a zo div renadenn-lec'h d'ar verb " chomo ". Ha bez' ez int anvioù ? nann ; rakverboù.
- 2 - Klaskomp en dilinennad 1 rakverboù all : ne...ket (rakverb-nac'hañ), warc'hoazh ( a verk an amzer ), a-gevret ( a verk an doare ), arabat ( a verk an doare ).
- 3 - " Lip-E-Bav, ar c'hazh, a oa lontek-tre ". Peseurt implij a eo gant ar ger -tre. Kemmañ a ra un nebeudig ster ar ger lontek. Bez' ez eo ivez ur rakverb. Kalz a c'herioù a vez implijet e-giz rakverboù soude an anv-gwan-doareañ : gwelout al lennadennoù 22, 33, 34.
- 4 - " Alanig a c'hoarzh uhel ". Penaos e c'hoarzh ? uhel. An anv-gwan-doareañ " uhel " a zo implijet amañ evel rakverb o verkañ an doare.
- 5 - " Alanig a c'hoarzh uhel-tre ". ar ger -tre a gemm amañ ster ar rakverb uhel.
- 6 - " It dre an toull-se e-barzh " pe " It dre an toull-se e-barzh ar vilin ". Peseurt implij a zo gant "e-barzh" er frazenn gentañ ? en eil frazenn ? Petra eo er frazenn gentañ ? en eil frazenn ?

7 - Grit frazennoù gant ar gerioù-mañ ouzh o implijout tro-ha-tro evel araogennoù hag evel rakverboù : e-barzh, er-maez, a-rack, a-dreñv.

8 - Grit 5 frazenn gant : arabat eo din..... dav eo din.....

9 - Ar rakverb a zo ur ger hag a gemm ster ur verb, un anv-gwan, pe ur rakverb all.

Rakverboù ' zo a c'hell bezañ implijet evel araogennoù : It dre an toull-se e-barzh ; it dre an toull-se e-barzh ar vilin.

Poelladennoù 193 - Diskrivit an dilinennad 1 en ur islinennad-mañ ar rakverboù.

194 - Grit 5 frazenn o teracuiñ gant : arabat eo din..... dav eo din.....

195 Dielfennit rakverboù an dilinennad 1.

196 - Reizhskrivadenn : dilinennad 1. (e-barzh, er-maez, da ziwall, warc'hoazh, a-gevret, da balez, daou-ha-daou.

### IV. AR VERBOU : ar stumm-gouennata.

Kentel 1 - Kemeromp ar frazennoù-mañ ol lennadenn : " N'eus toull all ebet ? "

" Daoust hag unan n'eo ket a-walc'h ? "

" Ha blaz mat a zo gant ar c'hig logod ? "

" Lart a-walc'h int ha kaer eo ar c'hig ? "

Perak e lakaer ar ? ( pik-gouennata ) er dibenn ?

Lakait bremañ ar frazennoù-se er stumm-kadarnaat :

N'eus toull all ebet. Unan n'eo ket a-walc'h. Blaz mat a zo gant ar c'hig logod. Lart a-walc'h int ha kaer eo ar c'hig.

Petra hon eus lezet da gouezhañ e pep frazenn ?

2 - Evit lakaat ur frazenn er stumm-gouennata ez eo a-walc'h lakaat ur pik-gouennata en dibenn. Gellout a reer ivez lakaat ouzhpenn "ha" pe "daoust ha" en derou.

3 - Grit 5 frazenn er stumm-gouennata. Lakait tro-ha-tro ur ? heptken, ha, daoust ha ... Da skouer :

a ) Darev eo an avaloù-douar.

b ) Darev eo an avaloù-douar ?

c ) Ha darev eo an avaloù-douar ?

d ) Daoust ha darev eo an avaloù-douar ?

4 - "Perak e rit kement-se a reuz ? Petra a vank deoc'h ? "

Daoust ha tu a zo da lakaat an div frazenn-se er stumm-kadarnaat ? Ret e vefe kemmañ un nebeut gerioù :

Evit un abeg bennak e rit kement-se a reuz.

Un dra bennak a vank deoc'h ? Perak ? Bez' ez int Pere eo ar gerioù hon eus kemmet ? Perak ? Bez' ez int gerioù-gouennata, evel piv, pegoulz, pevare ( pe da vare ),

pegeit, penaos, pehini, pegenent, pere, petore, pelec'h ( amen ), peseurt, pe.

Ar gerioù pe, petore, peseurt, a vez lakaet dirak an anvioù evit gouennata. Da skouer : pe zen ? peseurt den ?

5 - Grit frazennoù gant ar gerioù-gouennata-se. ( Taolit evezh ouzh an diforc'h a zo etre pegoulz ha pegeit. )

Poelladennoù 197 - Grit 6 frazenn gant ar gerioù-gouennata-mañ : piv, pegoulz ( pevare ), pegeit, penaos, pegenent, peseurt.

- 198 - Grit dre skrid nivereñ 3 ar gentel.  
 193 - Dielfennit ar verboù-mañ tennet eus an dilinennad 1 :  
 it , a chomo , ho po graet .

V. AR GERIADUR : al louzoù-kegin.

- Kentel. 1 - Peseurt legumaj a vez lakaet er soubenn :karotez,  
 pour,irvin,kaol-pome,ognon,chalotez.  
 2 - Peseurt legumaj a zebrer gant ar c'hig :avaloù-douar,piz ,  
 fav-munut,fav,piz -rous,artichaod,pinochez.  
 3 - Pere a implijer da vlazañ ar meuzioù hepken,perisilh,serfilh,  
 saoj,tin,tin-lann.  
 4 - Ha pere d'ober saladenn:lezegeez,letuz,sikorea,rabez,toma-  
 tez,kokombrez,beler.  
 5 - Peseurt plant a hader dindan ar c'hloc'h-gwer,pe ar stern-  
 gwer ?  
 6 - Grit frazennoù klok gant ar verboù-mañ :c'hwennat (dilouzaou-  
 iñ ),diwriziennañ,displantañ,treuzplantañ,skrabañ,razañ.  
 7 - Displegit an diforc'h a zo etre "gwelead-bleuñv" ha "gwele-  
 ad-teil".  
 8 - Lakait un anv bennak dirak an anvioù-gwan-mañ da ziskouez  
 e komprenit o ster: c'hwek ( sukret ),trenk (put,goudrenk,  
 peuztrenk ),c'hwerv,tener ( gwak ),kalet .

Poelladennoù. 194 - Mammig a zo aet d'al liorz da gerc'hat  
 louzoù-kegin.Kaset he deus ganti .... ha ....  
 Ar.... n'oant ket kalet a-walc'h c'hoazh.Dastumet he deus  
 ivez..... Ar.... a zo re c'hlas c'hoazh.Ur bod....bremañ evit  
 reiñ blaz.Ar ....a zo saourus-kenañ gant bara-amann,met re vi-  
 han int evit ar mare,ret e vo gortoz.Ar .... a zo ruz ha....  
 Troc'haf a ra daou pe dri fenn.....evit lakaat da boazhañ  
 a-benn koan.

195. Grit e 10 pe 12 linenn un diverradur eus "Lip-E-Bav hag  
 Alanig."

I. STUDI AR GERIOU. ( kendalc'h.)

- 6 - Penaos eo stummet ar verb "strishaat" ?  
 gant an anv-gwan "strizh" hag an dibenn -aat.  
 Klaskit verboù all gant an dibenn-se :  
 moanaat a zo mont moanoc'h-moanañ ,  
 buanaat a zo mont buanoc'h-buanañ ,  
 kaeraat a zo mont kaeroc'h-kaerañ ,  
 koantaat a zo mont koantoc'h-koantañ ,  
 bravaat a zo mont bravoc'h-bravañ .

LENNADENN 30 : LIP-E-BAV HAG ALANIG. ( diwez ).

1 - Neuze lib-E-Bav ,e benn el las-kroug, en em lakaas d'ober  
 miaou evel ma ra an holl gizhier.Ar miliner a glevas anezhañ.  
 " A,a ! emezañ,lacuen en ur ober ul lamm diouzh a wele,paket  
 eo an amprevan er skoulm-lagadenn.Gouzout a raen em boa sten-  
 net mat va las.Deomp da welout,ms vo graet d' al laer pasañ  
 ker priz ar c'hilhog." Ehaouiñ a reas ar gouloù.Dihuniñ a reas  
 e wreg,e vugale,ar vevelien": Alo,paotred ! kouezhet eo al lou-  
 arn er stign. Deomp d'ober e stal dezhañ !"

2 - Tud an ti,bras ha bihan,a savas eus o gwale.Ar miliner a  
 bakas ur pouez houarn,ar wreg ar c'hrog-yod,hag ar mevel ar  
 morzhol ponner a bike gantañ rod ar vilin.Pep hini a skoas war  
 ar paour-kaezh Lip-E-Bav gant ar benveg a oa gantañ,hag ar reu-  
 tañ ma c'helle.Unan a dorras dezhañ ur pav,unan all a grevas  
 dezhañ ul lagad.Pañchig,mab ar miliner,a oa o tont gant ur  
 forc'h houarn pevarbiziek.Lip-E-Bav a velas bizied hir ar forc'h,  
 rak gouzout a reomp e wel ar c'hizhier kenkoulz diouzh an noz  
 ha diouzh an deiz.Sofjal a reas neuze : " Poent eo din mont  
 ac'han,pe emañ graet ganin". Pulc'oret-naat e oa.

3 - Kregiñ a reas ouzh ar gorden gant e zent hag e trailhas  
 anezhi.Ar gorden a dorras.Lip-E-Bav a lammas er-maez dre an  
 toull treitour. Poent ' oa dezhañ.Ur munut diwezhatoc'h,hag e  
 vije bet dic'houzouget gant un taol falz.Kemerout a reas hent  
 Kemper-Kaurintin hep gouzout dare dezhañ,rak diaes a-walc'h e  
 oa dezhañ gwelout e hent gant ul lagad dallet,hag unan all  
 hanter grevet.

( " Alanig Al Louarn",p.p.34/37 )

I. STUDI AR GERIOU.

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet. ( pech, ganas,  
 temm, munutenn ).  
 2 - Penaos eo bet stummet ar ger "pevarbiziek" ? Klaskit gerioù  
 bet stummet en un doare hevel :pevarroadek,pevarzuek,pevar-  
 dornek. ( Savit frazennoù gant ar gerioù-se ).  
 Grit heñvel gant ar ger "tri": tribiziek,trizroadek,tric'horn,  
 triliv.  
 Gant ar ger "daou" : daoudroadek,daoubennek. ( Al Louarn a zo  
 ul loen daoudroadek;er c'hontadennoù e kejer gant loened daou-  
 bennek ).  
 Peseurt ster a zo gant "daoubennañ,daoubennet" a-wechoù ?  
 3 - Klaskit daou ster d'ar ger "treitour".  
 a ) ganas . ( Judas a oa un treitour ).  
 b ) drouk . ( ar soudarded roman a oa treitour ouzh Jezuz.)

II. AR NENNOUIO.

- 1 - A-benn ar fin,piv a stignas al las-kroug ?  
 2 - Pet a dud a redas da gant ar c'hazh ? Peseurt benveg a oa  
 gant pep hini anezho ?  
 3 - Penaos e teuas a-benn Lip-E-Bav da dec'hout ?  
 4 - Daoust hag anvet mat e oa bet ar c'hazh ?  
 5 - Roit un titl da bep dilinennad al lennadenn.

III. AR VEZHADUR : an estlammañ;liesterioù en -i.

Kentel . 1 - Moarvat ez oc'h bet souezhet,estlammet gant troioù-gwidre Alanig Al Louarn.Gellout a rafemp lavarout evit merkañ hon estlamm : Peseurt loen gwidreüs ! Pebezh loen gwidreüs ! Nag e oa gwidreüs al loen-se ! pe c'hoazh : Pegen gwidreüs ! Gwidreüsat loen ! Gwidreüsah loen !

2 - greomp estlammadennoù heñvel gant ar gerioù-mañ : ur c'hazh genaouek ; ur vleuvenn vrav . arabat deoc'h ankounac'haat ar poent-estlammañ (!) er poelladennoù dre skrid.

3 - Klaskit liester ar ger "krog" : krogou,kreier,krigi . Daoust hag ez anavezit gerioù all dezho ul liester oc'h echuiñ gant -i ? Bran, brini karr ,kirri bleiz ,bleizi lestr,listri houad ,houidi polez,polizi erv ,irvi kendery,kendirvi brezhel, brezhili( ur pesk ) lizher,lizhari legestr,ligistri golvan,golveni ( golvaned ) gavr, givri moualc'h ,mouilc'hi touseg, tousegi ( touseged ) kontell, kontilli godell,godilli gwaz ,gwazi meilh,meilhi ( meilhed ) garz ,girzi ( garzed ; par ar waz )

Poelladennoù .196 - Diskrivañ an dilinennad 3 en ur lakaat ar verboù en amzer-da-zort . 197 - Grit dre skrid niverenn 2 ar gentel. 198 - Reizhskrivadenn : an dilinennad 3 ( gordenn, trailhas, dorras,diwezhatoc'h,dic'houzouget,dallet .)

IV. AR VERBOU : ar stumm-emober.

Kentel . 1 - " Lip-E-Bav en em lakaas d'ober miaou ". Tu a vefe bet da lavarout,daoust ma n'eo ket brav : " Lip-E-Bav a lakaas Lip-E-Bav d'ober miaou ." Setu perak e lakaer " en em " dirak ar verb .

2 - Ar stumm emober a vez implijet pa ra ar rener an dra warnañ e-unan,pe an eil war egile. " En em " a zo un doare raganv: ar paotr en em walc'h , ar baotred en em gann .

3 - Displegit ar verb " en em walc'hiñ penn-kil-ha-troad " doare-displegañ :amzer-vremañ a.dremenet -strizh } displegadur p.ha dib. a.dremenet - amstrizh

4 - ar ger " em " a dalvez da stummañ gerioù nevez : emgar,emglev,emlazh ,emlivadur ,emwalc'h ,emaberz ....

Poelladennoù. 199 - Displegit ar frazenn-mañ er stumm emober: " en em blijout e-mesk ar bleunioù " ; doare-displegañ:a.vremañ , a.dremenet-strizh ,a.dremenet-amstrizh; displegadur dibersonel. 200 - displegadur personel : E-mesk ar bleunioù en em blijan....

V. AR GERIADUR : ar bleuñv.

Kentel . 1 - Peseurt bleunioù koant a gaver d'an nevez-amzer war ar maez ? bokedoù-hañv (bokedoù-laszh),pour-bran, spern-gwenn,pav-bran,glizin,roz-aer,roz-moc'h,roz-ki,foeon, troell ,gwezvoud,tro-heol,violetez ( melion ,troadig-eboul)

2 - Peseurt bleunioù a ranker gounit al liorzhoù ? louzaouenn-ar-goukoung,jenoflez,daoulagad-ar-Werc'hez,louzaouenn-an-Drinded, roz-Indez,jesmi , gwenterc'henn ,nadozioù ( jeranion ) , louzaouenn-ar-groaz,tulipez .

3 - Klaskit er rolloù uheloc'h bleunioù abred (prim,kentrat) , hañvek,goañvek,bloaziek,bividik ( padus ) .

4 - Peseurt diforc'h a zo etre fresk ha gweñvet;en e vleuñv ha divleuñv ?

5 - Petra a c'heller ober gant ar bleuñv ? bokedoù ( torkadoù ) , kurunennoù ,garlantezioù .

6 - Renkit hervez urzh an amzer ar verboù-mañ a zispleg buhez ar plant :sec'hañ,greuniañ,frondañ,digeriñ,bleuñviñ,broñsañ , dishiliañ ,eginañ,kreskiñ,ober taoladoù ,diwanañ.

7 - Peseurt diforc'h a zo etre disec'hañ ha dizeriañ ?

8 - Klaskit bleunioù dezho al livioù-mañ :ruz,roz,ruz-gwad, glas-ruz,moug ( limestra ) ,gwer,glas-mor,glas-pers ( glas-glizin ) ,louet,gell,melen,melan-dour,melen-ruz.

9 - Peseurt diforc'h a zo etre gwenn ha damwenn ( arwenn ) du ha damzu ( arzu ) ruz damruz ( arruz ) gwer damwer ( arwer ) glas damc'hlas ( arc'hlas ) .

Poelladennoù. 201 - Savit pemp frazenn gant anvioù-bleuñv hag anvioù-gwan an niverenn 9 . 202 - Ur wech bennak ez oc'h bet aet da gutuilh bleunioù.Dis - plegit ar pezh a zo bet c'hoarvezet.

=====  
( Kendalc'h ar bajenn 90 )

kanapaer ( pabor ) , meleneg ,kammeres-ar-dour,eostig,alc'hweder, penn-glaou,ar gazez-koad,ar gegin,ar vran.

5 - Peseurt laboused hirc'harek a vev an-dro d'an dour,peurvuiañ ? ar c'haran,ar herlegon ( ar gerc'heiz , Marc'harid gouzoug-hir ) .

6 - E peseurt broioù a vev ar c'hwibon ? Klaskit un nebeut evned tremeniat .

7 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ :kanañ,richanañ,c'hwibanat, kludañ,pigosat,neizhañ,diglorañ,mijal ,evneta,tapout,neizhiaou , gludañ,dineizhañ,difcupañ neizhoù. (neizhata)

8 - Peseurt diforc'h a zo etre divaskell ha divesker ?

Poelladennoù. 211 - Grit 5 frazenn gant verboù an niverenn 7. 212 - Aet oc'h bet da zifoupañ un neizh pig.Danevel- lit ar pezh a zo bet c'hoarvezet ,gantañ ha

ganeoc'h ! 213 - Bez' hoc'h eus un avn doñv pe ur pesk-ruz.Displegit eus pe- lec'h a teu,ha penaos e rit war e dro.





( Pevar loen o deus kuitast ar gêr evit mont da c'hoari muzik da Vrem:un azen,ur c'hi,ur c'hazh,hag ur c'hilhog.)

1 - Kêr a oa pell avat.D'an abardaez,ec'h en em gavjont e-kreiz ur c'hoad.Eno e fellas dezho kousket.An azen hag ar c'hi a c'hourvezas e-harz ur wezenn vras.Ar c'hazh a grasas war ur skourr,hag ar c'hilhog a nijas betek beg ar wezenn,da vezañ gwelloc'h e surentez.A-rack en em reiñ da gousket,e sellas ur wech c'hoazh etrezek ar pevar avel.Petra a welas a-bell,nemet ur gouloù bihan.

2 - Hag eñ da c'hervel e genseurted:  
- Ahont e tle bezañ un ti,pa welan-me ur gouloù.  
An azen a lavaras :  
- Deomp neuze,rak amañ eo fall al lojeiz.

Ar c'hi a gave dezhañ ouzhpenn ne raje ket a zroug dezhañ kavout un askorn pe zaoù gant un tamm kig stag outo.Hag i etrezek ar gouloù,hag a weljont digale o lugerniñ sklaeroc'h-sklaerañ dirazo.

3 - E oa o tont eus ti laeron sklerijennet-kaer.An azen,a oa an hini brasañ ,a dostaas ouzh ar prenestr hag a daolas ur sell e-barzh.  
- Petra a welez ? eme ar c'hilhog .  
- Petra a welan ,a respontas an azen .Un daol dreset-mat,warni a hep seurt tarmoù lipous,ha laeron o festañ tro-war-dro.  
- Sed aze ha na vefe ket fall evidomp ,eme ar c'hilhog.  
- Ya...a,ya,siwazh ! eme an azen,ma vefamp e-barzh an ti !

4 - Neuze,an anevaled en em guzuliaas etrezo da c'houzout penaos ober da gas kuit al laeron.A-benn ar fin e kevjont an doare.An azen a harpas e bavioù a-rack ouzh ar prenestr.Ar c'hi a lammas war gein an azen.Ar c'hazh a grasas war ar c'hi.Hag ar c'hilhog a yeas war nij da gludañ war benn ar c'hazh. ( da gendec'hel ).

### I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar gerioù islinennet(dirak,barr, en em astennas ,hep dale ,blizidik ,loened, lojañ ).

2 - Displegit ster ar ger kludañ : azezañ.  
Moarvat ez anavezit ur ger heñvel ouzh kludañ ? Kluchañ.  
Grit div pe deir fra-genn da ziskouez noc'h eus werzet an di - forc'h a zo etre an daou c'her:

Ar c'hilhog a oa aet da gludañ a beg ar wezenn.  
Ar yar a glude war ar skeul .

Ar vamm yar a gluche e korn ar c'harrdi.  
Yannig a oa kluchet ( en e gluch ) o c'hoari kanetiniere .  
Ar vugale a gluche brav pa vezent o riklañ war ar skorn.

3 - Penaos ez anver tud kêr ? k'friz ; tud ho parrez ?  
Tud Breizh ? Breizhiz .Pa gomzer eus un den hepken e lavarer :  
ur Breizhad . Klaskit anvioù all stummet e giz-se :Tregeriad,  
Gouelouad ,Leonad ,Kernevad ,Gwenadad ,Hollandad.... Lakait ar  
gerioù-se el liester : ur Breizhad Breizhiz ( hep ger-mell ).

### II. AR MENCZIOÙ.

1 - Diskouezit en deus kavet pep loen ur plas dereat.  
2 - Perak e lavar an azen ez eo fall al lojeiz?  
3 - Petra a welas an azen e-barzh an ti?  
4 - Penaos e kavjont an doare da welout ar pezh a oa e-barzh an ti ?

### III. AR VIEZHADUR : heñvelsterioù , kontrolsterioù.

Kentel . 1 - El lennadenn-mañ,eval e pep hini, ez eus bet gou-  
lennet lakaat gerioù all e-lec'h ar re implijet.

Klaskit verboù heñvelster, anvioù heñvelster hag anvioù-gwan heñvelster.

2 - Lakaat hon eus bei "lojañ" e-lec'h "kludañ";daoust hag an daou c'her-se a zo heñvelster penn-da-benn ? Grit div frazenn da ziskouez an diforc'h : ar c'hi a oa lojet e-diabarzh ar we-  
zenn ; ar c'hilhog a oa kludet e beg ar wezenn.  
Studiet hon eus dija un nebeut gerioù ha na oant ket heñvelster penn-da-benn :kludañ ha kluchañ ( 1.31 );kemer,klask ha kerc'hat ( 1.27 );kerc'henn ha gouzoug ( 1.36 ).

3 - Heñvelsterioù a vez anvet ar gerioù o deus hogos an hevelep ster : skourr ha barr,anevaled ha loened ,gourvezañ hag en em astenn ,lipous ha blizidik.

3 - Lennit an div frazenn gentañ .Klaskit gerioù kontrol da la-  
kaat e-lec'h :kêr ,pell ,d'an abardaez .( ar maezioù ,tost,  
beure pe vintin ).

4 - Klaskit kontrolsterioù d'ar gerioù-mañ dre lakaat di- pe di-  
dirak : aas,azaman,asur ,lojañ ,sammañ,skuzh,scuzhet ;  
di- :kontañ ,lavarout ,pakañ ,par,plegañ,plantañ,plijadur.

Er gerioù-mañ e c'hoarvez ur c'hemadur warlerc'h di- :  
paot , pikouz , plaen , plegus , plijus , kalonekaus , kamm , gallus , marvel ,  
breinus , gwelus , drouk .

Daoust ha " louzaouiñ " ha " dilouza -  
ouiñ " a zo kontrolsterioù ? Displegit ster pep ger dre ur fra-  
zenn .

5 - Klaskit kontrolsterioù d'ar gerioù-mañ : peskedus , pouezus ,  
kuzhet , lavariant , speredek , livek , hualet , desket . ( dishual ,  
dizesk , dibesk , dibouez , diguzh , dilavar , disliv , dispered ) .

6 - Peseurt ster a zo gant ar gerioù " dibenn , divotoù " ?  
( Adwelit ar gentel 8 : Studi ar gerioù . )

Poelladennoù . 203 - Lakait an dilinennad 1 en amzer-vremañ .  
204 - Grit dre skrid an niverenn 4 .

205 - Grit dre skrid an niverenn 5 .

206 - Grit pemp frazenn gant anvioù-gwan tennet eus an niv. 5 .

207 - Reizhakrivadenn : dilinennad 1 ( abardaez , a c'hourvezas ,  
e-harz , ur skourr , ur c'hilhog , surentez , strezek , a-bell ) .

#### IV. AR VERBOU : ar verboù-skoazell .

Kentel. 1 - Lennomp ar frazenn-mañ tennet eus al lennadenn :

a ) ar c'hazh a grapas war ur skourr .

rener verb renadenn distin

Tu a vefe bet da lavarout :

b ) war ar skourr e krapas ar c'hazh .

c ) hag e krapas ar c'hazh war ar skourr .

d ) bez ' e krapas ar c'hazh war ar skourr .

e ) krapañ a reas ar c'hazh war ar skourr .

En div frazenn diwezhañ hon eus ranket kemerout daou verb all  
d'hor skoazellañ ; anvet e vezont "verboù-skoazell". ( Klaskit pere ) .

2 - E brezhoneg e krog ar frazenn gant ar ger pouezusañ . Pa vez  
ar verb e derou ar frazenn e c'heller kemer " ober " pe " bezañ "  
evel verboù-skoazell : Bez ' e krapas ar c'hazh er wezenn .

Krapañ a reas ar c'hazh er wezenn .

3 - Greomp 4 frazenn nevez gant houmañ en ur gemmañ leo'h pep  
lodenn , diwar skouer an niverenn 1 .

Poelladennoù . 208 - Grit dre skrid ar niverenn 3 .

209 - Dielfennit gerioù ar frazenn-mañ :

" ar c'hi a lammas war gain an azen " .

pe c'hoazh : " ar c'hazh a grasas war ar c'hi " .

210 : Dielfennit ar frazenn-mañ : " An azen , a oa an hini brasañ ,  
a dostaas ouzh ar prenestr " .

#### V. GERIADUR : evned ar maezioù .

Kentel. 1 - Peseurt loened a vez chaseet : ar glujar ( klujiri ) ,  
ar c'hefeleg , ar gioc'h , ar goailh , ar yar-dour , ar c'hilhog-  
gouez , ar drask , ar voualc'h , an dred ( dridi ) .

2 - Peseurt evned-noz a anavezit ? ar gaouenn , an evn-kazh ( ar  
gaouenn-gazh ) .

3 - Peseurt evned a c'hell bevañ en ur gaoued ? ar pinter ,  
ar seran , ar big , an durzhunell , ar gudon ( koulm-koad ) .

4 - Daoust hag ez anavezit evned all ? ar golvan , al laouenan ,  
ar rouzezan , ar voc'hruzig ( rujodenn , Alanig kof-ruz ) , kanapaer ,

( kendalc'h war ar bajenn 87 ) .

- 90 -

#### LENNADENN 32 : AR PEVAR SONER ( Kendalc'h ha diwez ) .

1 - War se , stagañ gant o muzik . An azen a himnos , ar c'hi a harzhe ,  
ar c'hazh a viaoue , hag ar c'hilhog a gane . Hag i da sailhañ e-  
barzh dre ar prenestr , tra ma kouezhe ar gwerennoù en ur stirlin-  
ket tro-war-dro . Al laeron , spontet gant an trouz , a reas ul lamm  
er vann , o kredif e oa ur spes o tont . Tec'hout a rejont er c'hoad ,  
spouronet . Hag ar pevar c'henseurt a azezas ouzh taol hag a ze-  
bras evel pa n'o dije ket debret abaoe peder sizhun .

2 - Pa voe echu ar pred , mougañ a rejont ar goulou , ha da gouket ,  
Pep unan hervez e voaz : an azen war an taol , ar c'hi e-tal an  
nor-adreñv , ar c'hazh war an oaled e-touez al ludu tomm , hag ar  
c'hilhog war un treust uhel . Ha skuizh evel ma oant gant an hent  
o doa graet , ne voent ket pell da venel kousket .

Tremen hanternoz , al laeron a welas a-bell ne  
oa mui a c'houloù en ti , hag e oa sioul pep tra . Ar c'habiten a  
lavaras d'ur paotr : Me ' zo bet set o vont kuit ken buan . Ase  
da furchal an ti da welout ha des ' ez eus unan bennak e-barzh .

3 - Al laer a yeas ha ne glevas trouz ebet . O tont er gegin , e  
fellas dezhañ enaouiñ ur gouloù . Hag en da gemer daoulagad luer-  
nus ar c'hazh evit glañ-bev , ha da astenn un alunetezenn da gaout  
Tan . Ar c'hazh avat ne gare ket e vije graet goap outañ . Ha da  
sailhañ ouzh penn al laer , ha d'e grafignet gant e holl nerzh . Al  
laer , sabatuet , a redas betek an nor-adreñv , Horeh ar c'hi , a oa  
eno , a lammas warnañ hag a grogas en e c'har . An den kaezh a  
yeas , pennfollet , dre ar porzh . Pa dremanas e-biou d'ar bern-teil ,  
an azen a zistagas gantañ un taol start gant e bavioù-adreñv .  
Hag ar c'hilhog , bet dihanet gant ar choloni a ganas : kikelikeli !

4 - Hag al laer da gemer hed e c'har ha da vont an-dro da gaout  
e gabiten , o lavarout : " Siwazh ! en ti ez eus ur soraerezh krib ,  
hag he deus krafignet va fern gant hec'h ivinoù hir . E-tal an nor  
ez eus un den , ur gontell gantañ , hag en deus sanket anezhi en gar .  
Er porzh ez eus un azerouant da , er deus bazhataet ac'haon . Ha war  
an doenn emañ ar barner o krial : harz al laer ! Ha neuze on  
aet kuit ! Diwar ar poent-se , ne gredas mui al laeron mont war-dro  
an ti . Ar pevar soner en em gavas ken mat e-barzh , ma ne voent ken  
evit loc'hañ .

( " MARVAITHOU AN OALRED " gant ar vreaudeur GRIMM , troet  
gant d'Hemon hag embannet war " WALARN " niv. 61 ) .

#### I. STUDI AR GERIOU .

1 - Klaskit gerioù all da lakat e-lec'h ar re islinennet .  
( kompaer , spontet , en aer , senin , didrouz , set , sotaet , saouzanet ,  
eluniñ , skedus , skrebañ , naer askellek )

2 - Klaskit ar pevar ger a nispleg kriadenn pep loen .  
Echuit ar frazenn-mañ : An azen a blij dezhañ . . . . . Ar  
c'hazh a blij dezhañ . . . . . Ar c'hi a blij dezhañ . . . . .

Ar c'hilhog a blij dezhañ . . . . . ( harzhal , miaoual , himnoal , kanañ )  
Ar c'hilhog a blij dezhañ . . . . . ( mat gmeoc'h evel

3 - Klaskit kriadennoù all loened anavezet - mat gmeoc'h evel  
ar vuoc'h , ar pemoc'h , an dañvad , ar vamm-yar , ar gazeg , ar bleiz ,  
al labous , ar vran , ar glesker , ar big , ar c'hi : blejal , doc'hul ,  
bogsliat , sklokak , c'hwirinat , yudal , richanah , koagal , grakal , rage-  
chat , razeilhat .

4 - Peseurt evnezhiadenn a rit diouzhtu diwar-benn ar verboù-se ?  
ar dibenn -ger a zo -al peurlvulañ . ( Lavarout a reer ivez : richa-

- 91 -

nal ,c'hwirinal,bekal .)

5 - Lakaat unan eus an tri ger-mañ en toulloù ,ha diwallomp da gemer an eil evit egile : gar,karr.

.....Yann a zo kouezhet en toull;torret eo bet e .....

..... Yann a zo chomet dindan ar c'harr;torret eo bet

e .....  
( Gouzout a rit evel just petra eo an ti-gar.)

6 - An aerouant a zo ul loen vil dezhañ korf un naer,eskell un evn ha penn ur bleiz.N'eus bet anezhañ morse,met ur skeudenn eo eus an droug.En hoc'h iliz-parrez hoc'h eus gwalet anezhañ ouzh treid Sant .....

Pa vez un tammig avel e plij d'ar vugale c'hoari gant un aerouant azet ganto.

## II. AR MENOZIOU.

- 1 - Petra a reas al laeron ?
- 2 - Daoust ha naon o doa ar pevar soner ?
- 3 - Daoust ha kavet en doa pep hini ur plas gwelloc'h ?
- 4 - Petra a dremenas war-dro hanternoz ?
- 5 - Petra a felle d'al laer ober ?
- 6 - Petra a c'hoarvezas gantañ ?
- 7 - Displegit piv a oa ar sorserez,an den,an aerouant,ar barnar.
- 8 - Daoust hag e oa e peoc'h koustiañs al laer ? Perak ?

## III. AR YEZHADUR : ar rakgerioù.

**Kentel.** 1 - Gwalet hon eus e oa tu da stummañ gerioù nevez gant di- pe die- .

Studiet hon eus a-hed ar bloaz meur a rakger : gwall ( L.3 ) , mous ( L.16 ) ,peur ha peuz (L.14 ) , di ( L. 8 ) ,di (L.31 ) , kêr ( L.18 ) .( Adwelomp ar c'hentelioù-se tamm pe damm ).

2 - Kamm- , drouk- ,falz- , krak- a zo un tammig heñvelster.

**Kamm** : kammgamer,kammheñvel,kammroz ( un doare focon. ),kammañ,kammigellat ha kamm-digamm,kamm-jilgamm.

**drouk** : droukkemer ,droukkinnig,droukkozm,drouk'hoant,droukpedenn,droukprezeg,droukpered,drouksant,droukverzh , drougober,droug-kalon,droug-hirvezh,droug-mor,droukrañs .

**fals** : fals-tamall,falskredenn,falstouer,falsvarch ( ur weadenn-droad ),falsvarc'hadourezh ha falsañ,falsentez,falser.

**krak** : krakaotrou ,krakouad,krakvefañ,krakvezv (hantervezv ),krakvorian .

**hanter** : hanterober,hanterwelout,hanterglevout,hanterdro,hantervloaz,hantervoued,hantervreuer,hantergelc'h ha hanterifi,hanterour.

3 - **daou** : daoubennañ ,daoulammat,daoublegañ,daouhualif,daouhanterifi,daougementif .( gwallit L.30 ha L.25 ).

**lies** : liesliv,liesdoare,liestuek,liesskrivañ,lieskementif,lieskementadur.

**ad** : adkavout,adkemer,adkoan,adlavarout,adober,adpardon

**Pbelladennoù.** 214 - Lakait an dilinennad 1 en amzer-da-zont .

215 - Grit 5 frazenn gant gerioù dibabet en niv.2

216 - Grit 5 frazenn gant gerioù dibabet en niverenn 3.

217 - Reizhskrivadenn : dilinennad 1 ( hinnoe,a viaoue,stirlin-kat,tro-war-dro,ur spes ,pevar c'henseurt ).

## IV. AR VERBOU : ar verb gouzout .

**Kentel** - 1 - Adwelomp ar verb gouzout .Displegomp en holl amzerioù ar frazenn-mañ: Bemdez e ouzon va c'hentel: Doare-displegañ,amzer-vremañ, doare-divizout amzer-da-zont , doare-gourc'hemenn, amzer-andremenet , amzer-dremenet-strizh, amzer-dremenet-amstrizh

( E-lec'h an doare-gourc'hemenn e lavarer peurliesañ : dit da c'houzout,deomp da c'houzout,deoc'h da c'houzout )

2 - Ar verb gouzout a zo ur verb direizh,perak ? Daoust hag ez anavezit verboù direizh all ? kaout , bezañ , ober , mont .

3 - Ar verb gouvezout en deus sturmoù reizh . Displegit ar verb-se en amzerioù merket uheloc'h .

4 - Mar fellfe din pouezañ war ar verb e lavarfen : Gouzout a ran va c'hentel bemdez, Bez' e ouzon va c'hentel bemdez , pe c'hoazh Gouzout a ouzon va c'hentel bemdez.

Ar verb gouzout a c'heñl servijout da verb-skoazell dezhañ e-unan.

Displegit ar frazenn-se ar pevar amzer eñ an doare-displegañ.

**Poelladennoù.** 218 - Grit dre skrid an niverenn 1.

219 - Grit dre skrid an niverenn 3.

220 - Grit dre skrid an niverenn 4.

221 - Dielfennit gerioù ar frazennoù-mañ :

Al laer,sabatuet,a redas betek an nor.

An den kaezh,pennfollet,a yeas dre ar porzh.

222 - Dielfennit ar frazennoù-mañ :

Al laer a yeas ha ne glevas trouz ebet.

Pa dremenas e-biou d'ar barn-teil,a tistagas an azen

gantañ un taol start gant e baviou-adreñv.

Hogen ar c'hi,a oa eno, a lamas warnañ.

## V. AR RERIADUR : al lez-varn.

**Kentel** . 1 - Piv a ra war-dro an urzh er vro ? an archerien, ar bolised,hag ar C.R.S.-ad . (Kospagmunezh Surentez ar Republik ) hag ivez diouzh ret ar arme.

2 - Mar degouezh deoc'h disentiñ ouzh lezennadur ( kod ) an henchoù,petra ho po da bezañ ? un dall-gastiz.

Ha mar degouezh deoc'h bezañ kiriek d'ur gwallzarvoud,pelec'h e vlot kaset ? dirak lez-varn ar gwallou .

3 - Pa vez bet sevenet ur muntr pe un torfed bennak , klask ar muntrer,pe an labour ar polis ?

petra eo labour ar polis ? tamallad .

torfedour,pe da vhanañ an tamallad .

labour ar barnar-enklasker ? ober un enklask war-dro ar muntr.

petra eo labour an tastoù hag an alvokad ( breutaer ) ?

4 - Peseurt barnadenn a c'hell bezañ douget ? an tamallad a c'hell bezañ didamallet,barnet d'an toull-bac'h,d'ar galeoù,pe d'ar marv.

5 - Digant piv e c'hell en den barnet goulenñ e zigastiz ?

6 - Daoust hag ez anavezit gerioù all evit toull-bac'h ? prison, bidouf.

7 - Peseurt diforc'h a zo etre kablus, digablus ha digastiz ?  
didamall ha dinoaz .

8 - Petra eo dougen ur falstesteni ?

Poelladennoù. 223 - Lekait en toulloù gwenn ar gerioù a vank.

Yann en deus lazhet ur bugel war an hent gant e  
garr-tan. Un .... pizh a zo bet graet gant .... Galvet eo  
bet dirak ..... Ar ..... en deus goulennet digantañ e anv, e  
oad, e vicher, e chomlec'h. Ret eo bet dezhañ displegañ ar .....  
Goulennet ez eus bet ivez digant an ..... petra o doa bet gwelet.  
Difennet eo bet gant ..... Yann en devo un ..... da basañ  
dre ma 'z se re vuan, met disklêriet eo bet ..... Ar bugel a oa  
..... A-greiz-holl en doa treuzet an hent. Anez se e vefe bet  
barnet Yann d'.....

224. Grit 1 diverradur eus " Ar Pevar Soner " .

225. Danevellit ur gwallzarvoud.

+++++

( kendalc'h er bajenn 99 )

V. AR GERIADUR : preñved hag amprevaned .

Kentel.1- Lavarit pelec'h e kaver ar preñved-mañ: buzug, ar c'hon-  
tron, ar c'hest ( er bouzelloù ), ar preñved-lugernus  
( preñved-noz ) ar preñved-seiz .

2 - Petra a ouezit diwar-benn an amprevaned-ma : ar c'hwil-  
derv, ar valafenn, ar valafenn-noz, ar vuoc'hig-doue, an nadoz-aer,  
ar gevridenn, ar verienenn, ar c'hilhog-radenn, skrilh-douar  
hag ar skrilh-caled, ar c'hwenenn, al laouenn, ar wenenenn.

3 - Penaos ez anver al loened a zebr an dilhad ? ar gaozan ( mirt,  
tartouz ) .

4 - Peseurt loened-stlej a anavezit ? an touseg, an anaf, ar gla-  
zard, ar sourd, ar vaot, an naer-wiber ( a flemm ) hag an naer-vro.

5 - Peseurt diforc'h a welit etre : pendolog, ran, randouseg, glesker.

6 - Peseurt diforc'h a zo etre un taol-gwenan, ur ruskenn (kestenn,  
koloenn ) ha ruskenneg ? , ar grugell-verien ?

Pehini eo labour pep hini eus ar gwenan e-diabarzh ar rus-  
kenn : ar c'horerez, al labourerezed hag ar vamm ?

7 - Grit frazennoù gant ar verboù-mañ hag an anvioù meneget a-us:  
emweañ, sunañ, darnijal, flemmañ ( broudañ ), boudal, fraoñval, c'hwiba-  
nat, nezañ, distrujañ, puilhañ ( bordilhañ ) .

Poelladennoù. 241 - Savit pemp frazenn, er stumm-lec'hiañ, gant  
verboù an niverenn 7 : kmañ ar wenenenn o tarnijal.

242 - Savit e dek pe daouzek linenn un diverradur eus " Olifant  
an termaji " .

LENNADENN 33 : OLIFANTED AN TERMAJI.



1 - Un dervezh en em gavas e gouezh ha bleiben ul lostennad gwe-  
turiou ha kirri-termaji stlejet gant ezen, muled ha kezeg a bep  
liv hag a bep ment. Er re gentañ e oa krugelladoù gwazed, ar  
c'hed ha bugale du-pod o blev hag o decoulagad ha rous o c'hro-  
c'hroc'hen, gwiaket dizoare gant a bep seurt dilhad iaktis na  
cant ket heñvel ouzh re an dud all. Er c'hirri klozet gant  
barrinier houarn ha goloet gant pezhioù lien goudronet, e kle-  
ved loened gouez o c'hourdrouz gant mouezhioù gros hag o  
tabac'hat . Ar re-mañ, moarvat, a oa loened, tigrad, louparded,  
hag anevaled all eus ar broioù toun. War benn e-raok hiniennoù  
eus ar gweturiou e oa marmouzion, svezet e-kichen tud an terma-  
ji, oc'h ober geizoù ha besoù pe o krignat ur frouezhenn bennak,  
ha, da heul al lostennad, e kerzhe tri olifant bras, ur blenier  
war choug pep hini anezho.

2 - En gwirionez, souezhus e oa an anevaled-mañ da welout gant  
o diaskouarn bras ha piat, kement ha pilligoù, hag ar mellaioù  
skilfoù kamm a-seiz ar-maez eus o genou, unan a bep tu d'ar fri  
hir, re bar d'ur gorzenn, a pistoule a-istribilh ouzh o fenn.  
Didrouz e kerzant en o c'hroc'hen kalet ha gwall frank d'o  
o'hori, e-giz ma vije bet ganto, en-dro d'o feakannoù, pep a  
vragoù re vras.

3 - Hernal a reas an termaji war al leur-gêr vras hag e voe dis-  
ternet al loened a oa o stlejañ ar gweturiou hag ar c'hirri, ha  
savet gant n'ouzoù pet tamm lien ur mell telenn pont ha beget  
leum. H-pad an anaf-se ez eas lod eus ar baotred-termaji da glask  
lojeiz d'an olifanted. Marchosi kezeg ar gouarnamant, war hent  
Braspars, a oa goulio d'an ampoent hag eno e voe kavet repu dezho  
o sri. Prehestroù frank a oa war ar marchosi, hag an anevaled

a c'hellas avelin o fenn ha lakaat o fri er-maez. Tost da unan eus ar prenestroù edo korzenn kan al lost-toenn ha dimdani ur varrikenn didal leun a zour.

( da genderc'hel ).

**I. STUDI AR GERIOÙ.**

- 1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet .(ardoù, tabutal, teret, fentus, berniadoù, aridennad, bourk, jipsianed, heje, a-ispilh, ehan, grenn, mare, pezhioù ).
- 2 - Klaskit un anv koant evit ho ki bihan diwar ar verb "fistoulat " : Fistoulig !
- 3 - Gant ar ger lost e stummer kalz a c'herioù all :  
 anvioù plant : lost- louarn, lost-marc'h  
 anv ur goumoulen : lost-kazh ( cirrus )  
 anv un astr : ar steredenn-lostek  
 anv ur pezh dilhad : al lostenn  
 verboù : lostañ, dilostañ  
 Ha divinet hoc'h eus da betra e servij al lost-toenn ?
- 4 - Un dra "du-pod" a zo un dra du-kenañ .  
 Un dra ruz-kenañ a zo ruz-tan ; un dra gwenn-kenañ a zo gwenn-sig.
- 5 - Roit unander barrinier ? barrenn. Klaskit gerioù dezho ul liester heñvel : pazenn, pazinier poentenn, poentinier  
 bazh, bizhier falz, filzier kloc'h, kleier  
 kraou, krevier gaou, gevier roc'h, reier.

**II. AR MENOZIOÙ.**

- 1 - Pet rummad loened a zo ?
- 2 - Diskouezit penaos e vez dilec'hiet pep rummad .
- 3 - Pere eo al loened souezhusañ ? Perak ?
- 4 - Da betra e servij ar gwernioù ?

**III. AR YEZHADUR : ar gourfengerioù.**

Kentel .1 - Un doare all a zo c'hoazh da grouñ gerioù nevez: stagañ ur gourfenger ouzh ur wrizienn. Ar gourfengerioù hon eus studiet betek-hen a veze staget ouzh un anv pe un anv-gwan evit stummañ

un anv nevez :	-adenn ( L.1 )	-ad ( L.4 ha 31 )	-eg (L.9)
	-enn ( L.29, 35 )	-ig ( L.26 )	-vezh (L.36 )
	-er , -our		
ur verb :	-a (L.12 )	-aat ( L.29 )	-al (L.32 )
	-ata ( L.5 )		
un anv-gwan :	-ek (L.30 )	-us -(L.8 ) .	

- 2 - Ar re a chom ganimp da studiañ a vez staget ouzh un anv-gwan da stummañ un anv :  
 -der ( kaerder, braster ) -ded -( uheded, eürusted )  
 -entes ( paourentez, follentez, garventez )  
 -oni ( brasoni, pizhoni ) -ezh (marvelezh, poellegezh ).
- pe ouzh ur verb :  
 -adur ( breinadur, magadur, geriadur, yezhadur ).  
 -adurezh ( kelennadurezh, sevenadurezh ).  
 -edigezh ( ganedigezh, gweledigezh ). -adeg (blejadeg, harzhadeg.)
- 3 - Bez'ez eus ur ger kozh hag a vez implijet da grouñ gerioù nevez : -va = lec'h, da skouer : c'hoariva, skretourva, hunva, gortozva.  
 Kavet e vez ivez: krouglec'h, pennlec'h, c'hoarilec'h.

Poelladennoù - 226 - Diskrivit an dilinennad 2 en ur islinennañ an anvioù-gwan.

227 - Grit frazennoù enno ar gerioù oc'h echuiñ gant -va.

**IV. AR VERBOÙ : an amzerioù-boaz.**

Kentel .1 - Daoust hag e santit an diforc 'h a zo etre ar frazennoù-mañ : Ar c'hi a zo drouk hiziv Al leon a vez drouk .  
 Yann a zo fur er skol hiziv Erwan a vez dalc'haat fur er skol,  
 ha notennoù mat en deus. ha notennoù mat en devez .  
 Ar verboù " bezañ " ha " kaout " o deus stummoù da verkañ ar boaz en amzer-vremañ hag en amzer-dremenet :

2 - amzer-vremañ  
 fur e vezan er skol, e vezez, e vez, e vezomp, e vezit, e vezont,  
 e vezer.  
 notennoù mat am bez, az pe, en devez ( he devez ), hor bez,  
 ho pe, o devez .

amzer-dremenet  
 fur e vezen er skol, e vezes, e veze, e vezomp, e vezec'h, e vezent,  
 e vezed.  
 notennoù mat am beze, az peze, en deveze ( he deveze ) hor beze,  
 ho peze, o deveze.

3 - Displegit ar verboù-mañ er stummoù-boaz : bezañ hegarat, kaout kalon vat.

4 - Displegit ar verboù-mañ : bezañ aketus ha kaout dudi .

Poelladennoù. 228 - Grit dre skrid an niverenn 3.  
 229 - Grit dre skrid an niverenn 4.  
 230 - Dielfennit anvioù-gwan ha rakverboù an dilinennad 2.

**V. AR GERIADUR : al loened gouez.**

Kentel .1- Peseurt loen en deus un drompilh : an olifant; skilfoù : an olifant, ar frikorneg, ar gourglazard, ar morgi. Peseurt loened a zo debrerien-gig: ar pantera, an tigr, al loupard, al leon.  
 Peseurt ovned-preizh a anavezit : an erer, ar gup, ar falc'hun. Daoust hag ez anavezit loened hag a vev en dour ? ar valum, ar morhouc'h, an delphin.  
 Pelec'h e vev an arzh hag ar reunig ?-  
 2 - Peseurt loened a c'hell bezañ doñvaet ? ar bual, ar c'hañval, an dremedal, ar marnouz, ar struskañval.  
 3 - Mearvat ez anavezit un nebeut naered : ar boa, an naer-ourouler, an naer-lunede.

4 - Peseurt loened a lazher evit o olifant ? evit o foulinenn ?

Poelladennoù. 237. ( Lakait ar gerioù a vank ). Yann a zo aet gant e dad d'ar mirdi. A bep tu d'an trepas e oa un oan paour. En e gichen ar ... un evn-preizh bihanoc'h, a glaske ket klasket dantañ anezhañ. En-dro d'ur c'hef e oa rodillet ur... hir ha tey. Demolodet ouzh an troad e selle ouzhoc'h un .... wiled ur..... hag an..... anet mat en abeg d'o c'heñ iaktis. Tremenet en deus e zorn war goin un .... hag ul .... ha n'o deus ket klasket dantañ anezhañ. En-dro d'ur c'hef e oa rodillet ur... gant daoulagad lugernus. An .... en doa plantet e ivinoù e korf un oan paour. En e gichen ar ... gouezinus e oa gwelout un ... brun ober kemend-all d'ur poësin. Gouezinus e oa gwelout un ... brun hag unan gwenn skoaz-ouzh-skoaz, dorv ha dizrouk, e-touez kement a dud. Ret eo avat lavarout e c'ant holl loened plouzennet.

232 - Ur wech bannak hoc'h eus arvestat ouzh ur sirk, pe gweladennet ul liorz-loened ( ur zoo ). Danevallit.





1 - Ne gav ket deoc'h, Aotrou Person, ez eo ur vezh gwelout stad truezus skeudenn Sant Pêr en hon iliz ? ar paour kaezh ! E benn a zo prest da gouezhañ, e zaoulagad a zo debret gant ar preñved; n'en deus nemet ur vrec'h ha troad ebet ken; ur gozh vantell a zo gantañ war e choug, pilhaouer ebet ne rofe gwen-neg eviti.

- Setu va brasañ glac'har, Fañch kaezh. Metra ' ri ? Un delwenn nevez, kizellet en ur wezenn derv gant ur mestr war ar vicher, a zo prest e Lanuon c'hwec'h miz ' zo . Siwazh n'em eus ket peadra, na tost, evit echuiñ d'he fañch.

2 - Ac'hanta n'hor'h eus nemet sentiñ ouzhin, hag a-raok dimeurzh da noz e vezo ar Sant Pêr nevez e-lec'h n'emañ bremañ an hini kozh oc'h hirvoudiñ.

En deiz war-lerc'h, kerkent ha brallet an eil kloc'had a-raok an ofereñn-bred, Fañch en em gave en iliz. Tennañ a ra diwar e sichenñ ar paour kaezh Sant Pêr ha buan e kas anezhañ da c'hignol ar sekreteri. Kemer a ra avat mantell truilhennek ha kalabousenn ar sant kozh hag e wisk anezho; neuze e sav war e sichenñ. Erru e oa poent ! Rak setu Job ar marichal e vign ouzh ar c'hloc'h bras hag an dud krog da zont e-barzh an iliz. Mont a ra brav ar c'hyrie eleison, ar gloria ; ha, yao, an Aotrou Person er gador-brezeg, a-dal, eñn dirak Sant Pêr.

3 - Ne badas ket pell ar sarnon. evit klozañ avat, mouezh ar be-leg a grenva : "Sellit, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, sellit e peseurt stad mantrus, ironms, mezhus, emañ aze a-us deoc'h Sant Pêr, patron Plegad. Ha disul emañ pardon Pêr, Porzhier ar Baradoz. Rannet eo va c'halon ! Daoust ha chom a raio skornet hoc'h hini ? Evidon, ma vijen-me Sant Pêr, ne chomfen ket ur vunutenn ouzhpenn en iliz-mañ ! ". ( da genderc'hel )

I. GERRIOU AR GERIOU

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinnemet. ( a-istribilh, paeron, truezus, teg, klemmichat, antronoz, statur )

2 - Grit ur frazenn pe ziv gant ar ger "derv": arrebeuri hon ti a zo e koad derv. Ar moc'h a blij dezho mont da glask mez dindan ar gwez-derv.

Pa vez ur wezenn hepken, petra a lavarit ? un dervenn. Klaskit skouerioù all : mez, megen, krapouezh, krapouezhenn, gwiniñ, gwiniñhenn, haleg, halegenn, geot, ur c'heotenn, bleunv, ur vleunvern, plant, ur blantenn, alumetez, lusetezenn.

II. AR MENOZIOU.

- 1 - Displegit stad truezus ar sant kaezh.
- 2 - Perak e chome an delwenn nevez e Lanuon ?
- 3 - Petra a reas ar sekreter a-raok an ofereñn-bred ?
- 4 - Gant peseurt gerioù e klask an Aotrou Person teneraat kalonoù e barrezianiz ?

III. AR YEC'HADUR

Kentel. 1 - Mar goulemma diganeoc'h petra eo ur "ganerez" pe ur "gannerez", e vo diaes a-walc'h deoc'h respont. Moarvat e lavarot din diouzhtu: grit div frazenn gant an daou c'her-se.  
" Ar ganerez he deus ur vouezh vras "  
" Ar gannerez a walc'h mat an dilhad".

An daou c'her-se a zo heñvelsonioù.  
2 - Gerioù heñvelson e deus un distagadur heñvel, pe damheñvel, daoust m'o deus ur ster disheñvel hag alies ur skritur disheñvel: kanerez ha kannerez.

3 - Studiet hon eus endeo un nebeut heñvelsonioù. Dav eo dimp adlenn ar c'hentelioù-se: per, Pêr ( L.16 ) c'hwez, c'hwezh ( L.28 ) karr, gar ( L.32 ) kannañ, kanañ ( L.11 ) gwazh, gwaz ( L.15 ) choug, chouk ( L.19 ) eur, sur ( L.17 ) garz, garzh ( L.30 ) brezhonek, brezhoneg ( L.20 ).

Poelladennoù. 243 - Lakait ar ger dereat : karr (kiri), gar Yann a zo kouezhet eus e ...Lakaet ez eus bet dezhañ ur ...god. kanerez, kannerez, dammig a zo bremañ hep .....Va c'hoar a zo ur .....vat.

mat, mad (madou) Yann en deus graet ur boelladenn vat . Sant Erwan a reas kalz a ....d'ar beorien. c'hwez, c'hwezh ( c'hwezhañ ). Gant ar bleunv-se ez eus .....vat. Ar gwaz a zo golet a .....Ar binioù a zo ur heñveg sonerezh dre.....

gwaz (den), gwazh (stêrig), gwazh (gwashoc'h), gwaz (gwazi). Jobig a vo hep dile ur...Ur w...dour a dremen dre hol liorz. Poelladenn Yann a zo fall, met hini e vreur a zo gw...Va mamm he deus prenet ur...evit Bedelec. garz (garzed), garzh . Ar .....a zo en-dro d'hol liorz. Ar.....a vez drouk a-wechoù.

244 - berz (difenn) herañ Gouel hor skol en deus graet ....Pedet oc'h d'an sared a-b...an ozhac'h yaouank. mann (metra), man. Ar bagal-se ne oar ..... Er c'hoad bras hon eus destunet man.

IV. AR VERBOU : ar stummoù-hetiñ, verboù en -aat.

Kentel. 1 - Ar stummoù-hetiñ. Petra a lavarer alies pa veneger anv un den marv ? Doue d'e bardono ! Doue da bardono d'an anaon ! pe c'hoazh : Ra bardono Doue dezhañ ! Ra bardono Doue d'an anaon ! Evit hetiñ un dra bennak en Brezhoneg e c'heller implijout "ra" pe "da" dirak ar verb en amzer-da-zont . Taolit evañ ouzh ar pik-estlammañ .

2 - Lakait ar frazenn-mañ er stummoù-hetiñ : an amzer n'eo ket lous. Gant na vo ket lous an amzer !

2 - Verboù en -aat. Er verboù gant an dibenn -aat evel brasa-at, treuta-at, ar bennrann a zo brasa- , treuta- . amzer-vremañ : brasa-an, brasa-er, brasa , brasa-omp, brasa-it, brasa-ont, brasa-er. amzer-andremenet : brasa-en, brasa-es, brasa-e, brasa-emp, brasa-ec'h, brasa-ent, brasa-ed.

3 - An anv-gwan a zo : brasa-et, treuta-et .

4 - E trede gour an amzer-da-zont e kaver an daou stummoù -io , -y. Ar paotrig a vrasa-io , pe a vrasa-y.

Poelladennoù. 245 - Lakait ar frazennoù-mañ er stummoù-hetiñ: ar paotr a zo leal , ar plac'h a zo hegarat. ar skoliad a zo oberiant ar skolidi a zo kalonek ar bugel a zo didro.

246 - Gant ar pemp anv-gwan-mañ ijinit pemp frazenn o kregiñ gant : Gant na vo ket ..... gaouiat, pilpous, toueller, diegus, buanek.

247 - Displegit en amzer-vremañ hag en amzer-andremenet : Pa zebren e wella-an .

248 - Displegit ar frazenn-mañ en amzer-da-zont hag en amzer-beurdremenet : Pa sentin e fura-in P' en eus sentet, em eus fura-et .

V. AR GERIADUR : gwall-dechoù ha perzhioù-mat.

Kentel .1- Displegit ster an anvioù-gwan-mañ : gaouiat, pilpous, toueller, dichek, pizh, koufon, diegus, lezirek, buanek, brell, kudennek, taer, gwicareus, ourgouilhus.

2 - Klaskit lakaat keñver-ouzh-keñver ar c'hontrolsterioù-mañ gant anvioù-gwan an niverenn 1 : leal, habask, didro, izel, oberiant, laouen, poellek, kuñv, arboeller, kalonek, brokus, gwirion, didouell, hegarat.

3 - Savit anvioù gant anvioù-gwan an niverennoù 1 ha 2.

4 - Klaskit perzhioù-mat pe dechoù-fall person, sakrist ha parrezianiz Plegad.

Poelladennoù. 249 - Grit dre skrid an niverenn 2.

250 - Grit poltred Yann, ar skoliad mat, er gêr, war an hent, er porzh-skol, er skol.

LENNADENN 36 : SAINT PËR PLEGAD ( kendalc'h ).

1 - Ploum, ul laam e-kreiz an iliz ha Sant Pêr kuit d'ar pevar-lamm ruz. A-vec'h m'o doa un toullad paotred bet amzer da welout un dra bennak; ar merc'hed int, bodet izeloc'h eget ar gador - brezeg, o doa gwelet Sant Pêr o skarzhañ evel ul luc'hedenn. Div pe deir maouez a gouezhas semplet. Fañch a guzhas buan e druilhoù en ur torkad beuz e korn ar vered ha da redek ivez da heul an dud all. " N' ec'h eus ket gwelet dre balec'h eo set Sant Pêr, Fañch ?

- Va Doue, nam ! D'ar Pontou, marteze ! " An Aotrou Person a gave hir an amzer en e unan. Met Fañch, adalek ma kavas tu, a zistroas d'an iliz, ha bec'h d'ar c'hloc'h bras !

2 - Setu leun-kouch an iliz "Credo in unum Deum ! " , e tistag an Aotrou Person war an ton bras . Biskoazh krede ken entanet ne dregernas dindan bolzioù an iliz. Ken ma krene ar gwer .

3 - Fañch ar sakrist ne chomas ket da dortañ : ar plac' bras en e zorn , an dour o tiverañ en e gerc'henn, e reas tro an iliz. Teir gwech e rankas dont da zegas e gest d'ar sekreteri. Paour ha pinvidik, bras ha bihan, pep hini a roe e brof , kalz pe nebeut.

Ha setu perak ha penaos a-benn ar sul war-lerc'h Plegadiz o doa ur Sant Pêr nevez. Hogen abaoe den ebet n'en deus bet keloù diouzh ar Sant Pêr kozh.

( Ebnig-Penn-Ar-C'hoad, "Al Liamm", niv.42 )

I. STUDI AR GERIOU.

1 - Lakait gerioù all e-lec'h ar re islinennet. ( tec'hout, bodad, gortoz, donezon, fatiket, baot )

2 - Daoust hag ez anavezit ur ster all d'ar ger "skarzhañ" ? Marteze hoc'h eus ur skarz-ivinù, ur skarz-dent . Ha c'hoari-et hoc'h eus ur wech bennak "skarzhañ" ? ( tennañ kanetiniar eus ur c'hloc'h . )

3 - Diskouezit ho vreo'henn . Ur chadenn a zouger alies en-dro d'ar c'herc'henn .

4 - Gellout a ran lavareut !ur sul an eus tremenet er gêr, " pe c'hoazh : "Ur sulvezh an eus tremenet er gêr " . Klaskit stummañ gerioù all gant ar gerioù-mañ hag an dibenn -vezh : lun, meurzh, merc'her, yaou, gwener, sadorn, sizhun deiz ( devezh ), bloaz ( bloavezh ), miz, eur, abardaeg ( abardaevzh ), beure, mintin, noz, hañv, goañv, mare .

II. AR MENOZIOU.

1 - Perak eo tec'hout kuit an dud eus an iliz ?  
2 - Petra a reas Fañch gant e vilhad truilhennek ?  
3 - Piv a c'halvas an dud en-dro d'an iliz ?  
4 - Petra a ziskouez e oa bet mat ar gest ?  
5 - Daoust hag e c'hallfe ar gontadem-se bezañ gwir ? perak ?

III. YEZHADUR : an henvelsoù ( kendalc'h ).

Poelladennoù. 251 - mezh, mez ( en derv ), meaz . Er gwez-derv e kuituilher .... Yann en deus disantet ha bremañ en deus .... Tud ar c'hêrioù a gar mont da valz war ar nous ( paotr ), mouzhañ . Ur ... bihan a oa gant ar saout .... Arabat ouzh ar mestr-skol.



Noazh, noazout. Arabat ... d'an evned bihan. Ar c'honikled bihan a oa ... en o neizh.  
am bez, ur pezh. Yann en deus bet ur ... aval. P'am ..... sec'hed ez evan dour pe laezh.  
raz, razh (loenig). Er c'hrihol ez eus ... bras. An ti a zo bet gwennet gant .....

252 - seizh ( 7 ), seiz, seizi. P'renet em eus ..... kaier. An dilhad e ... a zo koustus. Tad-kozh a zo dalc'het war e wele gant ar .....  
laz, lazhañ. Difennet eo ..... al loened bihan dinoaz. Ar skolidi a zo bet ramet e daou ..... evit ar c'hoarioù.  
herzel, harzhal. Ar c'hi a .... adalek ma tigrer dor ar porzh. Ar gloued a ..... ouzh al loened da zont el leur.  
facutañ, fotañ. Yann en deus ... ar wezem gant e vuoc'hal. Mona he deus f... he fodad laezh.  
ur gouel, ur ouel. Pardon Sant Erwan e Landreger a vez ur g.... bras. Mammig a zoug ur ... war he fenn e kañv da dad-kozh.

253. ar c'houez (bugad), a gouezh (verb), gwez (gwezenn), gouez. An noz a ... war an douar. Mamma a ra he ... gant ur mekanik. An tigr a zo ul loen .... danjerus. D'an nevez-amzer e vez gwer ar .....  
laez (lein), laezh ( ar vuoc'h ), lez (bevenn). Ar vuoc'h du a ro kalz a .... Ret eo pignal d'al ... evit mont da gousket. Plijout a ra din mont da vale war ... ar c'hoad. Tad en deus poan en e l...  
ur werz ( ur ganaouenn ), ur werzh. Na zintin gozh he deus kanet ur ... gaer ha hir ! an ti-se a zo e g....

#### IV. AR VERRBOU : heuliañ ha leuniañ.

Kentel. 1 - Er verboù en -iañ ne vez miret an i nemet dirak a.e.o.  
E verboù e -niañ ha -liañ e troer an n da gn, an l da lh hep tro ma lammer an i.

2 - verb heuliañ.  
amzer-vremañ : heulian, heuliez, heuilh, heuliomp, heuilhit, heuliont, heulier.  
amzer-andremenet : heulien, heulies, heulie, heuliemp, heuliec'h, heulient, heulied.  
amzer-da-zont : heuilhin, heuilhi, heulio, heuilhimp, heuliot, heuilhint, heulior.  
amzer-dremenet-strizh : heulhis, heulhjout, heulias, heulhjomp, heulhjoc'h, heulhjont, heulhjod.  
doare-divizout : heulhfen... heulhjen... ( e pep gour )  
doare-gourc'hemenn : heuilh, heuliomp, heuilhit.

3 - ar verb leuniañ.  
amzer-vremañ : leunian, leuniez, leugn, leuniomp, leunhit, leuniont, leunier.  
amzer-andremenet : leunien, leunies, leunie, leuniemp, leuniec'h, leunient, leunied.  
amzer-da-zont : leugin, leugni, leunio, leuginimp, leuniot, leuginint, leunior.  
amzer-dremenet-strizh : leugnia, leugnjout, leunias, leugnjomp, leugnjoc'h, leugnjont, leugnjod.  
doare-divizout : leugnfen... leugnjen... ( e pep gour )  
doare-gourc'hemenn : leugn, leuniomp, leunhit.

Poelladennoù. 254 - Displegit er pevar amzer etin :  
Alioù mat va c'herent a heulian.  
Ar c'helorn a leunian.

255 - Displegit er pevar amzer etin :  
Da skoazellañ va nesañ e poanian. Ur soc'h a c'hovalian.

#### V. AR GERTADUR : ar savadurioù boutin er c'harioù.

Kentel. 1 - Pere eo ar savadurioù pennañ a gaver e pep bourc'h ?  
an iliz, ar maerdi pe an ti-kêr, an ti-post, ar skolioù,  
ar presbital, ar blasenn pe al leur-gêr, ar marc'had, ar vered.

2 - Pere a gaver er c'harioù brasoc'h ? ar prefeddi, an eskopti,  
ar mirdi, ar c'hoariva hag ar salioù-sinema, al lez-varn, ar burev-polis, an archerdi, burev ar maitouterezh.

3 - Peseurt diforc'h a zo etre straed ( ru ), bali, banell, trepas,  
ur straed-dall, ar riblenn ?

4 - Peseurt diforc'h a zo etre klabvdi, klinikenn ( ti-oberata ),  
ospital, ospital ar re gozh, ti-diskuzhañ, ti-kreñvaat ( prevantoriom ),  
ti-yac'haat ( sanatoriom ), ?

Poelladennoù. 256 - Ur wech bennak hoc'h eus bet gweladennet ur gêr vras. Displegit penaos ho poa bezjet, petra ho poa gwelet, klevet, santet ha graet.

# STAGADENNOU

## AR POENTADUR.

Studiet hon eus endeo an arouezioù-mañ :

ar poent : Y.1 , Y.3 , Y.4 .  
ar virgulenn : Y.25  
an tiredoù : Y.12  
an daouboent : L.8  
ar c'hlochedoù : L.8  
ar pik -estlammañ : Y.25 , Y.30 , V.35  
ar pik-goulennata : V.29  
ar varrennig-stagañ e dibenn al linennoù : Y.1 , Y.2  
al lizherennoù bras : Y.3 , Y.4

Poelladennoù nevez .

ar poent . 257 - Ur itron gozh he doa ur seran hag a gare kalz un deiz e kavas ar gaoued goullto aet e oa kuit al labousig gwenn an itron glac'haret-holl a roas da glevout e roje ur pezh agent real d'an nob hen degasje dezhi prestik goude,he mab bihan a zeu d'he c'haout gant ur c'hañz war e vrec'h

258 - Ar pesked a vev da gozh ur beked a dap betek kant hanter-kant vloaz komz a reer eus unan hag a vevas daou c'hant seizh ha tri-agent an eog,avat,ne vev nemet pevar bloaz ar gurlaz meur a vev kant vloaz ar vaot a vev daou c'hant hanter-kant vloaz ( "Marvailhoù ar Vretoned" )

259 - Bleiz Rouz ,ar c'hi mentek, a ouenn chas an Douar Nevez,aet da vroioù hanternoz Amerika gant ar glaskerien-aour,an deus kollet,ur pennad 'zo ,e vestr a gare lazhet eo bet gant an indianed ha bremañ aet da vat e gouez ,e klask ar c'hi e breizh evel bleizi ar vro gant ar diskar-amzer e tiskem ar c'hirvi-erc'h en traoniennoù,ma vo enno klouaroc'h an goañv ur pikol karv,e zaoulagad bihan fulc-ret o parañ war ar c'hi ,a vije bep tro pa destae hemañ ouzh e szout

260 - Bleiz Rouz a stagas d'e rannañ diouzh e dro-pell n'eo ket un dra aes da gas da benn harzhal ha gourlennat a reas dibouez e-tal ar c'hary-erc'h,pell e-walc'h dioutañ,avat,da c'hallout tec'hout rak an taolioù ker-niel ha treid n'helle ket ar c'hary treid kein da skilfoù naoniek Bleiz Rouz ret e oa dezhañ chom penn-ouzh-penn gantañ ha,bep gwech ma lamme warnañ d'e flastrañ,ar c'hi a rede skañv en e raok ken na skuizhe neuze daou pe dri zarv yaouank a zeus war sikour o blenier,hag e c'helle distreiñ adarre betek e dro-pell ( "Marvailhoù Loened" ).

an tiredoù . 261 - (Lakait an tiredoù en destenn-mañ ).  
Pa oan o klask se-setu ur plac'hig daouzek pe drizek vloaz,gwisket giz kër,o tastaat ouzh va famer :  
Viou a zo ganeoc'h ? emezi,an ur ober ur sell.  
Ya,emezon.  
Viou fresk ?

Ya 'vat,emezon .Mamm he deus lakaet anezho din ar baner.  
Ar plac'hig he doa un aer trist.Koulskoude e reas ur mous-c'hoarzh .  
Me a rank kaout viou fresk,emezi,abalamour d'am zad a zo klañv gant an droug-skevent.Mamm n'he deus ket gallet dont hiziv d'ar marc'had.  
Ha mamm,emezon, a zo diass ivez,ha dre se em eus ranket-me dont e kër.

ar pik-goulennata . 262 - ( Lakait ar pikoù en destenn-mañ )

- Pegement an dousenn emezi .  
- Pevar real ! emezon .  
- Pet dousen hoc'h eus .  
- Peder dousen .  
- Ne c'hellfec'h,emezi,lakaat anezho pevarzak gvenneg an dousen.  
- Peogwir eo c'hwi eo ! emezon ,kasit-i ganeoc'h !  
- Reiñ a iet anezho . emezi.  
- Ya 'vat ! emezon-me.

ar pik-estlammañ . 263 - (Lakait ar pikoù-estlammañ en destenn )

Ar paotr bihan a selle pizh ouzhin.  
- O mamm,emezañ,pren e amañ digantañ .  
- C'hwec'h real ? emezi,n'on ket sot a-walc'h.  
- O mamm,emezañ,peogwir eo klañv e vamm .  
- Te a ra'e ur marc'hadour,va paotr.  
- Mamm,henñzh am eus c'hoant . ( tennet eus "Marvailhoù ar V." )

## AR ROUEZIOU - DOARE - SKRIVAN.

Studiet hon eus endeo an arouezioù-mañ :

ar virgulenn-grec'h : Y.4  
an daou-bik : L.27.  
an tog-kognek : L.18 .  
an dildenn : Y.10 ( doare-uhelañ )  
V.24 ( an anv-verb )  
ar varrennig-stagañ : Y.26 ( an anvioù kevrennek.)

Poelladennoù nevez .

an dildenn . Yann a zo ar c'hentañ er skol.  
Pa labouran mat e vezan digollet gant va mamm.  
Ret eo bezan fur er skol.

264 - 1- Arabat ehom da ruzan war an hent. 2- Pa c'hoarian e tiwallan kalc'umat da douellan va c'hmaladed. 3- Yann eo an hini brasañ er skol.4- Pa savan diouzh ar beure e sikouran atav va mamm. 5-Me eo an hini koshañ,ha ret eo din bezan ivez an hini furan.

Pa welin e kredin. Ret eo din kredif.

265 - 1- Er skol eo ret sentin. 2- Arc'hoazh e savin abred.  
3- Ret eo din pledin gant va c'hanteliou. 4- An den lorc'hus  
a blij dezhañ en em veulin. 5- D'ar gêr ez in pa garin.

Al lizherennoù bras. (Laksit lizherennoù bras d'an anvioù divoutin)

266 - Brudet-bras eo en hon istor anv grallon, rous kornev, hag  
e konter diwar e benn marvailhoù ha lavaradegoù kaer. Bevañ  
a rae war-dro ar peapvet kanved goude hor salver, d'ar mare  
m'edo ar vretonec o tont e breizh. Grallon a renas e rouantelezh  
gant ur furnez dispar, kenteliet ma oa gant tri sant bras : sant  
kaourintin, sant ronan ha sant gwenole... Den ne ouezo biken petra  
a zo gwir, ha petra a zo faos en istor beuzadenn kêr-iz. N'eus  
forzh brav eo da glevout.

267 - Goude marv nevenoc, rous bras ar vretonec, a flastras ar  
c'hallaoued en emgann ballon, er bloaz 845, e vab erispoe a  
bignas war an tron. En em gannañ a rae kalonek da zifenn frankiz  
breizh. Pa varvas erispoe, salaun a gemeras ar gurunenn. Mervel  
a rae salaun, lazhet gant ur gall. War-lerc'h e varv, e voe tro an  
normaned da dagañ hor bro. Hor rous alam-veur o zrac'has e  
Kistreberrzh, e-kichen gwened, er bloaz 888. Lesanvet eo bet alan,  
abalamour da se, " tad ar vro."

268 - Ganet e voe brizeug e kêr an oriant er bloaz 1803, d'an  
daouzek a viz gwengolo. Eus iwerzhon e oa genidik e lignez.  
Deut e oant da vreizh e-pad an dispac'h a oa savet en iwerzhon  
er bloaz 1688. D'ar c'houlz-se, an actrou lemir, person Arzhanao,  
a rae skol d'un nebeut krennarded. Davetañ e voe kaset brizeug  
d'an oad a eizh vloaz.  
( pennadoù tennet eus " Marvailhoù ar V.")

#### KUDENNOU - DOARE - SKRIVAN.

an divvogaennoù. Lakait en toulloù ar gerioù a vank, hag en em  
gev ar roll anezho a-us d'ar poelladennoù.

269 - (riv, piv, div, liv, hiziv) . Yen eo .... ha ... am eus. P..a  
zeuy ganin da vale ? Peseurt  
... a zo gant an douar ? Ret on e Roazhon ... wech.

270 - (brev, atav, marv, tanav, divalav, ar c'hav) . A... e vez b... ar  
mor, morse ne vez  
d.... Ar stammenn-mañ a zo .... Ar .... a vez kriz dalc'hmat. Ar  
glau a vez klenket er....

271 - (rev, bev, tev, mezv, c'hwerv, kenderv) . Ne blij ket din an  
avalou .... N'eo ket  
brav bezañ .... Va zad-kozh a zo ... c'hoazh. Er heure-mañ e oa  
gwenn ar parkeier gant ar ... Ar vougenñ a oa ... Mab va zintin a  
zo va c'h....

272 - (faro, endep, mao, meno, sezo) . D'am .... ez eo un dra vat bezañ  
.... Ar paotr yaouank a oa  
gwisket .... N'eo ket yac'hus debrif re a .... Lennet am eus  
al levr-se.

273 - (garv, ur c'havr, kovevr) . War ribl ar stêr e weler ur... o  
peurif. Ar veistr a rank bezañ ....  
a-wechoù. Gwechall e kegined kalz gant listri ....

274 - (east, heol, heol, teod) . An ti-se a zo goloet gant ....  
An ..... a zo ruz. E-pad an ....  
e vez splannoc'h an ....

275 - (taol, sozañ, a-raok, paotr, penacs, laosk) . Ar vamm a rank  
.... ar predoù.  
Ar vugale a blij dezho staliañ an d... evit he sikour. Ar...  
bihan a yelo da vale gant e dad. C'hoant en defe da c'houzout  
pelec'h ha .... Kuitaat a ray ar gêr a-raok an noz. Gouriz da  
vantell a zo un tammig ....

276 - (ur gaouad, ur gaoued, ur gaouenn, taoulet, peour, yaou, faoutañ) .

Ur .... dour en deus hanter zistrujet an east. Bemnoz e teu ur  
.... da ganañ war ar siminal. Va breur en deus dastumet daou  
seran en ur ..... Atav ez eo un dizenor lavarout ur .... An  
avalou-se a zo ..... mat. Ret eo .... kef ar wezenn gant gennoù.

277 - (laer, kaer, taer, aer, sklaer, naer) . Arabat bezañ .... Ar  
c'hirri-nij a vale en...  
Nevenoc a voe ur rous ... Iliz Landreger a zo .... An heol a zo...  
hiziv. Dañjerus eo flemmadenn an .....

278 - (fae, pae, sae, esae) . Ar bugelig a vez gwisket gant ur...  
Arabat ober .... war an dud paour.  
Ret e vo din ober un taol .... Ar vicherourien ampart e c'hounez  
peurvuiñ ur ... mat.

279 - (abardaez, faezh, fraez, meez, rez, hiraezh) . An prezeger-se  
a gomz ....  
D'an abardaez e plij din mont da vale war ar ... Pa zistroan  
avat eus ur valeadenn hir e vezañ atav.... An divroad a soñj gant  
.... en e vro c'henidik.

280 - (maen, naet, kaerell, sel, kaezh) . Tremenet eo ar g.... dre  
glud ar yer, ha spontet he  
deus ar paour... loened. A-raok mont ouzh taol e rankan diskouez  
daouarn .... d'am mamm. Va breur bihan a zo fur evel un ....

heñvelsonioù . 261 - Yann a gan . Yann ha Ronan a gan .  
Yann... zo aet da vale gant e vreur. An hent .... ar gwez ... zo  
gleb gant ar glich. Yann ... Ronan ... gan hag ... c'hoazh war  
an hent. An nevez-smer ... zo o tont. Du, rous ... gwer eo ar  
maezioù war-un-dro ; glas ... gwenn eo an cabl.

282 - Displegit er pevar amzer eñ :  
Yann a gan laouen . Yann ha Ronan a labour.

283 - Kaer ez oc'h gant ho tilhad nevez . (verb bezañ)  
Gwisket em eus noc'h anv war ar c'laouenn . (perc'hannañ)  
Pelec'h oc'h eus mat ho zontet .

Pelec'h ez .... bet ? Lavarat ... eus din ho pos balsez dre Vreizh  
a-bezh. Gwisket .... eus ho mantell nevez, faro ez .... Salaouet em  
eus .... alioù. Perak ez ... chomet ken diwezhat ? E oan ... ober  
va foelladennoù. Atav ... eus un digarez bennak. En den dilu ez...  
Ret eo anzav ... eus en em sibabet diouz ar c'hentañ er c'hanstri-  
vadegoù. Mamm a zo ... sozañ ur porpart nevez evit he mab.

284 - Yann a gar a Yann . Gwenola a gar he mamm.

Yann en deus kollet ...galer.N'en deus,siwazh,urzh ebet gant ... ziankachoù-skol.Ret eo vo dezhañ selaou alioù ...vestr war ar poent-se.

Gwenola ...deus renket mat ...levrioù en ...ziretenn. Gwenola ...deus graet ivez un tamm kentel d'...breur.Hemañ en deus selaouet ...c'hoar gant kalz a evezh.

285 - En ur gemerout "Yann" evel ger-rener grit 8 frazenn gant ar gerioù-mañ evel renadennoù : kaier,tiretenn,paper,goumenn, gwareg,dorn,breur,mamm.

Grit 8 frazenn heñvel gant"Gwenola" evel ger-rener.

286 - Gwelet em eus ho ki war an hent . ( ho ki-c'hwi )  
Gwelet em eus o c'hi war an hent . ( o c'hi-int )

Gwelet em eus ...karr er vourc'h.An dud-se o deus kaset ...bugale d'ar skol.Perak hoc'h eus gwerzhet ...ti ? Hor mignoned o deus profet ...c'hi dimp. Labouret o deus start evit peurbaeañ ....zi.

287 - Klokait ar strollad-gerioù-mañ gant ar gerioù da heul ha savit 16 frazenn nevez :

Perak hoc'h eus gwerzhet ho ... ?

Hon amezeion o deus gwerzhet o..... .

( ki,tarv,porc'hell,givri,gwazi,drask,buoc'h,maout .)

ar verboù . 288 - Yann en deus kanet mat .

Gwenola he deus kanet mat.

Savit 5 frazenn en ur gregiñ gant : Yann en deus ....  
: Gwenola he deus ....

289 - Mammig .... deus prenet seier-skol nevez d'he bugale.

Yann ...deus bet ur sac'h-kein.Dec'h ...deus e gaset gantañ d'ar skol evit ar wech kentañ.

Ur sac'h-dorn ...deus bet Gwenola. Lavaret ...deus e rafe ur pennad c'hoazh gant an hini kozh. Renket ...deus an hini nevez en armelig he c'hambr.

290 - Pa ganez e plij din chom da selaou.

Pa ganes e plije din chom da selaou.

An heol a vez uhel en oabl pa sav. An heol a veze uhel en oabl pa sav. Pa richane an evned er c'hoadoù e kar.. mont da vale. Pa richan an evned en oabl e kar.. mont da vale. Pa labour... en ti-mañ e plije din mont da gomz ganit. Pa labour... e plij din mont da gomz ganit.

291 - Klaskit pegoulz ez implijer ar stummoù :

-omp -ont -omp -ont , -imp -int , -imp -int .

Displegit ar verboù-mañ er pevar amzer eñh,er lañ hag en 3de gour lies : Ed a hadomp ,ed a hadont .

A galon laouen e labouromp, a galon laouen e labouront.

292 - Pa vez brav an amzer e kan...-ni. Dec'h e oan ast da welout va breudeur pa labour...er parker. Pa walj... o bro a-nevez e voe leuniet o c'halon a levez. Pa labour...-ni e sikour...hor c'herent d'ken tro.

293 - Pa zeuv va zro e labourin-me er ger .

Pa zeuv da dro e labouri -te er ger .

Savit dek frazenn all gant ar verboù-mañ : naetaat an daolenn, skubañ an trepas,ober ar skactadenn,koarañ ar boteier, lufrañ an arrebauri.

294 - Ar c'hoazh ez i..-me d'ar ger . Labourat a ri.. evi skoazel-lañ va zad. Dont a ri...ganin ? Pa gari...e labouri... ha pa vi..skuizh e c'helli...ehan.Prestañ a ri...dit va c'hoarielloù .Pa vo schu an devezh e tiskouezhi...dit va levrioù ha va dastumad-timbroù.

#### K E M M A D U R I O U .

Dre zegouezh,pe a-ratozh, hon eus studiet ar c'hemmadurioù-mañ :

goude an anv gwregel	: Y.4
goude ar ger-mell	: Y.7
goude daou,div,tri,pevar	: Y.6
goude " a "	: Y.6
goude hanter	: Y.12
goude ar gerioù-perc'hennañ	: Y.17 ,Y.21,stagadenn,niv. 287.
goude holl	: Y.18
goude da	: Y.19
goude seul	: L.20
goude em,ez	: L.23

#### S T U M M O U F R A Z E N N O U .

Studiet hon eus ar stummoù-mañ :

seul vui...seul vuioc'h	: L.20
war va lerc'h	: L.23
em c'hichen	: L.23
moanoc'h-monañ	: L.29
arabat eo din...dav eo din....	: Y.29
frazennoù o kregiñ gant lavarennoù-sujañ	: Y.28

DISPLEGADURIOU AR VERBOU.

a-vremañ, a-ardremenet, a-drem, strizh A.da-zont, doare-divizout.

hadan	haden	nadis	hadin	hadfen
hadvez,	hades	hadjout	hadi	hadfes
had	hade	hadas	hadó	hadfe
hadomp	hademp	hadjomp	hadimp	hadfemp
hadit	hadec'h	hadjoc'h	hadot	hadfec'h
hadont	hadent	hadjont	hadint	hadfent
hader	haded	hadjod	hador	hadfed

anv-verb : h a d a ñ doare-gourc'hemenn : had, hadomp, hadit.

gouzon	gouien	gouezis	gouezin	goufen
gouzout	gouies	gouejout	gouezi	goufes
goar	gouie	<b>gouezas</b>	gouezo	goufe
gouzomp	gouiemp	gouejomp	gouezimp	goufemp
gouzoc'h	gouiec'h	gouejoc'h	gouiot	goufec'h
gouzent	gouient	gouejont	<b>gouezint</b>	<b>goufent</b>
gouzer	gouied	gouejod	gouezor	goufed

anv-verb : gouzout D.gourc'hemenn gouez, gouezomp, gouezit.

an	aen	is	in,	afen,
ez	aes	ejout	i	afes
a,ya	ae,yae	eas,yeas,	ay,aio,yelo	afe,yafe
eomp	aemp	ejomp	aimp	afemp
it	aec'h	ejoc'h	eot	afec'h
eont	aent	ejont	aint	afent
eer	aed	ejod	eor	afed

anv-verb : mont. d.gourc'hemenn : a,kae **eomp** **it,kit**.

gran	graen	gris	grin	grafen
grez	graes	grejout	gri	grafes
gra	grae	gras	gray,graio	grafe
greomp	graemp	grejomp	graimp	grafemp
grit	graec'h	grejoc'h	greet	grafec'h
greont	graent	grejont	graint	grafent
greer	graed	grejod	greor	grafed

anv-verb : ober d.gourc'hemenn : gra,greomp,grit.

an eus	am boa	am boe	am bo	am befe
ac'h eus	az poa	az poe	az po	az pefe
en deus	en doa	en doe	en devo	en defe ( he )
hon eus	hor boa	hor boe	hor bo	hor befe
hoc'h eus	ho poa	ho poe	ho po	ho pefe
o deus	o doa	o doe	o devo	o defe

anv-verb : kaout,endevoud. d.gourc'hemenn : az pez,hor bezet, ho pet.

on,	oan	boen	bin	beien
out	oas	boes	bi	befes
zo, eo, eus.	oa	boe	bo	befe
omp	oamp	boemp	bimp	befemp
oc'h	oac'h	boec'h	biot	befec'h
int	oant	boent	bint	befent
oar, eur	oad	boed	bior	befed

anv-verb : bezañ d.gourc'hemenn : bez, bezomp, bezit.

amzerioù-lec'hiañ ar verb bezañ :

amzer-vremañ : amaon, amaout, amañ, amaomp, amaoc'h, amaint, emeur.

amzer-ardremenet : edon, edos, edo, edomp, edoc'h, edont, edod.

amzerioù-boaz

bezañ

kaout.

amzer-vremañ

bezan  
bezez  
bez  
bezomp  
bezit  
bezont

am bez,  
az pez  
en devez  
hor bez,  
ho pez  
o devez

a.ardremenet

bezer  
bezen  
bezes  
beze  
bezomp  
bezec'h  
bezont  
bezed

am beze  
az peze  
en devez  
hor beze  
ho peze  
o devez.

# TAOLENNOU

NIV.	LENNADENN	GERRIOU	YEZHADUR	VERBOU	GERIADUR
1	Ar bugel disent.	goriñ -adenn	ar frazenn, al lizheren	amzer-vremañ verb.dibers.	an ti.
2	"	penn	silabennoù vogal.kens.	amzer-vremañ stum.pers.	an adtiez
3	Huñvre Yann al Lonker	kudenn gwall	an anv, bout.div.	amzer-vrem. stum.pers.	loened ar maeziou.
4	Al Lunedoù	gwiadifñ -ad	ar reizh ar c'hem.	amzer-da-zont	korf an den
5	"	verboù -ata,pav.	an niver	a.da-zont personel	ar skol
6	"	abeg,diga-rez,biken	an niveriñ	"	an ti-post
7	ar C'hanol	pezh, liester i	ger-mell	a.amdremen. dibersonel.	ar yec'hed
8	An Tan	rakger di, -us .	an diskouezañ, en ur	a.amdremen. personel	an tan.
9	"	kalon, -ek, -eg	an anv-gwan doareañ.	a.amdremen. personel	ar c'hoad.
10	"	anaoudek mous-	dereziou uheloc'h,uh.	a.dremenet strizh	an tiegezh ar vuhez
11	Per ar skol	kemm-predoù liest.di abarzh.	adwel.kent. 1,2,3.	a.drem.str. personel.	c'hoarioù ar vugale
12	"	hual,sparl talaroù verb.en a	adwel.kent. 5,6,7,8,9, 10.	A.Dremen.str. personel.	ar frouezh
13	Pemoc'h Yann ha Janed	mourroù	ar ger-ren.	adwelout bezañ,kaout	ar gouelioù
14	"	fomnus peuz,peur	renadennoù	adwelout hadañ,mont	diduamantou lenn,radio
15	"	gwaz,gwazh flamm	raganv, rag.gour	adwelout : gouzout,ober	diduamantou: sonerezh, c'hoariva.
16	Kouskerien vat .	louet,toull lies.-idi	ar perc'h-ennañ.	a.dremenet-amstrizh.	ar gambr -gousket.
17	An Tec'h	porzh, eur,eur	rag.perc'h. rag.diskou.	amzer - beurdremenet.	pevar c'hou ar bloaz.
18	"	lamm , kêr	an damzis-kouezañ	a.da-zont-kent.	ar skleri -jenn.

19	An Tec'h	labous, choug .	renadenn etñ ha dielñ	a.dremenet kent	ar gegin
20	Al louarn hag an Arz	seul vui. genacuek	ar rannig-verb	doare - gourc'hemenn	ar meuzioù
21	"	ar vestl tan	araogennoù st raganvioù	d.divizout dibersonel	ar binvioù
22	War Hent ar Foar		dielfennañ	d.divizout personel	ar stalioù
23	Un dreizhadenn iskia	ger.ar morren. lerc'h,	an anv, an anv-gwan	d.divizout personel.	ar peaked, evned-mor
24	"	ger.ar mor-mor-	an doare-verb ar stagenn	anv-verb dielf.ar verb	ar beajoù
25	Bazh Yann	niver-daou breac'h	galvadenn, anv stag-ha-	impl.anv-verb anv-gwan-verb	ar metaloù ijinerezh
26	Yeunig hag e Gazh	stumm-bih-liester.	anvioù-kevrennek	doareoù ar verb	loened ar versuri
27	"	kemar,klass,kerc'h.	islavarenn-stagañ	dielfennañ ar verb	labourioù ar merc'hed
28	Lip-E-Bav hag Alanig	c'hwez, c'hwez	lavarenn-dist lavarenn-doar ar stagelloù	stumm-nac'hañ	an Trevedoù
29	"	lagadenn skouln	rakverb arabet,dav	stumm - goulenata	al louzoù-kegin
30	"	pevar-biziek	ostlanmañ liest. -i	stumm - emober	ar bleunioù
31	Ar Pevar Soner	kludañ.. liest.-iz	heñvelsterioù kontrolster.	verboù-skonzell	an evned
32	"	kriadennoù-loened	rakgerioù	gouzout, gouvezout	al lez - varn
33	Olifant an Termaji.	lost,du-pod,-ier	ar gourfengerioù.	amzerioù-boaz	al loened gouar
34	"	rakverboù	rummadoù - gerioù	amzer.lec'h stumm-ober	amprevaned preñved
35	Sant Pêr Plegad	anvioù - stroll	heñvelsternioù	an doare da hetif	perzhioù-mat ha fall
36	"	skarzhañ kerc'henn	( id. )	heñviañ ha leuniañ.	en kêr,ar savadurioù.

### A R S T A G A D E N N O U

er poentadur	p. 106	Kemmaurioù studiet	p.111
arpeuzioù doare-skrivañ	p. 107	stummoù frazennoù	p.111
kudennoù doare-skrivañ		displegadurioù	
an divvogaennoù	p. 108	ar verboù	p.112
heñvelsonioù	p. 109	amzerioù-lec'hañ	p.113.
ar verboù	p. 110	ha boaz	

AR GERENT

hag AR VISTRI-SKOL

a lenn

# SKOL

Koumanant, 4 niverenn:

800 lur.

Pep niverenn : 200 lur.

hanter briz d'ar studierien .

embannet betek-hen :

- Rummad Kozh : Niverenn 1, " Ar C'hembraeg e Skolioù Kembre " .  
 2, " Kelennadur ar Frizeg " .  
 3, " Douaroniezh Vreizh", gant A. Guilcher, kelenner er Sorbonne.  
 4, " 300 Divinadell " .  
 5, " Rimadelloù hag Unangemoù " .  
 6, " Kudennoù ar Skolioù er Slesvig " .

- Rummad Nevez: Niverenn 1, " Skol Sant-Erwan " .  
 2, " Nedeleg en Breizh ", pevar fezh-c'hoari gant Jarl Priel. ( 350 lur )  
 3, " Danevelloù diwar-benn Skol Sant-Erwan ha Bleun-Brug Treger ( 1956, 1957, 1958 )

Nevez deuet er-maez :

an niverenn 4, " KONTADENNOU KOZH HA NEVEZ :  
 ul levr klok kentelioù yezhadur,  
 da gelenn ar Brezhoneg, kentelioù war ar verboù,  
 e Brezhoneg nenn-da-benn ! kentelioù war ar geriadur,

LENNADENNOÙ PLIJUS E BREZHONEG BEV !

600 lur . gant ar mizoù-kas 600 lur .

distao! d'ar skolioù .

5 skouerenn : 10 %  
 10 skouerenn : 20 % .

Kont-Red Post : Abbé A. Le Calvez, Rundauid, PLOUEZEC. C D N.  
 Roazhon, 1911 06 .

O BUGALE

hag

O SKOLIDI

a lenn

# WANIG HA WENIG

ur gelaouennig liesskrivet skeudennoù, kontadennoù,  
 gant skeudennoù e liv labourioù-derp, romantoù,  
 azozet gant tud a vicher . kenstrivadegoù a bep seurt

4 niverenn e-doug ar bloaz-skol 58/59  
 miz kerdù, miz genver, miz meurzh, miz mae.

PRIZ AR C'HOUMANANT : 150 lur.

KOUMANANTOU STROLLET, 5 d'an nebeutañ : 80 lur.  
 20 lur pep skouerenn eus ar gelaouenn.

kont-red post : Journal WANIG HA WENIG, PLOUEZEC, C D N.  
 Roazhon, 1705 96.

ar vistri-skol a zo pedet da zegemenn dimp e derou pep miz,  
 mar kemm niver ar goumanaterien, pet skouerenn a fell dezho.

ar c'houmanantoù strollet a vo paet miz ha miz .

Evit aessat hol labour, pedet eur d'implij ar follenig-mañ:

..... (. troc'hañ emañ ) .....

ANV.....SKOL.....

chomlec'h :.....sinatur :

a c'houlenn ma vo kaset dezhañ e-pad ar bloavezh-skol 58/59  
 ..... skouerenn eus pep niverenn WANIG HA WENIG.

Kas a ra .....lur, gwerzh an niverenn gentañ, d'ar c'hent-red post:

Journal WANIG HA WENIG, PLOUEZEC, C D N, Rennes, 1705 96.

wanighawenig wanighawenig wanighawenig wanighawenig wanigha

Gant ho skoazell e vo hep dale WANIG HA WENIG etre d'ac'har  
 an holl vrezhonegerien vihan.

levrioù e gwerzh e ti SKOL :

<u>evit ar re vihan :</u>	Merc'hig ar Rozenn	, 150 lur
	Paotr e Varv Glas	, id.
	Robinson Kruzo	, 180 lur.
	ar C'hemener Bihan	, id.
	ar C'hazh gant heuzioù	, 150 lur.
	Ister Meudig	, id.
	ar Goantenn e Koad	, id.
	Luduennig	, id.
	Kabellig Ruz	, id.
	Gwenn-Erc'h	, id.
<u>evit ar re vrasoc'h :</u>	An Ti Satanazet ,gant Jakez Riou,	350 lur.
	Labous ar Wirionez,	400 lur.
	Alanig an Tri Roue, Kobarz Hemon	400 lur.
	Marvailhou ar Vretoned,	250 lur.
	Lommig	350 lur.
	Marvailhoù Loened	250 lur.
	Biscousig ,Kazh an Tevenn,	150 lur.
	Tour ar Bleiz,	100 lur.
	All-Baba hag an daou-ugent laer,	160 lur.
<u>evit an dud vras :</u>	C'hoariva Brezhonek,	300 lur.
	Notemoù diwar-benn ar Galted kozh ,	800 lur.
	La langue Bretonne et ses Combats ,	350 lur.

distac'h 10 % pa brener evit 3 000 lur a levrioù, hep mizoù-kas.

POLTRED AN AOTROU BELEG PER-MARI L E C ' H V I E N ,

Person KEMPER-GWIZENNIG : 100 Lur.

+++++  
Kas an arc'hant d'ar c'hont-red:abbé Le Calvez, PLOUEZEC.  
Rennes, 1911 06 .  
+++++

!!!! " An oberenn bouezusañ a zo bremañ e Breizh:Skol Sant Erwan.  
Hor Yezh .

!!!! " Roit ho harp e pep doare d'un oberenn a zo gouest da save-  
teñ hor yezh hag hor bro ." AR BMD Keltiek .

!!!! Abaoe miz gwengolo eo addigoret ar skol vrezhonek ,

!!!! ha kaset hoc'h eus ho skodenn da

!!!! GEVREDIGEZH AR SKOL NEVEZ ?

!!!! C.C.P. Abbé LE CALVEZ, PLOUEZEC, C D N, Rennes 863 85

!!!! directeur-gérant : Abbé Armand LE CALVEZ, skol Sant-Erwan, PLOUEZEC.

!!!! imprimé par Hervé LEMEE, 32, rue du Père - Bourdon, à RENNES.

!!!! dépôt légal : 4-e trimestre 1958.